



HAL
open science

An arz e kelenn ar brezhoneg ha yezhoù bev all ar skolaj. Pleustriñ an arzoù hag ar yezhoù er c'helc'hiad 4

Ewen Tallec

► To cite this version:

Ewen Tallec. An arz e kelenn ar brezhoneg ha yezhoù bev all ar skolaj. Pleustriñ an arzoù hag ar yezhoù er c'helc'hiad 4. Linguistics. 2023. dumas-04291640

HAL Id: dumas-04291640

<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-04291640>

Submitted on 17 Nov 2023

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0 International License



Skol-Veur Roazhon II
UFR ar yezhoù
Kevrenn ar brezhoneg hag ar c'heltieg

Kounskrid Master

**An arz e kelenn ar brezhoneg ha
yezhoù bev all ar skolaj**

Pleustriñ an arzoù hag ar yezhoù er c'helc'hiad 4

Ewen TALLEC

Dindan renerezh Cédric CHOPLIN

Bloavezh 2022-2023

Trugarez

- Cédric Choplin evit bezañ renet ar c'hounskrid-mañ hag evit e alioù fur.

- Herve ar Bihan, Ronan ar C'hoadig, Stefan Moal hag Erwan Hupel, kelennerien e Roazhon 2, evit o c'hentelioù hag o alioù.

- Myriam Guillevic evit bezañ kemeret perzh er juri.

- An dud a vicher, kelennerien pe get, o deus respontet d'am goulennoù : Eric Gudenkauf, Herve Maubihan, Yoann an Nedeleg, Stéphanie Rolland, Maryline Fenner, Marie-Christine Le Goff, Edith Jarlegand, Claire Carré, Valérie Guenaff, Valérie Cuny, Carole Le Floch, Bruno Soquet, Séverine Even.

- Anne-Gaëlle Le Floch evit bezañ douget ac'hanon da vont war-raok.

- Anne Desmazières evit bezañ maget ma freder ha gouzañvet ac'hanon bemdez a-hed al labour-mañ.

Taolenn

Trugarez.....	2
Taolenn.....	3
Digoradur.....	4
1. Labourat ha priziañ dre varregezhioù evit broudañ doareoù disheñvel da c'houzout ha d'ober.....	6
1.1. Sich boutin ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù evit kelenn dreist moger an danvezioù.....	6
1.1.1 Mennozh ar sich.....	7
1.1.2 Taolioù-arnod ha skoilh an notenn.....	10
1.1.3 Adreizh 2015, mont pelloc'h gant ar barregezhioù.....	14
1.2. Framm europat boutin dave evit ar yezhoù (FEBDY), ur benveg a cheñch penn d'ar vazh.....	18
1.2.1 Ar pezh a oa a-raok 2015.....	18
1.2.2 E 2015, ar framman zo un doare nevez da welout kelenn ar yezhoù.....	21
1.3. Programmoù-skol boutin da bep yezh abaoe 2015.....	24
1.3.1 Yezhoù ? Evit ober petra ?.....	24
1.3.2 Ur programm ne glot ket atav gant ar yezhoù rannvro ha nebeutoc'h c'hoazh gant ar brezhoneg.....	26
1.4. Brezhoneg hag an arzoù, kevredadur an danvezioù dispriziet.....	28
1.4.1 Ar c'helenner e brezhoneg en eil derez, ur c'helenner a dalvez evit daou.....	28
1.4.2 An arzoù evit ar blijadur.....	30
1.4.3 Dav eo krouiñ e brezhoneg.....	32
2. Pleustriñ an arzoù evit pleustriñ barregezhioù yezh, testenioù war an dachenn.....	35
2.1. Perzh ar sevenadur hag istor an arzoù er c'helenn.....	36
2.1.1 Dizoleiñ ha studiañ arzourien hag oberennoù.....	36
2.1.2 Mont war an dachenn.....	50
2.2. Krouiñ er yezh tal.....	65
2.2.1 Implijout ar video.....	66
2.2.2 Tresañ, sevel ur skritell.....	87
2.2.3 Skrivañ evit ijinañ.....	91
2.2.4 Skorioù all evit pleustriñ barregezhioù all.....	96
Klozadur.....	108
Levrlennadur.....	110
Taolenn.....	124

Digoradur

Piv bennak hag a zo bet deskad er skol en ur mare bennak e-pad an daou-ugent vloaz tremenet en deus darempredet koulz ar yezhoù hag an arzoù. Moarvat en deus gwelet ha bevet amzerioù kentel disheñvel krenn hervez e oad avat, hervez e remziad dreist-holl. En deiz a-hiziv e vezer techet da soñjal emañ ar sevenadur hag an arzoù e pep lec'h ha gwir eo pa c'hell pep hini krouiñ hag embann e oberenn dirak daoulagad ar bed war internet. Ken gwir-all eo n'eus ket ezhomm da furchal e-pad pell evit diskoachañ evit netra un oberenn vrudet pe ul labourig a-feson bet enrollet er gegin ha postet war Youtube pe e lec'h all. Ar memes stadad e c'heller merzout diwar-benn ar brezhoneg pa 'z eus bremañ binvioù niverel ne oa ket anezho pemzek vloaz zo ha remziadoù nevez a vrezhonegerien prest ha barrek d'ober ganto ha d'o sevel pe d'o magañ.

Evit ar skol e oa bet an daou zanvez-se boued spered pe da nebeutañ eurvezhioù emvodoù da bep bazh skeul deus piramidenn aktourien an deskadurezh hag ar sevenadur. Marteze e vefe ret kentoc'h lavarout e oa pep tachenn war stern kement aktour a zo, kiriek d'e lodenn labour. Evit ar pezh a sell ouzh ar brezhoneg e ouzer mat an araokadennoù a zo bet er c'helenn pa daoler ur sell ouzh sifroù an niver a skolidi er rouedadoù skol e brezhoneg, daoust ma komprenn ivez n'eo ket trawalc'h c'hoazh. Pal ar stourmerien a vo desevel brezhonegerien varrek pa vo pal an ensavadurioù war meur a skeul respont d'ur c'hlemmvan demokratel. Evit a sell ouzh an arzoù e komzer aze deus ur vag o verdeiñ war hent demokratekaat ar sevenadur, ur pal e-touez palioù niverus ar skol republikan abaoe Talbenn ar Bobl moarvat. Er vag-se e kaver meur a gabiten. Lod a sach war-zu ar skol da unvaniñ ar vroad dre ar sevenadur ha da derriñ ar getthoioù hag an termenidigezh pa sach lod all war-zu ur skol dalvoudus evit enframmanñ pep hini er bed micherel deus e amzer o kelenn barregezhioù prizius pe da briziañ.

Abaoe tost ugent vloaz e komzer er sistem skol deus rol ar barregezhioù. E-keit-se en deus ar bed tro-dro cheñchet kalz ha pouez an doare-se da welout ar c'helenn en deus kresket evit dont da vezañ an doare nemetañ. War un dro eo niverusoc'h-niverusañ ar

gelennerien war ar brezhoneg ha brasoc'h brasañ perzh ar sevenadur hag an arzoù er c'helenn. Pal ar c'hounskrid-mañ a zo kompren pe liamm a c'heller ober etre an daou zanvez preder-mañ. Penaos e c'hell pleustriñ an arzoù e kelenn ar yezhoù sikour da vestroniañ barregezhioù yezh, sevenadur hag arz war un dro ?

El labour-mañ e ranker kompren ar c'helenn evel al labour a vez fardet gant ar gelennerien dirak o skolidi er skolaj, peurvuañ er c'helc'hiad 4. Evit kelenn e rankont lakaat e pleustr urzhioù ofisiel ma labouront dindan aotrouniezh an Deskadurezh Stad. Amañ ez eus kaoz deus kelenn ar yezhoù a gaver er skolioù eil derez e Frañs war-bouez ar galleg, yezh kentañ an darn vrasañ deus an dud. Komzet e vo dreist-holl deus ar yezhoù a gaver da zeskiñ e skolajoù Breizh dindan an anv Yezhoù Bev Estren ha Rannvro (peotramant LVER, Langues Vivantes Etrangères et Régionales e galleg). Pa gomzer deus sevenadur eo ret kompren ez eus daou ster d'ar ger-mañ hag an daou ster-se a vo meneget er c'hounskrid-mañ. Diouzh un tu e komzer deus ar sevenadur evel kultur, da lavaret eo « un hollad a zoareoù da soñjal, da santout, d'ober, stummet mui pe vui, bet desket gant meur a zen ha rannet ganto. Servijout a ra da sevel [...] ur gumuniezh dibar diwar hiniennoù » (Rocher, 1992). Amañ e komzer deus sevenadur Breizh. Diouzh un tu all eo ret kompren ar ger-mañ evel ar sevenadur « a-vras », da lavaret eo a-benn ar fin gouiziegezhioù pep hini a-zivout an Istor, an arzoù, ar skiantoù ha kement tachenn a zo. An arz a zo kalz diaesoc'h da dermeniñ avat pa cheñch ster ar ger gant an amzer, pa lakaer evel arz oberoù hag oberoù ne oant ket arzel a-raok, pa n'eo ket aezet atav ober an diforc'h etre an arzour hag an artizan hag a ra e arz evel ma tispleg Alain Séguy-Duclot (*L'art, en définitive*, 2021). Pe mod all e c'heller kemer hep farsal an termenadur pourvezet gant Vikidia evit ar vugale : « An arz a zo tout pezh a sell ouzh an doareoù da lavarout, ar vraventez, ar santimantoù, ar fromoù, hag all ». Moarvat eo an termenadur tostañ deus ar pezh a vo kinniget d'ar skolidi er c'hounskrid-mañ. Ar barregezhioù a zo amañ da vezañ komprenet er ster pedagogel, da lâret eo e kendestenn ar c'helenn er skol : « la proposition de décret conçoit la compétence comme un réseau de connaissances mobilisables en situation, nombreux sont aujourd'hui les pédagogues qui la conçoivent comme la capacité à mobiliser des ressources cognitives diverses pour affronter des problèmes complexes et inédits » (Crahay, 2016).

Petra bennak ma vo tro da gomz deus ar pezh a zo bet e vo displeget amañ dreist-holl ar pezh a zo hiziv an deiz hag an hent a vez heuliet gant ar yezhoù er skol a-hiziv e Breizh ha neuze e Frañs. N'eo ket pal ar c'hounskrid-mañ renabliñ tout ar pezh a vez graet er c'hlas gant ar gelennerien war ar yezhoù na tout ar pezh a c'hellfed bezañ graet a-zivout implij an arzoù er skolaj met kentoc'h en em c'houlenn penaos e c'hell an arzoù bezañ ur benveg ouzhpenn.

Da gompren penaos e ra ster sammadenn labour ar barregezhioù yezh hag ar barregezhioù arz ez eus ezhomm da glask kompren war beseurt tu e ya ar c'helenn pa gemer hent al labour dre varregezhioù. Memes mod e ranker ivez kompren deus pelec'h e teu binvioù kelenn ar yezhoù hiziv evit gallout o implijout en ur brogramadenn ha kompren petra a c'heller ober ganto. Dedennus eo neuze dielfennañ sekañsoù ha raktresoù evel ma vezont sevenet er c'hlas gant kelennerien war an dachenn. Se an hini eo a zispleg perak e oa bet aterset un nebeut tud a-vicher diwar-benn o fleustr deus an urzhioù ofisiel hag o labour gant an arzoù.

Da gentañ e vo klasket kompren penaos e vrouder doareoù nevez da c'houzout ha d'ober dre labour ar barregezhioù. El lodenn-se e tisplegor petra eo sich boutin ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù ha penaos eo un doare nevez da labourat dreist moger an danvezioù. Displeget e vo ivez penaos e oa bet cheñchet kelenn ar yezhoù gant implij framm europat boutin dave evit ar yezhoù. Gwelet e vo penaos e oa bet azasaet ar programmoù skol hervez ar binvioù nevez-se ha kinniget e vo ur sell war blas an arzoù hag ar brezhoneg el lojik-se. En un eil lodenn e vo sellet a dost ouzh ar pezh a ra ar gelennerien war an dachenn. Da gentañ e welor e implijont an arzoù evit ar perzh sevenadurel ha da c'houde e welor penaos e klaskont lakaat ar skolidi da grouiñ er yezh tal evit labourat barregezhioù yezh hag arz.

1. Labourat ha priziañ dre varregezhioù evit broudañ doareoù disheñvel da c'houzout ha d'ober

1.1. *Sich boutin ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù evit kelenn dreist moger an danvezioù*

1.1.1 *Mennozh ar sich*

Sich boutin ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù a renabl ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù mestroniet gant pep skoliad e fin e vuhez skol ret. Diazez programmoù pep danvez skol eo neuze daoust ma ne oa ket ken sklaer an traoù n'eus ket pell.

1.1.1.1 Penaos e oa degouezhet ar sich etre daouarn ar gelennerien ?

Da vare fin an eil brezel-bed, goude prantad ar Stad C'hall hag an ac'huberezh e oa bet ezhomm da adsevel ar vro war rivinoù kêrioù distrujet koulz ha war rivinoù an IIIe Republik. D'ar c'houlz-se neuze e oa bet klasket penaos bodañ an holl vugale tro-dro da dalvoudegezhioù boutin, en ur mod, adsevel ar Republik hag he skol. E 1947 e oa bet kinniget ar steuñv Langevin-Wallon, un danvez bet prederiet adalek 1944 gant an daou skiantour Paul Langevin hag Henri Wallon evit Kuzul Broadel ar Rezistañs. Ouzhpenn talvoudegezhioù kumun e klask ar steuñv-se termeniñ ur sevenadur kumun : « Nous concevons la culture générale comme une initiation aux diverses formes de l'activité humaine non seulement pour déterminer les aptitudes de l'individu, lui permettre de choisir à bon escient avant de s'engager dans une profession, mais aussi pour lui permettre de rester en liaison avec les autres hommes... » Daoust ma ne oa ket bet lakaet e pleustr o steuñv e oa labour an daou zen diazez ur preder hag a gemero muioc'h-muiañ a blas e breudoù birvidik ar bedagogiezh. Dreist-holl, pouezañ a ra war ur c'helell boutin, ur ger a adkavor er sich a-vremañ.

« Boutin » a vo c'hoazh ger pennañ reform René Haby e 1975. Gant al lezenn e vez krouet ur skolaj kumun d'an holl. An hent micherel a zeu da vezañ un opSION e pevare klas ha n'eo ket ken ar sistem ordinal. Evit poent eo dreist-holl ur preder diwar-benn ar framm. Ret e vo gortoz betek fin ar bloavezhioù 1980 evit kompren n'haller ker lakaat live ar skolidi da gresk ma ne lakaer ket ar fri er programmoù skol, da lavaret eo er pezh a vez kelennet er skolaj hag an doare d'en ober. N'eo ket trawalc'h neuze diskleriañ petra eo ar pal, ret eo c'hoazh displeg penaos e dizhout. Lezenn Jospin e 1989 a lak da dalvezout doareoù nevez evel an disheñvelidigezh pedagogel pe ar priziañ diagnostik. Aze eo kroget da vat ar preder tro-dro d'ar pezh

a vez graet er c'hlas ha d'ar sevenadur boutin. Hennezh n'eo ket termenet c'hoazh avat.

Bodad-labour Claude Thélot a ziverro ar preder-se e 2005 pa zisplego e ranker sevel ur sich diazezet war ar pezh a zo ret. Evit poent c'hoazh, ne lavarer ket hag e komzer deus gouiziegezhioù pe deus barregezhioù pe c'hoazh deus ar sevenadur boutin bet klasket e-pad pell. Lezenn an 23 a viz Ebrel 2005 a embanno ez-ofisiel ar pezh a ranko bezañ kelennet e pep klas gant palioù nevez : « La scolarité obligatoire doit au moins garantir à chaque élève les moyens nécessaires à l'acquisition d'un socle commun constitué d'un ensemble de connaissances et de compétences qu'il est indispensable de maîtriser pour accomplir avec succès sa scolarité, poursuivre sa formation, construire son avenir personnel et professionnel et réussir sa vie en société. » Setu e vez kinniget aze ur benveg nevez anvet sich boutin. Er memes tro e tegouezh e-barzh ar c'helenn un disparti etre gouiziegezhioù ha barregezhioù. Er sich kentañ-mañ e lakaer war wel meur a bal : Mestroniañ ar galleg, an elfennoù matematik, ur « yezh vev estren » hag an doareoù da gehentiñ, sevel ur sevenadur humanour ha skiantel. Pep skod a zo priziet hervez ar barregezhioù a zere bet renablet e dekred an 11 a viz Gouere 2006. Staliet e vez neuze un doare nevez da briziañ ar skolidi pe kentoc'h un doare ouzhpenn. D'ar c'houlz-se e vez sevenet c'hoazh programmoù-skol dekred 1995. Ne glot ket barregezhioù ha spered ar sich gant ar programmoù-se. Splann eo ar gudenn. E dekred an 28 a viz Eost 2008 e tispleger programmoù nevez. Enno, ouzhpenn ar gouiziegezhioù da labourat e kaver gouestonioù hag un displegadenn diwar-benn mont-en-dro ar c'helenn. Ar gouestonioù-se n'int ket c'hoazh barregezhioù sich 2006. War an dachenn eo diaes da lakaat e pleustr ha da gensoniñ ar programm nevez gant stumm kentañ ar sich.

Evit kompren ar skoilh ez eus marteze da glask cheñch skeul. E miz Meurzh 2000 e oa bet embannet diskleriadur kuzul Europa Lisboa, anvet diwezhatoc'h strategiezh Lisboa. En destenn-se e klasker sevel palioù ekonomikel nevez evit talañ ouzh ar c'hevezerezh etrevroadel. Klask a ra Unvaniezh Europa sevel ur gevredigezh hag un ekonomiezh diazezet war ar gouiziegezhioù. Pemp bloaz diwezhatoc'h e teu war wel erbedadennoù ar c'huzul diwar-benn ar barregezhioù diazez evit an deskadurezh hag ar stummadur a-hed ar vuhez. War ar memes live e lakaont ar skol hag ar vuhez vicherel. Ar

sich gall displeget e dekred 2006 a vo neuze troidigezh an erbedadennoù-se e sistem an deskadurezh Stad. An destenn ne vo ket ar memes hini avat ha sich 2006 a glask ur c'hempouez etre an dispac'h kinniget gant Unvaniezh Europa hag hengoun skol ar Republik ma 'vez bras plas ar gouiziegezhioù. Setu perak e voe digresket pouez ar barregezhioù e-keñver testenn an UE ha dreist-holl pouez ar barregezhioù liammet gant an emzalc'h anvet barregezhioù sokial. Setu perak c'hoazh e oa diaes da gelenn gant ar sich-se hag er memes tro gant programmoù 2008. Diskouez a reont bezañ enebet war meur a boent evel ar priziañ.

Lezenn an 8 a viz Gouere 2013 a gendalc'ho an hent davet un droidigezh deus erbedadennoù Europa. Enni e kaver un elfenn a vanke evit poent, an deskadurezh a-hed ar vuhez enskrivet en ul lezenn savet evit ar skol (mellad L122-5). Ganti e vo ivez staget ar c'hwec'hvet klas gant ar CM1 hag ar CM2 er c'helc'hiad 3.

Ar c'hemm bras a zeuio daou vloaz goude gant dekretoù miz Mae 2015 a ya d'ober ur cheñchamant e lezenn 2013. Gant Kuzul Uhel ar Programmoù e oa bet skrivet er memes tro ur sich nevez hag ar programmoù a ya gantañ. Ar programmoù-se a zo rannet peurvuañ dre gelc'hiad ha neket dre live-skol ha displegañ a reont gant peseurt danvez e vo labourer barregezhioù ar sich. Hiziv an deiz eo ar programmoù hag ar sich a vez implijet er skolioù hag er skolajoù.

Talvoudus bras eo kompren en doa bet kelenn ar yezhoù un istor un tamm disheñvel pa oa bet embannet barregezhioù framm europat boutin dave evit ar yezhoù e 2005. Abretoc'h e oa bet soñjet neuze dre varregezhioù evit kelenn ar yezhoù. Deus ar poent-se e komzor diwezhatoc'h.

1.1.1.2 Ar sich e berr gomzoù

Sich boutin ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù (SBGB) a 2006 a zo e bal termeniñ ar gouiziegezhioù, ar barregezhioù hag an emzalc'hioù diazez a rank bezañ mestroniet gant pep skoliad e fin e brantad skol ret, da lavaret eo e fin ar skolaj. Sañset e tispleg peseurt live a vo hini ar skolidi hag e warant un hent-skol efedus hag un enframmañ er gevredigezh. Diazezet eo tro-dro da seizh barregezh diazez : Bezañ mestr war ar galleg, bezañ gouest da implijout ur yezh vev estren, anavezout an elfennoù matematik pennañ ha kaout ur

sevenadur skiantel, gouzout ober gant an teknikoù kelaouiñ ha kehentiñ, kaout ur sevenadur humanour, bezañ barrek evel keodedour ezel deus ur gevredigezh ha bezañ emren en e labour. Ar gelennerien a ranke d'ar mare-se sevel o frogrammadur kelenn ha priziañ barregezhioù ar skolidi o kemer harp war ar SBGB. Programmoù skol 2008 a lakao dreist-holl war-wel div varregezh kreñv gwelet evel a-bouez bras : Mestroniañ ar galleg ha kaout ur sevenadur humanour. Evel-just e verk seurt dibab ur sell hag a zo kreizennet c'hoazh war Frañs, pell neuze deus preder an UE hag an OCDE. Ar sevenadur a zo kaoz anezhi aze a zo diazezet war ar skrid dreist-holl ha diskrivañ a ra reperiou ur sevenadur boutin d'an holl. Pep danvez a rank kemer e berzh evit sevel ar sevenadur humanour-se ha lakaat ar skolidi da vestroniañ ar galleg. Gant ar pezh a vez kinniget gant pep danvez e vez graet ur sammadenn evit kaout ar pezh a rank pep skoliad gouzout. Evit poent e c'hellfed c'hoazh diverrañ ar poent-se gant ar ger-stur « gouzout evit gallout ». Amañ e oa an dalc'h hag unan deus an diaesterioù bet merzet gant ar gelennerien war an dachenn.

Ar sich-se a oa nevez-flamm e keñver an doare da welout danvez ar c'hentelioù ha kalz kempleshoc'h eget an doare ma veze graet a-raok. Er memes tro ez eus bet un diouer a stummadur, dreist-holl pa ouzer eo techet ar gelennerien da chom stag ouzh an hengoun. Ha n'haller ket tamall anezho da vont a-enep an adreizh dre ma veze kinniget dezho ur sistem a oa chomet stanket e-kreiz an hent o virout gizioù gwechall gant doareoù arnevez. Er memes tro e chome kudenn ar briziadenn. Penaos priziañ barregezhioù rannet etre meur a zanvez ? Penaos priziañ ar skolidi e-keñver an hent o deus graet hag a chom dezho d'ober pa ne oa ket resisaet ar skeulioù progresivelezh er programmoù ? Ha dreist-holl, peseurt ster a c'helled reiñ d'un notenn sañset diskouez ul live kentoc'h eget ur brogresivelezh ?

1.1.2 *Taolioù-arnod ha skoilh an notenn*

Dav eo kinnig amañ ur skouer resis deus un taol-arnod. E penn-kentañ ar bloavezhioù 2010 e oa bet lakaet e pleustr ur raktres hep notenn er skolaj Itron-Varia Wenn e Teiz er Mor-Bihan. D'ar c'houlz-se e oa aozour ar c'hounskrid-mañ o kelenn brezhoneg hag Istor-Douaroniezh e brezhoneg er skolaj-se. Da gentañ e oa bet sevenet ar raktres en ur c'hlasad hepken, e 5^{vet} klas. Da c'houde e oa bet sevenet

e pep klasad a 6vet klas e-pad un nebeut bloavezhioù. Ur c'hlasad en deus bet tro da vont betek fin ar 4re klas gant ar sistem hep notenn.

Pal ar raktres a oa da gentañ tout klask resisaat an doare da briziañ ha mont war-raok war ar remediñ a-benn skoazellañ ar skolidi diaesterioù ganto. An eil pal a oa lakaat pep skoliad da vezañ kiriek d'e labour o lakaat anezhañ da gompren war betra e oa priziet ha neuze war betra e oa barrek pe get. Amañ e komzer deus barregezhioù.

A-raok kregiñ ganti en deus pep skipailh a bep danvez ranket sevel ur referañser a varregezhioù. Ret e oa d'ar referañser-se klotañ gant programmoù 2008 evit an darn-vrasañ deus an danvezioù ha programmoù an 8 a viz Gouere 2010 evit ar yezhoù. Evit programmoù ofisiel danvezioù a bep seurt e veze rannet pep sekañs deus ar programm e rummadoù, e tri rummad evit an Istor-Douaroniezh hag a vo kemeret evel skouer amañ : an ampartizioù (capacités), ar gouiziegezhioù hag an doare da gelenn an tem. Ar pezh a oa d'ober neuze a oa treuzfurmiñ an daou rummad kentañ e barregezhioù, ar pezh a rae un dek barregezh bennak evit ur sekañs hag ar barregezhioù-se a oa dre ret liammet gant ar sekañs resis-se ha neuze e oa ret ober kement all evit pep sekañs. En Istor-douaroniezh e oa neuze ouzhpenn kant barregezh da briziañ e-kerz ar bloavezh-skol ha pep barregezh a veze priziet da vare ar sekañs labourer er c'hlas nemetken, ur wech peurvuiañ. Kompren a reer aze ne oa ket tu implijout ar priziadennoù-se evit kompren penaos e oa ar skoliad war hent ar palioù roet gant ar programm ha dreist-holl penaos en em blase a-zivout an SBGB dre ma ne oa ket liammet dre ret barregezhioù an danvez gant ampartizioù ar sich. Er memes tro e ranker merzout e chome kudenn plas ar gouiziegezhioù, gwelet er sistem-se evel barregezhioù evel ar re all. Pa vezet kontet ur varregezh a ouiziegezh bet labourer gant ur skoliad evel gounezet, n'halle ket talvezout e oa gounezet da vat ha peurvuiañ ar pezh a veze desket dre an eñvor a veze ankouet nebeut amzer goude. Petra oa neuze ster ur pik gwer bet roet d'ur skoliad ? Daoust ha ne oa ket un doare all da lakaat un notenn ? Arguzenn bennañ al labour dre varregezhioù hag hep notenn a oa da remediñ d'ar pezh ne oa ket mestroniet ha da aotren pep skoliad da labourat hervez e lusk-eñ ha neuze da adober ar priziadennoù meur a wech ma oa ezhomm. Re strizh pe re resis e oa ar barregezhioù bet savet gant ar skipailh evit bezañ adlabouret

diwezhatoc'h e-pad ar bloaz. A-benn ar fin, ne veze ket priziet en-dro ha pep hini a jede pikoù gwer ha pikoù orañjez evit kompren petra oa live ar skoliad. Distro e oa ar skipailh e lec'h ma oa bet kroget gant al labour.

Un doare all a oa da brederiañ war ar memes pal. E 2007 e oa bet embannet al levrig hiniennel a varregezhioù (LHV). Ennañ e veze renablet ar pezh a ranke pep skoliad gouzout ha bezañ gouest d'ober da vare fin ar skolaj. Rannet e oa e teir fazenn hervez prantadoù ar vuhez-skol adalek ar skol-vamm betek fin ar skolaj. Ar bazenn ziwezhañ a oa hini ar skolaj. E fin an trede klas e veze roet d'ar skoliad un diell a renable barregezhioù ar SBGB. An testeni-se a zisklerie hag e oa bet gounezet ar varregezh-mañ-barregezh hag ezhomm a oa anezhañ a-benn tapout Diplom Broadel ar Brevet. Rummadoù an testeni a adkemere barregezhioù diazez ar SBGB hag e diabarzh pep hini e oa renablet barregezhioù ledan a-walc'h. Dav eo marteze kemer ur skouer evit kompren mat an dielloù. Ar pempvet barregezh diazez a oa hini ar sevenadur humanour war an teir diell. Er SBGB e oa renket diouzh un tu ar gouiziegezhioù, war un tu all an ampartizioù ha war un tu all c'hoazh an emzalc'hioù. Al lodenn gentañ a oa ur roll a demoù. An eil lodenn a oa verboù (en em lec'hiañ, lenn, ober ...) gant renadennoù d'o heul. An trede lodenn a ziskrive kentoc'h petra oa pal fetis ar varregezh diazez-se o tiskrivañ penaos e oa sañset cheñch emzalc'h ar skolidi er skol hag er-maez deus ar skol. An hevelep barregezh diazez e-barzh an LHV a ziskoueze bezañ ur roll a verboù (kaout, gouzout, lec'hiañ, lenn, bezañ ...) gant renadennoù-tra d'o heul. Aze e weler ne veze ket graet ken an diforc'h kement ha se etre ur ouiziegezh, un ampartiz hag un emzalc'h. War an testeni ne chome nemet daou verb, lenn ha kaout ha da heul pep hini e kaved verboù all evit o resisaat. Evit priziañ barregezhioù hep notenn ha tizhout ar pal bet displeget a-raok e ranked sevel barregezhioù fetis o kemer harp war an teir diell ofisiel. Er memes tro e ranked kenkoulz all en em harpañ war brogramm an danvez kelennet. Plas ar gouiziegezhioù a chome bras met ne oa ket kement hag a-raok, pezh a glote mat gant danvezioù diazezet war ar verb ober evel ar sportoù, ar matematikoù pe an arzoù met kalz nebeutoc'h gant danvezioù ma oa a-bouez gouzout evel an Istor-douaroniezh ha skiantoù ar vuhez hag an Douar. Moarvat e vije bet un doare gwelloc'h da sevel ar barregezhioù implijet er c'hlas met forzh

penaos e chome div gudenn : plas ar gouiziegezhioù hag an doare d'o friziañ war hir dermen hag an diouer a labour a-stroll evit mont dreist moger pep danvez.

Ar poent diwezhañ-se en deus diskouezet ne oa ket bet komprenet gant skipailh ar skolaj pal ar SBGB. Ne oa ket bet gwelet e oa barregezhioù diazez a veze labouret ha priziet e meur a zanvez er memes tro. Da skouer, ne oa ket bet prederiet er memes tro gant ar c'helenner war an Istor-douaroniezh ha gant ar c'helenner war ar galleg evit aozañ al labour war barregezhioù liammet gant an emzispieg dre skrid (arguzenniñ evit difenn ur savboent lakaomp). Pep hini diouzh e du en deus pep kelenner displeget d'ar skolidi ar pezh a oa d'ober hag ar pezh a oa gortozet. Peurvuiañ e oa disheñvel an displegadennoù koulz hag ar palioù. Memes mod, n'o deus ket en em glevet evit priziañ ar skolidi hervez kriterioù kumun. Ar memes skoliad a c'helle neuze gounit ar varregezh pe get hervez ar briziadenn a gemered e kont.

E miz Even 2016 e oa bet lakaet fin d'an taol-arnod pa oa bet lakaet e pleustr programmoù reform 2015. Daoust ma oa aet war-raok skipailh ar skolaj war ar preder tro-dro d'an doare da briziañ ar skolidi ha d'an doare da brientiñ ar skolidi d'ar briziadenn, ne oa ket bet tizhet ar pal penn-da-benn.

War an tu mat, hep an notenn e oa bet digresket anken ar skolidi e-keñver o disoc'hoù ha ne veze ket prederiet ken war stumm ur renkadur etrezo. Aesoc'h e oa bet displegañ d'ar skolidi penaos ober araokadennoù dre ma welent mat war beseurt barregezh o doa ur pik ruz pe ur pik gwer. Efedus e oa evit ar skolidi a felle dezho dont a-benn d'ober ar pezh a oa gortozet.

War an tu fall pe marteze kentoc'h e keñver ar pezh a zo bet c'hwitet, e c'heller menegiñ pegen diaes e oa d'ar familhoù kompren disoc'hoù o bugale. D'ar gelennerien e oa kement all a-wechoù pa veze klasket sevel poltred ur skoliad da vare ar c'huzul-klas pa ne oa keidenn ebet met ur bern pikoù a livioù disheñvel hepken. Techet e oa lod da implijjout dregantadoù a varregezhioù gounezet neuze, pezh a oa un doare all da lakaat ur sifr war zisoc'hoù ar skolidi ha neuze un notenn. Kelennerien 'zo o deus ivez bet ar santimant ne oa ket ken mennet ar skolidi. Dreist-holl, pep kelenner war-bouez un nebeut danvezioù o labourat gant programmoù dre ober o deus kavet diaes

sevel barregezhioù oc'h en em harpañ war ar programm hag er memes tro war ar sich. Evit echuiñ, ne oa ket bet torret ar mogerioù etre an danvezioù ha pep kelenner en deus kendalc'het da labourat hervez programm e zanvez-eñ hepken. En ur mod e oa bet ar santimant e oa an taol-arnod-se e-maez-stern.

1.1.3 *Adreizh 2015, mont pelloc'h gant ar barregezhioù*

Goude taol-esae an SBGB a 2006 hag e bleustradenn e programmoù skol 2008 e oa bet komprenet e oa un hent hag a vije kempleshoc'h eget ar pezh a oa bet soñjet. Ma n'haller ket reiñ re a dalvoudegezh da skouer taol-arnod skolaj Teiz abalamour m'eo ur skouer hepken, merzout a c'heller ober memes tra e oa bet diskouezet splann a-walc'h kudennoù an div destenn-se war an dachenn. Evel e oa bet gwelet e oa diaes lakaat unan da glotañ penn-da-benn gant eben.

D'an 8 a viz Gouere 2013 e oa bet votet al lezenn heñchañ ha programmañ adsevel skol ar Republik, anvet ivez lezenn Peillon diwar anv Vincent Peillon, ministr an Deskadurezh d'ar c'houlz-se. Honnezh a zo he fal respont d'ar c'hudennoù bet meneget abretoc'h. Kalz a cheñchamantoù a zegas. Da gentañ tout e kemer Kuzul Uhelañ ar Programmoù (KUP) plas ha karg Kuzul Uhel an Deskadurezh (KUD). Pal ar c'hKUD a oa reiñ e soñj diwar-benn ar programmoù skol hag an deskadurezh dre vras. Rol ar c'hKUP eo bremañ sevel programmoù da vezañ sevenet deus ar skol-vamm d'al lise. Da c'houde e vez rannet an deskadurezh e kelc'hiadoù deus ar c'helc'hiad 1 d'ar c'helc'hiad 4 ha goude ar c'helc'hiad termen. Da notenniñ a zo amañ emañ ar c'hwec'hvet klas er c'helc'hiad tri asambles gant ar CM1 hag ar CM2. Ar c'hKUP a embann ar programmoù o kemer e kont ar mont-en-dro dre gelc'hiad (Lelièvre, 2016). Ur sich nevez a zo ivez, Sich Boutin ar Gouiziegezhioù, ar Barregezhioù ha Sevenadur (SBGBS) a vez graet deus outañ. Mod all e vez krouet an ambroug personelaet evit labourat war varregezhioù ar sich e pep danvez. Savet e vez pevar hentad : hentad ar c'heodedour, hentad an dazont hag an heñchañ, hentad an deskadurezh arzel ha sevenadurel, hentad an deskadurezh d'ar yec'hed. An hentadoù-se a zo labourer er c'hlas gant pep danvez met kemeret e vez e kont ar pezh a ra ar skolidi war o amzer vak koulz ha war o amzer skol. Da vare un amprouenn dre gomz nevez evit ar breved e tispieg pep skoliad un hentad en deus bet tro da bleustriñ e-

kerz e vloavezhioù er c'helc'hiad 4. An amprouenn-se a c'hell bezañ tremenet e galleg peotramant en ur yezh all bet studiet er skolaj, e brezhoneg da skouer. An amprouenn a c'hell ivez lakaat war wel al labour bet graet e-pad ur prantad Kelenn Pleustrek etre Meur a Zanvez (KPMZ pe EPI e galleg, Enseignement Pratique Interdisciplinaire). Ar c'helenn moral ha keodedel (KMK) a gemer plas an deskadurezh keodedel.

Aze eo splann e cheñch kalz ar stern. Ar wech-mañ en deus klasket ar ministrerezh kempenn ur reform hollek, a-fet mont-en-dro da nebeutañ. Stumm ar skol dre vras ne cheñch ket. Broudet e vez al labour etre meur a zanvez gant an hentadoù, gant an ambroug personelaet ha gant an doare ma vez aozet ar c'helc'hiadoù memes. Klasket e vez mont dreist ar mogerioù o lakaat an dud a vicher da labourat a-stroll evel pa vez lakaet e plas ur c'huzul skol-skolaj nevez-flamm evit kreñvaat al liammoù etre ar c'hentañ derez hag an eil derez. Abalamour da se e oa bet lakaet ar c'hwec'hvet klas er c'helc'hiad 3 moarvat.

Daou vloaz war-lerc'h ez eus bet embannet programmoù nevez er skolaj, da vezañ lakaet e pleustr da vare an distro-skol e 2016. Programmoù 2015 a zo bet savet gant ar c'hKUP o kemer harp war an SBGBS. War-bouez un nebeut danvezioù evel an Istor-douaroniezh e vez displeget er programmoù petra 'vo ar palioù e pep danvez e fin ar c'helc'hiad 4. Ne vez ket kempennet ar programmoù dre vloavezh pe dre live-skol avat. Pep kelenner a rank sevel e brogrammadur gant ar gendestenn tro-dro dezhañ. En Istor-douaroniezh e vez c'hoazh displeget en un doare ezhpleg er programm peseurt temoù a vo studiet bep bloaz. Ouzhpenn terriñ ar voger etre ar skol hag ar skolaj, etre an danvezioù e vez klasket neuze terriñ ar voger etre al liveoù-skol e diabarzh pep kelc'hiad. Pouezañ a reer er memes tro war un doare nevez da welout an hent er skolaj o klask mirout ar skolidi a zoublañ ul live.

Pa seller mat e komprener e ya pep tra war ar memes tu : labourat dre varregezhioù ha priziañ anezho meur a wech ha war hir dermen. Ar skouer sklaerañ a zo marteze programm an arzoù neuziañ hag a zispleg penaos e ranker gwelout hag adwelout pep tem a-hed ar c'helc'hiad 4 oc'h ouzhpennañ bep tro resisadurioù pe o vont pelloc'h ganti bep tro. Mod-se e vez priziet ar skolidi bep bloaz war ar memes

barregezhioù o c'houlenn muioc'h diganto bep tro. En danveziou bet diazezet war ar gouiziegezhioù e vez graet un dibab kreñv evit peurechuiñ an tabut etre «gouzout» hag «ober». En Istor-douaroniezh da skouer e vez kinniget ur roll barregezhioù da labourat. Ar roll-se a c'heller diverrañ e-giz-mañ : En em lec'hiañ, prederiañ ha displegañ, en em ditouriñ, dielfennañ ha kompren, en em zisplegañ, labourat a-stroll. Gwech ebet ne vez meneget ar verb «gouzout» ar wech-mañ. Un daolenn all a zispleg dre vras, gant kalz a frankiz evit ar c'helenner, penaos e vo kelennet pep tem oc'h adplasañ an tem en ur gronologiezh traken. Setu da skouer penaos e vez kinniget ar gouiziegezhioù da labourat en tem kentañ e 5vet klas en Istor, Kristeniezh hag Islam, daou ved e darempred : «La période qui s'étend du VIe au XIIIe siècle, de Justinien à la prise de Bagdad par les Mongols (1258), est l'occasion de montrer comment naissent et évoluent des empires, d'en souligner les facteurs d'unité, ou au contraire, de morcellement. Parmi ces facteurs d'unité ou de division, la religion est un facteur explicatif important. Les relations entre les pouvoirs politiques, militaires et religieux permettent par ailleurs de définir les fonctions de calife, de basileus et d'empereur. L'étude des contacts entre ces puissances, au sein de l'espace méditerranéen, illustre les modalités de leur ouverture sur l'extérieur. La Méditerranée, sillonnée par des marins, des guerriers, des marchands, est aussi un lieu d'échanges scientifiques, culturels et artistiques.» (BOEN, 2020). Evit gouzout resisoc'h ar pezh a zo gortozet e ranker sellout pizh ouzh ar fichennoù ouzhpenn kinniget gant Eduscol. Ar rese n'int ket bet embannet er gazetenn ofisiel, ar pezh a ziskouez n'o deus ket kement a bouez hag ar programm. Ma n'int ket er c'hannadig ofisiel e talvez ivez n'eo ket ret heuliañ an urzhioù a gaver enno daoust ma vezont alioù fur peurvuiañ. Evit an tem meneget a-raok e kaver er fichenn ur c'hudennadur, ar pezh eo ret lakaat ar skolidi da gompren (ha neket gouzout), displegadennoù war ar plas a gemer an tem er vuhez-skol, ar gouiziegezhioù diazez da vezañ mestroniet (gant ar c'helenner ?) hag an doare d'o degas d'ar skolidi, ar reperiou kronologel da sevel (ha neket gouzout ?), mennozhioù evit sevel ur KPMZ. Splann eo neuze e oa bet tennet ar verb «gouzout» deus ar programm ha neuze deus palioù fetis hag ezpleg ar c'helenner. Gouzout a servij d'ober hag ar pezh a vo priziet a vo ar pezh e vez gouest ar skoliad d'ober ha n'eo ket ken ar pezh a oar.

Daou dra a zo da verzout neuze. Da gentañ e oa bet respontet gant ar ministrerezh d'ar gudenn bet gwelet gant skipailh skolaj Teiz pa glaske penaos priziañ dre varregezhioù ar pezh a oa sañset ar skolidi gouzout. Gwelet eo bet e teue ar gudenn deus un diforc'h a bal etre ar sich hag ar programm. Adalek 2015 e klot an div destenn ha ne vez ket priziet ken ar skolidi war o gouiziegezhioù. Da eil e vez lakaet war wel ez-ofisiel eo ar gouiziegezhioù un ezhomm a-benn gallout ober ul lodenn labour bennak ha n'eo ket mui ur pal. E-keñver kefridi ar skol a-benn sevel keodedourien hag o defe ur sevenadur kumun e komprener ivez eo ar geodedegezh-se ul lodenn labour da gentañ tout. Ouzhpenn bezañ eo ret ober.

Pa weler e oa bet heuliet ar preder-mañ gant un danvez ken diazezet war ar gouiziegezhioù ha ken strategel a-fet raktres keodedel ne vezer ket souezhet e mod ebet e vije bet ket kemeret ar memes hent gant ar yezhoù, danvezioù n'int ket bet meneget c'hoazh amañ. Evito eo bet disheñvel an istor ha kalz anatoc'h e oa an disoc'h dre ma ne servij ket da galz tra gouzout ur yezh a ne vezer ket gouest da vont ganti, d'ober ganti.

Da soñjal a zo ivez en doare da labourat ar barregezhioù ha d'o friziañ. Lojik ar sich a zo diazezet tro-dro d'ar pemp domani (pe ar pemp tachenn) hag an domanioù-se a zo boutin da bep danvez-skol, dreist ar mogerioù ez eont. An doare-se da welout al labour er skol a aotre neuze ar c'helenner da vont war dachennoù n'int ket e re er penn-kentañ, dreist arbennigiezh e genstrivadeg, da vogañ al Levrig Skol Unik (LSU, Livret scolaire unique e galleg). Pezh a zo, er meziantoù merañ (Pronote pe Ecole Directe lakaomp) e vez rannet c'hoazh ar barregezhioù dre zanvezioù ha pep danvez en deus e referañser a varregezhioù da briziañ. Daoust ma 'z eo posubl da bep kelenner mont war referañser an danvezioù all ez eus nebeut anezho hag a ra evel ma vo gwelet en eil lodenn ar c'hounskrid-mañ. Pa c'houlenner digant pep hini perak e chom dre ret en e referañser e tispleg da gentañ ne ouie ket e oa posubl pe n'en doa ket soñjet en dra-se morse. An darn vrasañ deus ar gelennerien-se a soñj dezho ivez n'int ket aotreet da vont war dachenn un danvez all peogwir n'int ket barrek a-walc'h. Lod o deus ar santimant n'eo ket reizh mont da briziañ barregezhioù hag a zo sañset bezañ priziet gant ur c'helenner all. Ha c'hoazh, depend a ra kalzig deus an danvez 'vez kaoz anezhañ. Peurvuiañ ne vez ket chalet ar gelennerien war an arzoù pa zeer war o

zachenn, disheñvel eo an traoù ma komzer deus ar gelennerien war an Istor-douaroniezh. Marteze ez eus aze da welout gant statud an danvez evel ma vo displeget el lodenn 1.4.

1.2. *Framm europat boutin dave evit ar yezhoù (FEBDY), ur benveg a cheñch penn d'ar vazh*

Kelenn ar yezhoù en deus heuliet un hent disheñvel avat. Abretoc'h e oa bet prederiet hervez lojik ar barrezhioù o soñjal e rank an deskidi bezañ gouest da implijout ar pezh a zeskont. Asambles gant ar preder-se eo deuet war wel un doare da briziañ o live yezh. E-kreiz ar jeu emañ ar Framm Europat Boutin Dave evit ar Yezhoù (FEBDY, CECRL e galleg, da lavaret eo Cadre Européen Commun de Référence pour les Langues).

1.2.1 *Ar pezh a oa a-raok 2015*

E lezenn 2015 e vez lakaet da glotañ ar sich gant ar programmoù ha gant ar FEBDY. Ezhomm a oa pa oa dija e pleustr ar Framm er skolaj abaoe Lezenn 2005, anvet lezenn evit dazont ar skol ha kelc'h-lizher 2006 o tisplegañ ar plan da nevesaat kelenn ar yezhoù bev estren. Ennañ e tisleger «Les mesures que comporte le décret n° 2005-1011 du 22 août 2005 relatif à l'enseignement des langues vivantes fournissent une assise réglementaire à ce plan. Le titre premier du décret consacre l'adoption du Cadre européen commun de référence pour les langues (CECRL) pour l'enseignement des langues dans les écoles et établissements secondaires publics et privés sous contrat. Les objectifs du cadre européen concernent tous les aspects de la communication langagière, l'oral comme l'écrit, sans omettre les contenus culturels qui doivent constituer l'entrée privilégiée dans les apprentissages ; une priorité doit cependant être assignée à l'oral (compréhension, expression, interaction) dès l'école primaire et le collège. Dans tous les cas, les contenus culturels constituent une entrée privilégiée dans la manière d'aborder les apprentissages» (Kannadig Ofisiel, 2006). Er c'helc'h-lizher e lavarar sklaer e prederier dre varrezhioù adalek an deiziad-se. Ennañ e veneger ivez ar FEBDY.

E 2001 e oa bet embannet ar framm gant Kuzul Europa. Disoc'h ul labour hir eo pa oa bet kroget ar preder tro-dro da zoareoù kumun da

gelenn ar yezhoù en Europa adalek 1971 o kemer e kont labour enklask kelennerien niverus en Europa a-bezh. D’ar c’houlz-se eo ar pal «mettre au point un système d’unités capitalisables pour l’apprentissage des langues vivantes par les adultes en Europe. [...]Le Groupe d’experts a abordé sa tâche dans une optique systémique. Il a entrepris d’aider les planificateurs et les administrateurs de l’enseignement, les enseignants et les apprenants - bref, tous ceux qu’intéresse l’apprentissage des langues - en leur fournissant les outils conceptuels dont ils ont besoin pour prendre des décisions rationnelles et raisonnables, qui aient quelque effet sur le processus d’apprentissage des langues» (Trim, 1976). Adalek 2001 neuze en deus Kuzul Europa ur rol a geflusker a-fet kelenn ar yezhoù. Pazennoù a zo bet el labour-se. Da gentañ e oa bet soñjet termeniñ ul live treuz evit yezhoù pennañ ar KEE evel ar saozneg evit kregiñ hag ar galleg ha yezhoù all da c’houde. D’ar c’houlz-se eo al live treuz a varregezh en ur yezh ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù a rank un deskad gounit evit bevañ en un endro estren o vont ouzhpenn ar pal dreistbevañ hag o vont dreist ar pezh a c’hellfe servijout d’ur veajig. Ret eo d’an deskad bezañ gouest da vont e darempred gant an dud ha kompren o doareoù da vevañ ha da brederiañ. Santout a reer mat aze ez eus ouzhpenn barregezhioù da c’hounit er pal-se pa vez klasket kreñvaat al liamm etre an Europiz da vare savidigezh Europa. En ur mod emañ dija ar sevenadur e-kreiz ar jeu. Kelenn ar yezhoù ha binvioù modern evel al live treuz a zo neuze ur benveg a servij da sevel ar peoc’h er c’hevandir hag an doujañs etre an dud. D’ar c’houlz-se dija e tispleged diazezoù nevez kelenn ar yezhoù hag a vo adkavet er framm : «trois principes fondamentaux sont à la base de la spécification des objectifs d’apprentissage, qui doivent être axés sur les besoins, centrés sur l’apprenant, fonctionnels. L’application de ces principes exige [...] l’analyse des besoins des apprenants [et] l’analyse du comportement langagier dans la langue (étrangère)» (van Ek, 1976). Ar FEBDY a zo neuze disoc’h ul labour hir ha stumm modern al lojik-se.

Ar memes pal a zo bet roet d’ar FEBDY e 2001. Ret e oa broudañ ar beajoù, an divroañ, an eskemmoù ha neuze e rank an dud bezañ gouest da gompren an eil egile. Evit se e ranker unvaniñ an doareoù da gelenn ar yezhoù a-benn mont war-zu ur c’helenn efedusoc’h diazezet war skiant-prenet ar broioù o doa labouret ar muiañ war an danvez.

Ret eo ivez broudañ kelenn ar yezhoù d'an holl en Europa ha gant Kuzul Europa ne vez ket lakaet war wel yezhoù zo e-keñver yezhoù all. Klotañ a ra gant Karta Europa ar yezhoù rannvro pe bihanniver, un destenn all bet savet gantañ. Stourm ouzh ar rakvarnioù hag an droukziforc'hañ a zo ur pal all hag a lak ar C'huzul da gemer e kont an elfennoù sevenadurel el labour war ar framm. Evit tizhout ar palioù-se e rank ar framm kemer e kont kendestenn pep bro evit ma vo aes sevel programmoù kelenn azasaet da bep hini. Lavaret e oa bet dija e 1976 gant van Ek hag a oa e penn al labour war al live treuz e oa ezhomm da zielfennañ palioù ar c'helenn evit an deskad. Hag evit gouzout hag e oa bet tizhet ar pal e ranker priziañ. Asambles gant ar FEBDY e teu neuze un doare da briziañ, liveoù kendoniet hag un testeniekadur a brou al live bet gounezet gant an deskad. Ar briziadenn a vo diazezet war ar pezh eo gouest an deskad d'ober ha neket war ar pezh ne oar ket pe n'eo ket gouest d'ober c'hoazh. Ur spered nevez a zo ouzhpenn pa vez lakaet an deskad e-kreiz ar c'helenn, aktour er c'helenn memes rak sañset e oar an deskad da belec'h e fell dezhañ mont, peseurt ezhommoù en deus evit mont war-raok.

Ar pezh a zo nevez a zo ivez ma vez desket evit ober. Ar poent-se a vo displeget dre ar munud un tamm pelloc'h met gallout a reer diverrañ en ur gerig ez eus kaoz aze deus oberoù peotramant taolioù-labour e vo gouest an deskad d'ober. Hervez an doare-se ez eus ezhommoù hag an ezhommoù-se a c'heller renkañ e rummadoù anvet ivez barrezhioù.

E 2005 e oa bet embannet programmoù skol nevez da heul al lezenn LOP. Enno e kaver an danvez a den d'ar yezhoù, estren nemetken. Evit ar wech kentañ ez eus kaoz deus ar FEBDY termenet e-giz-mañ «Le Cadre européen, grâce aux descripteurs de compétences qu'il présente pour chaque niveau, permet d'asseoir sur une base solide et objective la reconnaissance réciproque des qualifications en langue. L'étalonnage fourni par le CECRL permet d'élaborer des référentiels cohérents dans chaque langue et pour chaque niveau commun de l'échelle et aide les enseignants, les élèves, les concepteurs de cours et les organismes de certification à coordonner leurs efforts et à situer leurs productions les unes par rapport aux autres.» (Kazetenn ofisiel, 2005). En destenn-se e tisleger ivez ar pezh a dalvez pep live ar framm. Rannet eo kelenn ar

yezhoù e div bazenn, an hini gentañ o vezañ dre vras liveoù A ar framm hag an eil pazenn o vezañ al liveoù B. Evit ar yezhoù rannvro e vo ret gortoz 2007 evit kaout programmoù nevez avat ha 2010 evit ma vo embannet palioù resis ar c’hentelioù en eil pazenn. Ar stumm bet choazet a zo ul listennad taolennoù hag a renabl evit pep barregezh diazez ar stummoù hag an troiennoù eo ret d’ar skolidi mestroniañ e fin o hent skol. Merzout a reer neuze n’eo ket tre spered ar FEBDY daoust ma oa bet skrivet sklaer e ranker kelenn ar yezhoù rannvro hervez barregezhioù ar framm ha priziañ ar skolidi hervez e liveoù. Ul listennad temoù a veze kinniget ivez, lod o vezañ tost-tre deus temoù programmoù 2015. Lennadennoù a veze kinniget d’ar gelennerien ober gant o skolidi. Ne oant ket rediet. Resis-tre e teu ar programm da vezañ pa zispleg dre ar munud poentoù yezhadur da labourat gant ar skolidi. A-benn ar fin e oa bet amprestet digant ar framm lojik ar barregezhioù met ne oa ket c’hoazh azasaet lojik an deskiñ dre ober.

Setu kroget memes tra dispac’h kelenn ar yezhoù ha marteze muioc’h c’hoazh hini ar c’helenn hag ar priziañ dre varregezhioù. En ur mod e oa ar yezhoù danvezioù en a-raok war ar re all d’ar c’houlz-se, moarvat peogwir e heulient a dostoc’h preder Unvaniezh Europa war ar c’helenn evel m’e oa bet displeget el lodenn 1.1. Da verzout a zo ivez e oa bet krouet e 2008 un danvez nevez, danvez treuz ma oa, Istor an Arzoù hag a gonto kalzig neuze er c’hentelioù yezh ma ranker studiañ ar sevenadur a ya tro-dro d’ar yezh desket gant ar skolidi evel ma vo gwelet diwezhatoc’h. Da vezañ lakaet e pleustr adalek distroskol 2009 hag a gas d’un amproenn dre gomz nevez flamm evit Diplom Broadel ar Breded, amproenn a c’helle bezañ tremenet e brezhoneg pe e forzh peseurt yezh studiet er skolaj. An dispac’h a gaso da lezenn 2013, Adsevel ar Skol, d’ur sich nevez ha d’ur sell dre meur a zanvez ha lojik ar preder treuz.

1.2.2 *E 2015, ar framm a zo un doare nevez da welout kelenn ar yezhoù*

Un doare nevez ? Daoust ma oa bet lakaet e pleustr ar framm e pep skol gant lezenn 2005 ? A-benn ar fin eo marteze kentoc’h ur benveg nevez da ouzhpennañ d’ar binvioù all, koshoc’h. Techet eo ar gelennerien da vont war-zu an hengoun p’o deus divizet mont da gelenner war levezon ar gelennerien o deus gwelet e-pad o studioù pe o hent skol, plijet moarvat gant ar pezh o deus gwelet ha deuet da

vezañ barrek a-drugarez dezho ha d'o doareoù d'ober. Techet int ivez, dre ma vezont tud a-vicher arbennik war o danvez, muioc'h eget ar c'helennerezh a-wechoù, da glask mont don en o danvez gant ar skolidi. Da skouer e plij alies d'ar gelennerien war ar yezhoù kelenn binvioù ar yezh evit ma vint komprenet ha mestroniet gant o skolidi evel traoù da studiañ ha neket evel binvioù hag a respont d'un ezhomm. Setu en deus ar FEBDY cheñchet penn d'ar vazh en desped dezhañ e-unan ha pep bro he deus azasaet e implij hervez he hengounioù hag he doare da welout kelenn ar yezhoù. Hélène Buisson-Fenet a zispleg an traoù e-giz-mañ : «Le Cadre n'est pas un référentiel d'évaluation, pourtant il donne la possibilité d'une standardisation des compétences ; il n'est pas un programme, néanmoins il propose des objectifs dans la transmission ; enfin il n'est pas une méthode, mais il véhicule une conception didactique actionnelle au détriment d'une conception syntaxique de la langue, et induit donc des choix méthodologiques spécifiques» (Buisson-Fenet, 2014). Ar c'homzoù-se a zispleg mat-tre ar pezh a zo c'hoarvezet etre 2005 ha 2015 e kelenn ar yezhoù. Displegañ a reont ivez ar pezh a zo c'hoarvezet er skol dre vras.

E-kreiz pep tra emañ ar barregezhioù neuze rak aze emañ ar pal. Rankout a ra an deskad, ar skoliad, gounit barregezhioù ha dont da vezañ tamm-ha-tamm barrekoc'h-barrekañ. Hervez an doare-se da welout ez eus barregezhioù a c'hellont bezañ mestroniet gant un ampartiz a zepand deus an oad ha deus al live skol. Ar barregezhioù-se a zo diazezet war an ober. Evit ober en deus ezhomm an deskad da c'houzout, da vezañ, da vezañ ampart. Mod-se e teu ar ouiziegezh, an emzalc'h, an ampartiz da vezañ un ezhomm kentoc'h evit ur pal ma weler ar pal evel un ober a grou un ezhomm a vez respontet dezhañ dre c'houzout. Pa oa a-raok ar preder war an tu all, da lavaret eo : ur fed yezh a zo da studiañ a-benn bezañ anavezet hag implijet da c'houde ma vez ezhomm deus outañ. Kompren a reer mat aze eo an efedusted hag a gont ha n'eo ket sañset ar skoliad deskiñ traoù ne vo ket implijet gantañ peogwir ne respontont ket d'un ezhomm d'ober un dra bennak. Gwelout a reer aze an diforc'h bras etre lojik ar skol abaoe ar framm hag abaoe 2005 hag ar pezh a oa a-raok, bet displeget el linenoù kent. Ar framm a ginnig da gentañ ur vetodologiezh da briziañ an deskad pe kentoc'h e varregezhioù en ur yezh. Deus ar briziadenn e teu ar pal neuze ha deus ar pal e teu danvez ar c'helenn.

Kompren a reer neuze emañ pal ar c’helenn e disoc’h ar briziadenn. Kelennerezh ar yezh a rank neuze mont war-zu an efedusted da dizhout pal ar briziadenn. An doare ma vo aozet ar c’helenn ha kempennet ar c’hentelioù a zepand deus ar briziadenn. Ne vez ket priziet ar pezh a zo da c’hounit gant ar gentel met savet e vez ar gentel hervez ar briziadenn. Pezh a zo gwir war ar yezhoù abaoe ma oa bet lakaet e pleustr ar framm a zo deuet da vezañ ken gwir all war an danvezioù-skol all. A-benn ar fin e c’heller en em c’houlenn ha n’eo ket ar skol penn-da-benn hag he deus degemeret al lojik-se o krouiñ ur seurt hierarkiezh etre ar pezh a zo talvoudus hag ar pezh n’eo ket hervez ar briziadenn. Ar goulenn a zeu war wel a zo neuze hini natur ar briziadenn-se. Deus peseurt priziadenn a zo kaoz emañ ? Diplom ar breved ? Ar vachelouriezh ? Ar studioù goude-bachelouriezh ? Efedusted ar gwazour ekonomikel war varc’had an implij ? Marcel Crahay a seblant mont war an tu-se ivez : «Actuellement envahie par une idéologie économiste pour ne pas dire capitaliste, l’école tend à privilégier la rationalité instrumentale. Il n’est évidemment pas question de rejeter cette dimension, mais elle ne peut avoir le monopole sur la formation dispensée à l’école. Elle en cache même la moitié : la construction du sujet comme acteur qui, situé dans une société et une époque, revendique une marge d’autodétermination ; ce qui implique, pensons-nous, de se situer dans l’histoire pour mieux se positionner dans l’actuel» (Crahay, 2006). Da lavaret eo gant gerioù all, n’hall ket ar skol hag ar c’hentelioù yezh mont war-zu ar pezh a vo talvoudus d’un embregerezh hepken. An ezhomm a vo ivez da reiñ d’ar skoliad binvioù da gavout e blas-eñ, evel hinienn, er gevredigezh ha neket er sistem skol hepken hag en e briziadennoù.

Gallout a reer soñjal er memes tro n’eo ket dre zegouezh e oa bet krouet an Diplom Barregezh war ar yezh (DBY, da lavaret eo Diplôme de Compétence en Langue, DCL e galleg) e 2007. An diplom-mañ a zo bet krouet evit gwiriekaat ul live a varregezh war ur yezh bennak. Gallout a reer e dapout goude bezañ tremenet ur briziadenn ha honnezh a zo diazezet war varregezhioù ha liveoù ar FEBDY. A-fet yezh e kemer plas an diplomoù evel ar vachelouriezh hag ar breved ma ne vez ket skrivet al live er yezh-mañ-yezh da vare fin un hent skol. Evit an embregerezhioù e oa bet savet dreist-holl, a-benn implijout tud o c’houzout petra dalvez o live. Prouiñ a ra an DBY eo talvoudus ar yezhoù war ar marc’had hag ar fed ma oa bet

krouet an DBY en un nebeut yezhoù rannvro, brezhoneg en o zouez, a ziskouez e c'heller tabutal tro-dro d'ar pezh a zo pe n'eo ket talvoudus er vuhez micherel ha neuze marteze er skol. Plas ar sevenadur pe ar c'hultur hag e dalvoudegezh a chom direspont avat pa n'eo ket ken aezet termeniñ ul live a varregezh pe ar paliou zoken.

1.3. Programmoù-skol boutin da bep yezh abaoe 2015

Dispac'h al lezenn Adsevel ar Skol e 2013 en deus kaset da brogrammoù nevez penn-da-benn e 2015. N'eus ket met ar C'HMK ha na cheñch ket peogwir e oa bet cheñchet dija abaoe nebeut amzer. Displeget eo bet dija penaos e cheñch stumm ar skolaj ha doareoù ar priziañ ha neuze ar c'helenn. Poent eo neuze sellout a dost ouzh ar programmoù-skol a den d'ar yezhoù.

1.3.1 Yezhoù ? Evit ober petra ?

Ober. Setu emañ ar verb hag ar verb-skoazell e-kreiz ar jeu. Ur yezh a servij d'ober. Talvoudus eo pa vez graet ganti. Talvoudusoc'h eo c'hoazh pa reer traoù ganti. Adreizh ar programmoù e 2015 a ro d'ar gelennerien doareoù nevez d'ober skol. Deskiñ a ra ar skolidi gant doareoù all, war ar paper da nebeutañ.

An dra gentañ da verzout a zo n'eus ket ken a ziforc'h etre programm pep yezh kelennet e sistem skol an Deskadurezh Stad. El lodenn 1.2.1 e oa bet displeget penaos e oa renablet e programm pep yezh ar stummoù da vezañ mestroniet gant ar skolidi. Ouzhpenn-se e oa bet displeget e oa bet graet un diforc'h etre programmoù ar yezhoù estren ha programmoù ar yezhoù rannvro. Abaoe 2015 n'eus ket met ur programm evit ar yezhoù, boutin d'an holl. Ar paliou a zo paliou a live tennet deus ar FEBDY hervez ar mare ma oa bet kroget gant al labour war ar yezh-se gant ar skolidi. Evit ar gentañ yezh estren koulz hag evit ar brezhoneg en hentadoù divyezhek e rank ar skolidi tizhout al live A2 ha lodennoù deus al live B1 da vare Diplom ar Breved.

Pa seller pizh ouzh ar programm e weler, evel ma oa bet meneget a-raok, e vez lakaet ar verboù war wel hervez c'hwec'h barregezh ziazez : Selaou ha kompren, lenn, komz, skrivañ, kendivizout, dizoleiñ ur sevenadur. Evit labourat ar barregezhioù-se e vez kinniget d'ar skoliad taolioù-labour kemplezh (tâche complexe a lavarar e galleg) hag ar re-

se a rank bezañ nevez evitañ bep tro e-giz-se e tesk ar skoliad d'ober gant an degouezh. Hervez ar meno-se en deus ar skoliad lodennoù labour disheñvel d'ober, o labourat barregezhioù diazez disheñvel, a-benn gallout ober al labour-dibenn. Al lodenn ziwezhañ-mañ a vo priziet a-benn ar fin. Neuze e ranko yann skoliad selaou ha kompren, lenn, ha marteze ivez komz, skrivañ, kendivizout ha dizoleiñ ur sevenadur a-benn ober un dra bennak e fin ar sekañs. Al labour-dibenn en do ur ster ha fetis e vo. Spered ar pal oberel (da dreiñ perspective actionnelle) a zo neuze lakaat ar skolidi d'ober. Ar poent-se a zo tennet war-eeun deus ar FEBDY : «La perspective privilégiée ici est, très généralement aussi de type actionnel en ce qu'elle considère avant tout l'utilisateur et l'apprenant d'une langue comme des acteurs sociaux ayant à accomplir des tâches (qui ne sont pas seulement langagières), dans des circonstances et un environnement donnés, à l'intérieur d'un domaine d'action particulier» (CECRL, 2001). Aze e c'hell ar verb ober bezañ implijet ivez evit kenober p'emañ an darempred etre ar yezherien a-bouez bras er raktres.

Pezh 'zo, n'haller ket disoñjal ne vez implijet pep yezh evit ober kement tra a zo. Ma rank al labour-dibenn bezañ fetis ha gwirvoudel eo ret kemer e kont kendestenn sevenadurel ha sokial ar yezh. Da gemer e kont a zo d'ober ivez ma vo labouret gant ar skolidi war taolioù-labour o do d'ober diwezhatoc'h moarvat pa vo echu ar skol hag o studioù ganto. Aze e weler mat n'haller ket kinnig ar memes raktresoù e pep yezh pa ne vez ket graet ar memes tra en okitaneg hag en alamaneg, pa ne vez ket implijet ar yezh memes mod gant yezhourien c'henidik e brezhoneg hag e saozneg. N'haller ket neuze kelenn ar yezhoù-se er memes mod pe e ranker rakwelout ha raktresañ dazont implij ar yezh-se ha neuze he flas er gevredigezh, en un doare gwellwelus marteze.

Un doare all a zo da welout an taolioù-labour da reiñ d'ar skolidi eo hini ul labour teorikel, pelloc'h neuze deus ar pal oberel gwirvoudel. Un digarez a-feson eo koulskoude evit labourat barregezhioù treuz ha reiñ d'ar gentel yezh ur gwir rol metodologel. Fetis e teu da vezañ a-benn ar fin dre ma vez lakaet ar skolidi d'ober traoù o doa ezhomm d'ober er yezh-mañ-yezh e-pad o studioù. Sevel ha kinnig dre gomz un diaporama diwar-benn ar weladenn bet graet en ur mirdi a c'hell bezañ ur skouer deus al lojik-se. Da gentañ en deus ar skoliad gweladennet ar mirdi gant un heñcher. Ranket en deus ar skoliad

selaou ha kompren. Da c'houde en deus prientet ur steuñvenn verr hag e notennoù. Goude en deus savet e ziaporama. Skrivet en deus (ouzhpenn bezañ labouret barregezhioù liammet gant PIX). Dre gomz en deus graet un eztaoladenn. Komzet en deus. Tem an diaporama a oa labour un arzour brudet deus ar vro. Dizoloet en deus ur sevenadur. Klotañ a ra gant ar programm ha gant ar pal oberel. Ar pezh en deus labouret a servijo ivez d'ar gentel en ur yezh all pe d'un danvez disheñvel krenn, skiantoù ekonomikel lakaomp.

1.3.2 *Ur programm ne glot ket atav gant ar yezhoù rannvro ha nebeutoc'h c'hoazh gant ar brezhoneg*

Da bep hini d'ober e soubenn gant ar programm boutin neuze. Ar framm a vez roet gant ar FEBDY, gant ar sich ha gant ar programmoù met ledan a-walc'h eo evit bezañ azasaet da bep yezh. En ur ger emañ aze ar frankiz pedagogel.

Ar pal oberel a lak ar gelennerien da ijinañ degouezhioù ma raio ar skolidi traoù oc'h implijout ar yezh emaint o teskiñ. An traoù-se a zo sañset bezañ obererezhioù gwirion, tennet deus ar vuhez en diavaez deus ar sistem skol. En em c'houlenn a c'heller ober petra eo un degouezh gwirion a c'hoarvez evit gwir. Daoust hag e c'hoarvez ar memes tra e saozneg hag e brezhoneg ? Daoust hag ez eus tu neuze ijinañ un degouezh ma pellgomz ur skoliad d'un embregerezh a zo e labour dresañ an urzhiataerioù hag an diviz-se a vefe e brezhoneg penn-da-benn ? N'eus ket pell ez eus bet klevet un dra dedennus. Skignet e veze en ur sal sinema ur film e brezhoneg. A-benn ar fin e oa ar film-se hanter-c'hallek hag hanter-vrezhoneg pa ranke an dudenn bennañ mont d'an ospital hag aze e veze komzet galleg gant ar medisinour. Goude bannañ ar film e oa bet aozet ur gaozeadenn etre ar sevener hag ar mor a dud a oa e-barzh ar sal. Pep hini aze a oa brezhoneger. Unan bennak en deus goulennet digant ar sevener perak e oa bet lakaet tudennoù da gomz galleg er film pa oa tu implijout ar brezhoneg nemetken. «N'eo ket gwirvoudel e vefe kaozeet e brezhoneg gant ur medisinour en un ospital» en deus respontet ar sevener hag a oa ivez aozer ar senario. Dedennus eo ar respont-mañ peogwir e c'heller gwelout ar c'helenner evel ur sevener e penn ur raktres. Ur senario pedagogel en deus da sevel hag al labour dibenn a zo ken senarizet hag ur film pa vez ijinet un degouezh ha krouet un istor faltaziek tro-dro d'an degouezh-se. Feuket e oa an hini en doa

savet ar goulenn peogwir e talvez kement ha lavarout e ranke ar brezhoneg chom e plas ur yezh ne vez ket komzet e degouezhoù zo. Setu neuze e sav goulenn an doare ma c'heller kelenn yezhoù bihanniver gant ur programm hag ur framm bet savet evit yezhoù komzet gant ar muianiver.

War al lodenn sevenadurel e redier pevar zem da gempenn er c'hentelioù er c'helc'hiad 4 : Yezhoù, skol ha kevredigezh, beajiñ ha divroañ, kejañ gant sevenadurioù all. Ledan a-walc'h int evit bezañ implijet evit forzh peseurt yezh. Evit an hini diwezhañ avat, n'eo ket ken sklaer. Splann eo e oa bet savet ar programmoù evit yezhoù estren, da lâret eo yezh an amezeg. El lodenn sevenadurel deus ar programm e tispleger kement-mañ : «La construction des compétences langagières s'articule avec la construction progressive de la compétence culturelle à travers l'exploration de ces thèmes dans l'objectif de sensibiliser et d'ouvrir les élèves à la culture des autres, de leur apprendre à décoder et mettre en perspective des éléments de culture réciproques pour progressivement se projeter dans une dynamique de mobilité» pe «Découvrir l'imaginaire d'autres cultures : [...] repérer des sources d'incompréhension, de conflits culturels» (BOEN, 2020). Seurt frazennoù a ziskouez mat n'int ket bet skrivet evit ar yezhoù rannvro abalamour ma n'int ket «kultur ar re all» da gentañ tout. Mont da veajiñ a-benn anavezout ar re all a zo ur pal a-feson met anat eo ne gomzer ket aze deus ur veaj etre Gwened ha Montroulez (daoust ma vefe dedennus kennañ ivez). Memes tra, ne weler ket re vat deus peseurt tabut sevenadurel a zo kaoz aze.

E lec'h all er programm e komzer deus al liammoù d'ober gant ar broioù amezeg peogwir eo alies yezhoù ar broioù-se a gelenner er skol. Evit un nebeut yezhoù rannvro eo posubl moarvat pa gomzer deus an elzaseg, deus ar c'hatalaneg pe deus an euskareg lakaomp. Ha c'hoazh, talvezout a rafe eo an euskareg yezh amzeien an Euskared. Evit ar brezhoneg eo un afer all pa n'eus amezeg ebet ha dre ma n'eus lec'h all ebet ma komzer ar yezh. Aze e c'hellfed sevel un eskemm gant bro-Gembre met an dra-se a dalvezfe n'eus diforc'h ebet etre ur veaj e bro-Saoz hag e bro-Alamagn evit ur skoliad hag a zesk saozneg.

Daou zoare a zo da zielfennañ ar c'hudennoù bet displeget el linennoù kent. Da gentañ e c'heller soñjal eo un dra vat seurt programmoù liesyezh pa lakaont pep yezh da vezañ par an eil re

d'egile. Ne vez savet hierarkiezh ebet etrezo. Digor-tre eo ar programm ha pep hini a c'hell e seveniñ en un doare disheñvel. Lezet e vez ar c'helenner dibab peseurt mod e vo graet gant an temoù sevenadurel. A-fet labour war ar yezh eo memes tra. Pep kelenner a rank bezañ gouest da sevel ur brogresadenn a gloto gant ar yezh a gelenn. An doare all da welout ar pezh a zo bet lavaret eo ma ne oa ket bet savet programmoù evit ar yezhoù rannvro. Soñjet e oa bet memes tra ouzhpennañ «ha rannvro» goude «yezhoù bev estren» met netra ouzhpenn.

1.4. Brezhoneg hag an arzoù, kevredadur an danvezioù dispriziet

El lodenn 1.2 e tispleger penaos eo deuet ar c'helenn da vezañ ur redadeg war-zu an efedusted. Pa vez sellet ouzh ar briziadenn hag he disoc'hoù hepken e vezer techet da glask labourat gant ar skolidi ar barregezhioù hag a vo priziet e fin an hent, da vare al labour dibenn. Bez ez eus ar pezh a servijo hag ar pezh ne servijo ket, ar pezh a zo talvoudus hag ar pezh n'eo ket. A-benn ar fin e saver ur hierarkiezh etre ar barregezhioù ha dreist-holl etre ar pezh a sav ur varregezh, da lâret eo gouzout, bezañ ha bezañ ampart. Pa cheñcher skeul evit tremen deus an danvez-skol da skeul ar skol e c'heller merzout ar memes preder pa vez lakaet war wel danvezioù zo muioc'h evit danvezioù all. Ar soñj a-dreñv seurt preder a zo ez eus danvezioù talvoudus ha lod all n'int ket pe marteze nebeutoc'h. Ar c'helenner en defe ar chañs da gelenn daou zanvez-skol disheñvel a gompren buan n'en deus ket ar memes pouez e-pad ar c'huzul-klas hervez ar gasketenn a zo gantañ an deiz-se ha splannoc'h c'hoazh eo an traoù da vare ar c'hejadenoù gant ar familhoù. E-pad seurt emvodoù e teu ar familhoù da welout ar c'helenner war an Istor-douaroniezh pa ne reont ket gwall forzh ma ne welont ket ar c'helenner war ar brezhoneg. Ar gelennerien war an arzoù neuziañ ha war ar sonerezh o do ar memes santimant e kollont o amzer e-pad nozvezhioù mod-se.

1.4.1 *Ar c'helenner e brezhoneg en eil derez, ur c'helenner a dalvez evit daou*

Pa oa bet krouet ar C'HAPES brezhoneg e 1985 e oa bet krouet er memes tro ur stumm nevez a genstrivadeg. Betek-henn e veze goulennet gant emstriverien kenstrivadegoù ar c'helenn en eil derez

bezañ arbennik war o danvez hag o danvez hepken. Ar C'HAPES evit ar yezhoù rannvro a redi an emstriverien da dremen un amprouenn deus ur C'HAPES all a vefe matematikoù, saozneg, galleg pe Istor-douaroniezh. D'ar c'houlz-se e veze soñjet e oa furoc'h marteze reiñ d'ar gelennerien war ar brezhoneg un digarez da gelenn un danvez all evit gallout kaout ul leun-amzer en ur skolaj pa ne oa ket kalz eurvezhioù e brezhoneg d'ar c'houlz-se pe moarvat evit aotreañ ur c'helenner war ar brezhoneg da vont da vevañ ha labourat e lec'h all e Frañs.

En ur mod n'eo ket souezhus ur mont-en-dro e-giz-se pa ouzer e oa e-pad pell ar gelennerien war ar brezhoneg kelennerien war danvezioù all da gentañ ha deuet da vezañ kelennerien war ar brezhoneg da c'houde hervez an ezhommoù. Ha forzh penaos ne oa aotreegezh ebet e brezhoneg a-raok 1981 neuze n'halle ket ur c'helenner war ar brezhoneg bezañ arbennik ez-ofisiel war e zanvez ha dre ret e oa arbennik war un danvez all.

Hiziv an deiz n'eo ket tamm ebet ar memes kendestenn pa n'o deus ket an darn-vrasañ deus ar gelennerien a-hiziv anavezet ar prantad-se. Koulskoude eo chomet ar C'HAPES evel ma oa er penn-kentañ hag ez-ofisiel e c'hell pep kelenner war ar brezhoneg kelenn un eil danvez. E gwirionez eo ral ar gelennerien a zibab kelenn o eil danvez er skolaj. Gallout a reer soñjal memes-tra e vez kizidikaet ar re-se da brederiañ war meur a zanvez, da gompren e c'heller ober liammoù etre an danvezioù.

Er memes tro ez eus muioc'h mui a gelennerien war zanvezioù a bep seurt hag a gelenn e brezhoneg, ar pezh a vez anvet danvezioù anyezhel (DNL, discipline non-linguistique e galleg). Bep bloaz e vez kelennerien bet tapet ganto ar C'HAPES war o danvez hag en em stumm evit gallout kelenn o danvez e brezhoneg. Daoust ma n'int ket kelennerien war ar yezh emañ en o c'harg treuzkas ar yezh d'ar skolidi ha neuze e kelennont ar yezh dezho mui pe vui. Boaz int neuze da labourat war ar yezh ha war un dro un danvez all pe labourat war ar yezh o kemer harp war un danvez all zoken. Aze e c'heller ouzhpennañ ez eus dre ret ur preder war ar barregezhioù a vez labourret gant ar gelennerien-se pa c'hellont evel-just santout o deus an aotre da briziañ barregezhioù yezh ouzhpenn barregezhioù o danvez.

An danvezioù anyezhel a glot mat, dre ret, gant meno ar FEBDY, deskiñ ur yezh dre ober ganti, deskiñ evit ober ganti.

Pa seller ouzh an danvezioù anyezhel a vez kavet en eil derez er skolioù divyezhek e kaver a bep seurt, hervez ar c'helenner a c'heller kavout war an dachenn. Stank e vez kinniget kentelioù Istor-douaroniezh e brezhoneg, pezh a zo un dra vat pa ouzer pegen pouezus eo ar barregezhioù yezh en danvez-se. Skrivañ, lenn, komz, kompren dre gomz a ra kalz ar skolidi e-pad ur gentel Istor-douaroniezh. Stankoc'h-stankañ e kaver kelennerien war ar matematikoù e brezhoneg, bet desket ar yezh ganto goude o C'HAPES ha neuze arbennik war ar matematikoù. An danvezioù all a zo a-hervez. Kavet e vez ivez kelennerien war ar sonerezh, war ar sport, war ar skiantoù hag all, pep hini anezho brezhoneger arbennik war bep a zanvez, pep hini prest da gelenn ar yezh dre ober.

1.4.2 *An arzoù evit ar blijadur*

Ma komzer deus danvezioù a vroud barregezhioù treuz e c'heller soñjal en arzoù. Er c'helc'hiad 4 eo bras ha bihan pouez an arzoù er memes tro.

Diouzh un tu ez eus daou zanvez ma eo anat int troet war an arzoù, an arzoù neuziañ hag ar sonerezh. Ouzhpennañ a c'heller ober danvez Istor an Arzoù, bet krouet evit an distro-skol 2009 ha kelennet e pep danvez abaoe, da nebeutañ war ar paper. Betek 2015 e oa un amprouenn dre gomz er breved memes. Gallout a reer menegiñ ivez an hentad arzel ha sevenadurel bet krouet gant reform 2013 ha lakaet e pleustr abaoe 2016. Pep skol, skolaj ha lise en deus ouzhpenn palioù a-fet Kelenn Arzel ha Sevenadurel (KES, EAC e galleg, da lavaret eo Enseignement Artistique et Culturel) hag ul label a c'hell bezañ roet abaoe 2022 d'ar skolioù a ra strivoù war an dachenn-se. Evit mont war-zu al label a dri live-se ez eus bet krouet ur gefridi nevez, an atebeg arzoù ha sevenadur, a gaver e pep skol ha gopret evit e labour.

Diouzh un tu all e santer war an dachenn ne vez ket gwelet an arzoù evel ul lodenn sirius deus ar c'helenn pa vez roet div eurvezh hepken d'an danvezioù-se ha ne vezont ket kavet ken el lise warbouez en opsionoù a gaver el lise-mañ-lise. E kuzulioù-heñchañ fin an trede klas e jeder alies keidenn ar skolidi hep kemer e kont an notennoù en arzoù pa ne vez ket adkavet an danvezioù-se en eilvet

klas. Peurvuiañ e vez graet kement all gant an notennoù e brezhoneg hag e latin. Pa c'houlenner gant ar skolajidi o-unan peseurt danvezioù-skol eo ar re bouezusañ hervezo n'eus chañs ebet evit ma vo kavet an arzoù war ar podiom. Moarvat n'eo ket disheñvel diouzh tu ar gerent.

Evel-just hag evel ma oa bet displeget er pajennoù kent e komprenet ne vez ket gwelet an danvezioù-se evel alc'hwez marc'had an implij pe evel ur paseporzh d'ober studioù hir pe c'hoazh evel barregezhioù a zegaso pinvidigezh ha surentez. Da lavaret eo ne vezont ket gwelet evel talvoudus. Alies e c'heller klevout ar memes tra a-zivout ar brezhoneg.

Ma ne vez ket gwelet ar brezhoneg evel talvoudus n'eo ket neuze evit bezañ pinvidik ha brudet e kendalc'h ar skolidi gant ar brezhoneg e 6^{vet} klas. Peurvuiañ e teuont peogwir o deus c'hoant, peogwir e plij dezho. Setu neuze ur poent a-bouez bras. Ret eo, er skolaj, ober skol e brezhoneg gant plijadur hag evit ar blijadur pe kentoc'h hep disoñjal ar blijadur. Ma c'houlenner gant ar skolajidi e peseurt kentel o dez plijadur ez eus kalzig a chañs ar wech-mañ da welout an arzoù neuziañ war ar podiom. Kement-mañ n'eo ket souezhus peogwir e plij d'ar grennarded reiñ o soñj, lavarout, en em zisplegañ diwar-benn temoù tost deus outo. Plijout a ra dezho bezañ bountet-divountet ha kaout fromoù. A-benn ar fin e plij dezho ar pezh eo al labour arzel. Neuze ez eus ul liamm d'ober etre an arzoù hag ar brezhoneg. Gallout a rafed sevel ur « c'helenn pleustrek etre meur a zanvez » etre an danvezioù arzel hag ar brezhoneg met alies e vank kelennerien evit ober seurt traoù pa n'eo ket dre ret brezhoneger ar c'helenner war an arzoù neuziañ pe ar sonerezh. Daoust hag eo kondaonet ar c'helenner war ar brezhoneg da chom hep labourat war ar barregezhioù arzel neuze ? N'eo ket. Eñ an hini eo a zo o vont da sevel raktresoù a dapo ar barregezhioù-se ouzhpenn ar barregezhioù yezh.

Gallout a reer ouzhpennañ un elfenn ne gont ket evit netra. Labourat war ar sevenadur en ur gentel yezh a vez graet alies dre implijout, studiañ ha kompren dielloù, oberennoù, testennoù, ar pezh a zegas kalz d'ar skolidi. N'eo ket dibosubl lakaat anezho da grouiñ diwar ar pezh a zeskont gant an dielloù-se. Ur mod eo da dostaat ar pezh sevenadurel a vez studiet ganto diouzh o santadoù ha diouzh ar bed fetis. Un doare eo ivez da cheñch alies ar mod labour pa vez ezhomm ganto a-wechoù sevel traoù a-stroll hag a-wechoù all o-unan,

pa vo skrivet evit ijinañ pe komzet evit displegañ ur raktres. Ar pezh sevenadurel a vo dalc’het soñj deus outañ muioc’h ma vez liammet anezhañ gant un dra o deus bevet ar skolidi. Tro o do ivez ar skolidi da labourat barregezhioù Kelenn ar Mediaoù hag an Titouriñ (KMT pe EMI, da lâret eo Education aux Médias et à l’Information) oc’h ober o enklaskoù, pezh a c’hell bezañ un doare da ziskouez emañ ar brezhoneg el levrioù met ivez war internet.

1.4.3 *Dav eo krouiñ e brezhoneg*

Deskiñ dre ober ha deskiñ evit ober eo pennaenn kelenn ar yezhoù hervez ar FEBDY. Er yezhoù bihanniver ez eus just a-walc’h un ezhomm bras a dud evit ober gant ar yezhoù-se, mont e brezhoneg bep tro ma vez tu met ivez ober traoù gant ar yezh. Krouiñ e brezhoneg en deus ur ster disheñvel peogwir ez eus ar pezh a weler, a lenner, a glever e brezhoneg hag ar pezh n’eus ket, n’eus ket c’hoazh pe n’eus ket trawalc’h. An eil rummad a zo moarvat brasoc’h evit an hini kentañ. Evit magañ ijin ha preder ar vrezhonegerien e ranker reiñ dezho ar pezh a c’hortozont mod all ez eont da glask an dra-se e lec’h all, en ur yezh all. Ha seul vuioç’h a oberennoù e brezhoneg a vo kavet, seul vuioç’h a dud a vo kavet evit o gwelout, o lenn, o c’hlevout.

Ar grennarded a zo techet da verzout ar pezh a vank hag ar pezh ne zeu ket a-benn da antreal en o referañsoù sevenadurel. Muioc’h evit rummadoù all deus ar boblañs int levezonet gant ar mediaoù, ar mediaoù sokial dreist-holl hiziv an deiz. Krouiñ e brezhoneg war an dachenn arzel a zo un doare da ziskouez dezho abeg ar pezh a verzont hag an doare da cheñch penn d’ar vazh. A-benn ar fin eo ar pal ober ma vo ar brezhoneg o yezh dezho ha neuze diskouez int kiriek d’ar pezh a vez kavet pe ne vez ket en o yezh. Un doare eo neuze da zisplegañ dezho e rankont sevel ar pezh a fell dezho gwelout, lenn, selaou.

Barregezhioù a bep seurt a c’heller labourat ha priziañ dre an arzoù e kentelioù brezhoneg, hervez ar raktres. Liammet gant ar sport e c’heller ijinañ ur sekañs tro-dro d’an dañs. Klotañ a ra gant barregezhioù deus referañser an deskadurezh d’ar sport evel « Communiquer des intentions et des émotions avec son corps devant un groupe » pe « Verbaliser les émotions et sensations ressenties »,

« Utiliser un vocabulaire adapté pour décrire la motricité d'autrui et la sienne », « Répéter un geste sportif ou artistique pour le stabiliser et le rendre plus efficace », « Connaitre des éléments essentiels de l'histoire des pratiques corporelles éclairant les activités physiques contemporaines ».

Kanañ ha seniñ a c'heller ober ivez, da liammañ gant barregezhioù referañser kelenn ar sonerezh. Ouzhpenn selaou ha studiañ sonerezh hengounel a-vremañ pe a wechall, lenn ha studiañ pozioù ur ganaouenn e brezhoneg e c'heller krouiñ gant ar skolidi. Marteze o deus lod barregezhioù war ur benveg sonerezh a c'heller implijout er c'hlas ? Peotramant e c'heller krouiñ ur gavotenn gant sikour ar binvioù niverel. Evel just e c'heller skrivañ ur ganaouenn e brezhoneg evit adimplijout ar stummoù yezh bet labourer a-raok pe evit lakaat war wel fedoù sevenadurel bet studiet. Kement-mañ a c'hell bezañ enrollet ha rannet memes. Ar barregezhioù-se a gaver e referañser ar sonerezh evel da skouer war an dachenn « seveniñ raktresoù » « Définir les caractéristiques musicales d'un projet, puis en assurer la mise en œuvre en mobilisant les ressources adaptées. », « Interpréter un projet devant d'autres élèves et présenter les choix artistiques effectués. ». War an dachenn « selaou ha keñveriañ » « Analyser des œuvres musicales en utilisant un vocabulaire précis. », « Identifier par comparaison les différences et ressemblances dans l'interprétation d'une œuvre donnée. ». War an dachenn « kendivizout, arguzenniñ » e kaver « Porter un regard critique sur sa production individuelle », « Développer une critique constructive sur une production collective » pe « Respecter les sources et les droits d'auteur et l'utilisation de sons libres de droit ».

Diwar lenn ha studiañ al lennegezh pobl e c'heller lakaat ar skolidi da labourat ar skrid a ijin. Ma kemerer skouer ur raktres a lakfe ar skolidi da studiañ *Mojenn an Ankou*, he stil, he yezh, he c'hendestenn da gendivizout tro-dro d'an destenn ha da skrivañ un danevell moliac'hel da c'houde e labourer er memes tro barregezhioù lennegel a kavfed e referañser ar galleg evel « Lire des œuvres littéraires, fréquenter des œuvres d'art », « Élaborer une interprétation de textes littéraires » pe « Exploiter des lectures pour enrichir son écrit ». Ar barregezhioù-se ne vezont ket kavet e referañser ar yezhoù padal e c'hellont bezañ talvoudus kennañ en ur gentel yezh. Lakaomp e c'hellfed goude kinnig ul labour ma rank ar skolidi lenn ha c'hoari o

zestenn da vezañ enrollet evit lakaat peurest ar strollad (hag ar bed) da glevout an destenn-se. Ouzhpenn bezañ un digarez da labourat war an distagadur e ro ur ster d'al labour-se. Lakaomp c'hoazh e c'houlennfed diganto sevel un heuliad fotoioù a aergelc'h diwar an anvioù-gwan a gaver en o zestenn da lakaat en ur video ma klevfed ivez o mouezhioù bet enrollet. Aze o defe tro ar skolidi da labourat war varregezhioù a gaver e programm an arzoù-neuziañ evel « Choisir, mobiliser et adapter des langages et des moyens plastiques variés en fonction de leurs effets dans une intention artistique en restant attentif à l'inattendu », « Recourir à des outils numériques de captation et de réalisation à des fins de création artistique » pe « Prendre en compte les conditions de la réception de sa production dès la démarche de création, en prêtant attention aux modalités de sa présentation, y compris numérique ».

Tamm pe damm ar memes barregezhioù arzel a c'heller labourat war ur sekañs ma klever un testeni diwar-benn implij ar c'hoef gwechall ha studiañ un nebeut skouerioù koefoù ar vro tro-dro d'ar skolaj ha pelloc'h. Gallout a reer, en tem « kejañ gant sevenadurioù all » (e-giz-se e vez anvet ...), liammañ ar c'hoef gant an dilhad a sellout ouzh un diell video diwar-benn an doare m'en deus Paskal Jaouen krouet diwar an hengoun, pezh a ro un digarez da gomz deus arouez an dilhad hiziv an deiz. Da c'houde, diwar levezon labour P. Jaouen e c'hell ar skolidi krouiñ o c'hoefoù gant paper dre blegañ-diblegañ ha troc'hañ-didroc'hañ follennoù gwenn. Un dibunad a c'heller aozañ da c'houde evit diskouez al labour hag un displegadennig dre gomz evit ezteurel ar pezhioù a zo bet amprestet digant ur c'hoef pe egile. Ouzhpennet e vez neuze un nebeut barregezhioù tennet deus referañser an arzoù neuziañ evel « Identifier des caractéristiques (plastiques, culturelles, sémantiques, symboliques) inscrivant une œuvre dans une aire géographique ou culturelle et dans un temps historique », « Établir des liens entre son propre travail, les œuvres rencontrées ou les démarches observées », « Expliciter la pratique individuelle ou collective, écouter et accepter les avis divers et contradictoires » pe « Exploiter des informations et de la documentation, notamment iconique, pour servir un projet de création ».

Hag e-giz-se ez eus ur bern raktresoù da sevel o veskañ barregezhioù yezh ha barregezhioù arz evel ul labour gwerzaouiñ ma

aozer gant ar skolidi ur c'hoñkour war stumm ar pezh a vez graet e bro-Gembre. Pe c'hoazh mont da welout gwerennoù-livet iliz ar barrez ha labourat war skeudenn ar sant da geñveriañ gant harozed Marvel an XXvet kantved ha lakaat ar skolidi da sevel ur werenn-livet gant follennoù plastik liesliv o skeudenniñ o haroz pe un haroz a vo ijinet e istor, da ginklañ ar sal-klas pe ar skolaj. Pe simploc'h, diwar labour ar grafour Krank Du e c'heller lakaat ar skolidi d'ober tresadennoù evit skeudenniñ krennlavarioù ha troiennoù. Kement listenn a zo didermen hag ar skouerioù bet kinniget gant ar gelennerien a zispleg anezho en eil lodenn deus ar c'hounskrid-mañ a zo ken dedennus all.

2. Pleustriñ an arzoù evit pleustriñ barregezhioù yezh, testenioù war an dachenn

Evit ar c'hounskrid-mañ ez eus bet goulennet testenioù digant un nebeut kelennerien a-benn gwelout peseurt implij deus an arzoù a raent er c'hlas gant o skolidi. An darn-vrasañ deus ar gelennerien-se a oa kelennerien war ar yezhoù. Diwar ar re-se, tri a oa kelennerien war ar brezhoneg, tri a oa kelennerien war ar saozneg, tri a oa kelennerien war ar spagnoleg. Dav eo resisaat e oa bet goulennet testenioù gant muioc'h a dud met alies e soñje d'ar gelennerien n'o doa respont ebet da zegas war an danvez pa ne implijent ket an arzoù er c'hlas e mod ebet hervezo. Kelennerien war ar lizheroù o deus ivez kemeret perzh evit displegañ penaos e implijent barregezhioù arz en o c'hentelioù. Evit kompren ur raktres resis ez eus bet ezhomm da atersiñ ivez ur c'helenner war ar sonerezh. Memes mod, aterset ez eus bet un heñcher-prezegenner brezhoneger evit kaout ur savboent disheñvel diwar-benn ur raktres kinniget gant ur c'helenner.

Pal an atersadennoù a oa gouzout resis penaos e rae pep hini gant ar barregezhioù war an arzoù hag ivez kompren penaos e rae evit priziañ. Un digarez e oa ivez da c'houzout penaos e responte ar skolidi d'ar raktresoù liammet gant an arzoù. Degaset o deus ar c'haozeadennoù-se goulennoù nevez ha breudoù diwar-benn an doare da seveniñ ar programmoù ha spered an SBGBS.

Al lodenn-mañ a vo rannet e div lodenn. Da gentañ e vo ekspozet raktresoù ha kentelioù liammet gant ar sevenadur hag Istor an arzoù.

Da c'houde e vo displeget sekañsoù yezh a ginnig krouiñ oc'h implijout barregezhioù arzel. Pep lodenn a ginnigo ur sell war ar pezh a zo bet kontet gant ar gelennerien.

2.1. *Perzh ar sevenadur hag istor an arzoù er c'helenn*

Hervez ar programm hag ar fichenn bet embannet gant Eduscol (Eduscol, 2016) diwar-benn kelenn ar sevenadur e kelenn ar yezhoù e rank ar sevenadur bezañ e-kreiz ar sekañs : « Dans chaque langue étudiée et dans la convergence entre elles, la découverte culturelle et la relation interculturelle sont, en articulation étroite avec les activités langagières, des visées majeures du cycle. » Er memes tro, evel ma oa bet displeget a-raok emañ Istor an arzoù e-touez an danveziou etrediskiblezhel. Ouzhpennañ a c'heller ober en deus pep skoliad hentad an deskadurezh arzel ha sevenadurel (HDAS) d'ober e-kerz ar c'helc'hiad 4.

Ar raktresoù liammet gant ar sevenadur hag an arzoù bet kinniget gant ar gelennerien a c'heller rannañ e daou rummad. Da gentañ ez eus kentelioù a lak ar skolidi da studiañ oberennoù arzel hag arzourien. Da c'houde ez eus raktresoù o deus lakaet ar skolidi da vont war an dachenn.

2.1.1 Dizoleiñ ha studiañ arzourien hag oberennoù

2.1.1.1 La Casa Vincens en ur sekañs spagnoleg

Evit kregiñ e vo kemeret skouer ur sekañs kinniget gant Edith ha Carole, kelennerzed war ar spagnoleg er c'helc'hiad 4 war an tri live. E fin ar bloavezh pempvet klas e kinnigont d'o skolidi ur sekañs tro-dro d'an ti. O fennad a zo da vezañ liammet gant an tem «kejañ gant sevenadurioù all». Deus war-dro eizh prantad kentel e vez ezhomm evit mont da benn ar pennad-se. Kemer a reont harp war La Casa Vincens, un ti bet treset gant an tisavour Antoni Gaudí ha bet savet e Barcelona. An ti-se a c'heller gweladenniñ. Awenet eo ar sekañs-se gant an danvez a gaver en dorn-levr *¡Atrevete!* embannet gant an ti-embann Magnard e 2022.

Ar pal a zo bezañ gouest da ziskrivañ un ti. Da gentañ e sell ar skolidi ouzh ur video berr ma weladenner an ti. Heñchet e vez ar

weladenn e spagnoleg ha displeget e vez da betra servije pep pezh pa oa tud o vevañ en ti. Gwelet e vez pep estaj ha kinniget e vez an arrebeuri. Aze e vez labouret evit kompren dre gomz. Gerioù nevez a zo e-leizh hag ar gerioù-se a vo implijet e-kerz ar sekañs. Liammet gant ar video eo stank an naouturioù a-fet yezhadur. Klevet e vez verboù gant diftongennoù, verboù ar boazioù. Er sekañs e vez labouret dreist-holl war ar verboù evit en em lec'hiañ hag ar verb bezañ (estar) hag ar verboù-se a vo da vezañ implijet da vare al labour dibenn.

Ar sekañs a zo ivez un digarez da zeskiñ un nebeut traoù diwar-benn un arzour a-bouez e Katalonia. Roet e vez d'ar skolidi ur buhezskrid berr e spagnoleg gant nebeut a zeiziadoù a-zivout Gaudí. Goude e tiskouez Edith d'ar skolidi ur video e galleg diwar e benn. Edith a zispleg e tibab ur video e galleg peogwir eo re izel live ar skolidi evit poent evit diskouez dezho ur video e spagnoleg diwar-benn un danvez kemplezh. Tennet eo ar video deus *Un Jour, une question*, un abadenn hag a vez skignet war France 5. Ar video a zo bet adkemeret war al lec'hienn bedagogel Lumni. Ar video a zo un digarez da grouiñ ul liamm etre ar gentel hag ar pezh a anavez dija ar skolidi rak niverus eo ar re yaouank hag a zo bet dija e Barcelona gant o familh. Alies o deus traoù da gontañ neuze diwar-benn ar Sagrada Família pe ar Parc Güell. Komzet e vez neuze deus ar pezh a ya d'ober oberenn Gaudí (mozaikennoù, livioù implijet ...). Al lodenn-se a vez graet e galleg war stumm un diviz etre ar gelennerez hag ar skolidi ha liammet eo gant al labour war Istor an arzoù hag an HDAS. E fin ar sekañs ne vez ket priziet al lodenn-mañ avat ha ne vez ket renablet al labour-mañ en ur roll bennak a-zivout an HDAS.

Ul liamm a vez graet gant al labour dibenn hag a vo displeget diwezhatoc'h. Edith a zispleg d'ar skolidi ez eus un teñzor er Casa Vincens ha displegañ a ra dezho dre gomz pelec'h emañ. Ret eo dezho derc'hel soñj deus anv pep pezh hag an arrebeuri evit kompren he displegadennoù a-benn kavout e peseurt pezh emañ. Ar skipailh en deus kavet da gontañ e oa aet ar maout gantañ. Pep skoliad er skipailh-se a c'hounit pep a verk-pajenn bet savet gant Edith en a-raok o skeudenniñ monumantoù brudetañ Barcelona. Ar boelladenn-se a vo implijet en-dro e fin ar pennad pa vo ret d'ar skolidi krouiñ gant ar pezh o do desket e-kerz ar sekañs.

El labour dibenn e sav pep skoliad un ti graet gant paper gant teknik an origami. Ouzh ur video e spagnoleg e sellont evit kaout an urzhioù da sevel o zi. Kinklañ a reont an ti o deus savet o klask amprestiñ stil Gaudí. Kuzhat a reont un teñzot en ti o deus savet. Un destenn o deus da skrivañ evit displegañ da Edith pelec’h emañ an teñzor. En destenn-se e lavaront an hent eo ret kemer en ti evit e gavout. Implijout a reont neuze an naouturioù bet desket er sekañs. Priziet e vez al labour-se e-keñver o barrezh da skrivañ.

Pa reer ur bilañs ganti e soñj da Edith eo marteze re stank ar sekañs e-keñver ar c’heriaoueg da anavezout ha marteze ivez re ziaes ar video e spagnoleg. Un doare all a oa da labourat diwar-benn an ti a oa oc’h implijout ar filmoù *Encanto* (Howard, Bush, Smith, 2021) pe *Coco* (Unkrich, Molina, 2017), pezh a vo graet en ur gentel hag a vo displeget goude gant ur gelennerzh all. Ne vije ket ar memes danvez sevenadurel ha hervez Edith eo pinvidik-tre a-fet sevenadur ur sekañs a gemer harp war an tisavouriezh. War an dachenn sevenadurel e kav da Edith he deus kalz respontoù pozitivel-tre a-berzh ar skolidi. Depantout a ra deus ar c’hlasadoù avat hag en ur skolaj o deus ar skolidi en em ziskouezet kalz dedennetoc’h evit en ur skolaj all, hervez ar c’hoant o deus da gomz deus traoù personel evel ar vakañsoù a dremenont gant o familh.

2.1.1.2 An tudennoù marvailhus en ur sekañs saozneg

Gant Claire, kelennerzh war ar saozneg er skolaj hag el lise e vez graet ur pennad diwar an tudennoù marvailhus e pempvet klas. Ar sekañs-se a vez graet e fin ar bloavezh-skol. E-pad div sizhun e oa bet cheñchet implij-amzer ar skolidi evito da zeskiñ en un doare all. Seurt darvoud a vez anvet *Projet d’Action Educative (PAE)* e galleg hag a c’hello bezañ troet e brezhoneg gant ar stumm Raktres Obererezh a Zeskadurezh (ROZ). E-pad an div sizhun-se e labour ar skolidi war dem ar grennamzer. Dibab an tem a glot gant ar programm Istor pa vez gwelet ar grennamzer hag an azginivelezh e pempvet klas. E fin ar bloaz eo sañset bezañ echu abaoe pellig al labour war ar grennamzer en Istor avat. Soñjet eo bet gant ar skipailh kelennerien e oa aesoc’h ha dedennusoc’h aozañ seurt doare da labourat e fin ar bloaz evit klozañ ar bloavezh-skol gant plijadur. Ar saozneg a zo bet ouzhpennet d’ar raktres met er penn-kentañ eo dreist-holl ur raktres aozet gant ar c’helennar war an Istor hag ar c’helennar war ar galleg. Hervez Claire

eo ar pal sevel ur seurt raktres KPMZ. A-zivout ar saozneg e vez implijet an tem « beajiñ ha divroañ » ma lakaer ennañ tout ar pezh a zo liammet gant an ijin, an huñvre pe ar marvailh. Awenet eo Claire gant an dorn-levr *Bloggers* embannet gant La Maison des Langues.

Da gentañ e krog Claire ar pennad gant ur c'hoari. Rankout a ra ar skolidi adreiñ e anv da bep tudenn hag a vez gwelet war ur skeudenn. Da skouer e vo ret liammañ ar ger « priñsez » gant tresadenn ur vaouez lugernus he c'hurunenn. Ar c'hoari-se a gaver el levr. Gerioù zo a vez aes da gavout met gerioù all a vez diaesoc'h. Er memes tro eo un digarez da adwelout ar gerioù da ziskrivañ un dudenn pa oa bet desket lod gant ar skolidi abretoc'h e-pad ar bloaz pe e c'hwec'hvet klas.

Dre ma labour ar c'helenner war ar galleg diwar-benn mojenn Arzhur he deus Claire dibabet chom hep adkemer ar memes tudenn ha neuze e labour ar skolidi war meur a dudenn ha neket unan resis. D'ar mare-se eo poent labourat evit kompren dre gomz. Selaou a ra ar skolidi un nebeut dielloù son hag a vez pourvezet gant an dorn-levr. An dielloù-se a zo diverradennoù kontadennoù ha ret eo d'ar skolidi adkavout gant peseurt oberenn brudet e ya pep diverradenn. En o zouez e oa *Lord of the Rings*, *Peter Pan* ha *Harry Potter*. Aze e vez labourer c'hoazh war ar c'heriaoueg da ziskrivañ tud hag ouzhpennet e vez an doare da gomz deus temz-spered un dudenn, anvioù-gwan dreist-holl (kalonek, drouk, fallakr ...).

Evit lakaat ar skolidi da gomz e kas Claire ur c'hoari. Evit gallout c'hoari e rank ar skolidi keñveriañ tudennoù kenetrezo. Ret eo neuze kompren penaos e vez keñveriet traoù ha tud e saozneg. Ar c'hoari a zo e stumm ur c'hoari kartoù, war stumm ar c'hoari kartoù *Pokemon* pe *Magic*. War ar c'hartoù prestet gant Claire d'he skolidi e kaver tudennoù bet gwelet er c'hlas pe deus ur bed marvailhus. Pep skoliad a zo kartoù gantañ hag an hini a zo gantañ ar gartenn gant an dudenn vrasañ pe finañ a zastum kartenn e eneber. Ar skolidi a rank neuze sevel frazennoù oc'h implijout an anvioù-gwan bet gwelet a-raok ha keñveriañ an tudennoù.

Da c'houde e implij Claire un diverradenn deus ar romant *The Witches* gant Roald Dahl. Selaou a ra ar skolidi an destennig lennet ganti. Selaouet e vez ivez diskrivadenn tudennoù an istor evit kenderc'hel da gas war-raok al labour merkañ ar c'heriaoueg nevez.

Goude e vez diskouezet an destenn a dammoù dizurzh war an daolenn. Lennet e vez an tammoù-se asambles er c'hlas a vouezh uhel. Un digarez eo ivez da reizhañ un nebeut fazioù distagañ. Klask a ra ar skolidi adlakaat an tammoù en urzh. Daou bal pennañ a zo gant ar boelladenn-se. Da gentañ eo ar pal kompren penaos eo aozet un istor marvailhus, penaos e krog, penaos e vez degaset un darvoud a-bouez, penaos e echu. Da eil e vez labourer war an amzer tremenet-strizh, bet labourer dija a-raok ha war an amzer tremenet-strizh BE+ING. Ret eo d'ar skolidi adkavout e-barzh an destenn war an daolenn ar verboù gant pep stumm amzer tremenet-strizh gant pep a liv. E giz-se o deus merzet ar skolidi e oa an amzer tremenet-strizh « eeun » amzer an danevell rak distank eo ar stumm BE+ING en destenn. Displeget e vez gant ar gelennerез peseurt mod e vez implijet ar stumm BE+ING.

Ar pezh a zo bet desket gant ar skolidi a-fet lennegezh, geriaoueg ha yezhadur a zo implijet e labour dibenn ar sekañs hag a vo displeget pelloc'h.

Hervez Claire e vez dedennet ar skolidi gant an tem ha gant an danvez implijet peogwir e anavezont traoù dija. Laouen int o tispleg o deus gwelet ar film-mañ-film pe al levr-mañ-levr gant seurt harozed pe seurt loened marvailhus. Er memes tro e komprenont mat penaos aozañ un danevell. Dre ma vezont dre soubidigezh e-pad div sizhun e tem ar grennamzer int efedus pa vez ret implijout gouiziegezhioù bet kaset dezho gant ar gelennerien all e galleg pe en Istor. War an dachenn arzel e c'heller lavarout neuze eo tizhet ar pal. War dachenn ar barregezhioù yezh dre gomz eo kemend-all pa vez rediet ar skolidi da implijout dre gomz troiennoù ha gerioù nevez.

2.1.1.3 *Romeo and Juliet* en ur sekañs saozneg

E-pad ar bloavezh-skol 2020-2021 e rae Stéphanie war-dro ur strollad skolidi e pevare klas. Ne oa ket ur c'hlasad, ur strollad o vodañ seitek skoliad en un danvez dibab e saozneg ne lavaran ket. An danvez-se a veze graet « hentad yezh » anezhañ, ur raktres dibar ne vez ket kavet e pep skolaj. Diwar « eurvezhioù emren » ar skolaj e veze savet. Div eurvezh bep sizhun e veze kelennet an danvez-se. Kemer a rae plas ur c'hlasad « euro » hag a oa ken dibar all dre ma ne oa ket renabilet ez-ofisiel kennebeut. Nebeut a briziadennoù a zo en hentad yezh ha notenn ebet. Peurvuiañ e vez priziet barregezhioù

hepken. Er skolaj e c'hell ar skolidi o deus graet an hentad yezh kinnig ur raktres bet graet gant an hentad da vare amprouenn dre gomz ar breved. Dav eo resisaat ivez e veze dibabet an danvez-se gant skolidi hag o doa ul live mat e saozneg, live trede klas hervez Stéphanie, ha mennet da labourat.

Dre ma ne oa ket un danvez ofisiel ha priziet hervez ur programm bet embannet er c'hannadig ofisiel e oa dieub-tre ar gelenner. Stéphanie a felle dezhi labourat abaoe pell war oberenn Shakespeare, pezh a vez diaes d'ober e-pad kentelioù ar c'helc'hiad pevar. Aze he deus kavet ul lec'h hag ur mare evit mont don en danvez. Gant div eurvezh bep sizhun a-hed ar bloaz e c'helle sevel ur raktres uhelek.

Da gentañ he deus displeget d'ar skolidi petra oa pal ar raktres da lâret eo labourat ar c'hoariva a-benn diskouez da skolidi ar skolaj ar pezh-c'hoari *Romeo and Juliet* bet skrivet gant William Shakespeare e fin ar XVIvet kantved. Ar pal a oa diskouez ar pezh en e bezh. Dedennet e oa ar skolidi evit ober c'hoariva ha n'int ket bet spontet gant ar mell labour a oa dirazo. *Romeo and Juliet* a oa bet dibabet gant Stéphanie rak aesoc'h e oa danvez an istor da gompren hag ar yezh a oa eeunoc'h ivez. A-bouez e oa eviti ivez an niver a dudenoù a veze kavet er pezh.

Stéphanie he deus lec'hiet *Romeo and Juliet* en e gendestenn ha displeget he deus berr-ha-berr buhez Shakespeare. Un tamm deus un enrolladenn deus ar pezh-c'hoari war al leurenn o deus gwelet, penn-kentañ ar pezh hepken. Da c'houde o deus ar skolidi sellet ouzh daou film. Evit kregiñ ganti o deus sellet ouzh *Romeo + Juliet* (Luhmann, 1996). Ar film-mañ a zo bet dibabet peogwir en deus ur savboent dedennus e-keñver an doare ma oa bet savet gant Baz Luhrmann. Istor ar film a c'hoarvez en amzer a-vremañ e Kalifornia. Ar re gCapulet hag ar re vMontaigu a zo daou vagad a forbanned. Ar film a ziskouez bezañ modern en doare ma tiskouez tudennoù ha darvoudoù ar pezh-c'hoari. Ar c'hontrol-mik eo a-fet komzoù rak miret e oa bet an destenn evel ma oa bet skrivet gant Shakespeare, gant yezh ar XVIvet kantved neuze. Ar film a zo bet diskouezet d'ar skolidi er yezh orin, e saozneg gant istitloù e saozneg evit diskouez ar yezh skrivet. Diaes eo bet d'ar skolidi kompren pep tra met tañvaet o deus ar yezh a vo ret dezho distagañ diwezhatoc'h er raktres. War-lerc'h o deus ar skolidi sellet ouzh un azasadenn all, *Romeo and Juliet* (Zeffirelli, 1968).

Koshoc'h eo an doare ma oa bet sevenet ar film. Chom a ra feal d'an istor evel ma oa bet skrivet gant Shakespeare met ar wech-mañ e oa bet azasaet ar c'homzoù en ur yezh a-vremañ. E-giz-se o deus gallet ar skolidi kompren gwelloc'h an istor daoust ma oa bet diskouezet dezho e saozneg. Deus an diforc'hioù etre pep film pe enrolladenn e oa bet kaoz er c'hlas evit kompren penaos e oa a-bouez dibaboù ar severer a-benn kontañ un istor. Da c'houde o deus ar skolidi lennet ar pezh-c'hoari. Lodennoù zo a zo bet lennet er c'hlas padal e oa bet goulennet digant ar skolidi lenn lodennoù all o-unan er gêr. A-bouez e oa lakaat pep hini da gompren an istor hag an tudennoù evit reiñ ur rol da bep hini diwezhatoc'h.

Ul labour a-stroll a zo bet graet goude a-benn diskouez ar pezh-c'hoari da skolidi ar skolaj met al lodenn-se a vo displeget pelloc'h.

Hervez Stéphanie n'eo ket bet aes tamm ebet al lodenn da gompren, a vefe dre gomz pe dre skrid daoust ma oa uhel a-walc'h live ar skolidi e-keñver skolidi pevare klas ordinal. Dedennet e oa ar skolidi a-zivout ra pezh-c'hoari a-drugarez d'ar pezh a gonte. Intereset int bet ivez gant Shakespeare peogwir eo un den brudet hag o doa klevet e anv dija.

2.1.1.4 Mathurin Méheut en ur sekañs galleg

Hervez live ar skolidi e c'heller gwelout ar c'helenn e brezhoneg evel par d'ar c'helenn e galleg ha setu e c'hell bezañ dedennus studiañ skouer kentelioù galleg. E trede klas eo gwiroc'h c'hoazh seurt martezeadenn p'o deus ar skolidi ul live A2 e brezhoneg war un nebeut barrezhioù ha marteze ul live B1 war ur varrezh pe ziv.

Marie-Christine a implij un oberenn gant Mathurin Méheut e trede klas pa labour diwar-benn testennoù ar Brezel Bed Kentañ. E penn-kentañ ar bloaz e labour war an tem-se peogwir eo liammet gant ar programm Istor ha peurvuiañ eo an tem kentañ a vez studiet. Tro-dro d'an 11 a viz Du e ra Marie-Christine al labour-se gant he skolidi evit sevel liammoù gant ar pezh a glevont er mediaoù er maez deus ar skol diwar-benn lidoù an arsav-brezel. Kalz a labour a ra ivez diwar-benn lizhiri soudarded an trañcheoù. Ouzhpenn labourat war testennoù e studi un daolenn peogwir eo ur boelladenn a vez roet alies d'ar skolidi e-pad amprouennoù ar Brevet. Ret eo dezho lakaat un destenn da glotañ gant ur skeudenn.

Al labour kinniget aze a oa bet kempennet gant Marie-Christine a-raok ar programmoù nevez. A-raok miz Gwengolo 2016 e oa un amproenn dre gomz diwar-benn Istor an arzoù er breved. Evit reiñ boued d'ar skolidi e ranke ar muiañ posubl a gelennerien studiañ oberennoù er c'hlas ha lakaat ar skolidi da labourat war an doare da respont d'ur c'hudennadur liammet gant un oberenn. Al labour-se he deus miret er programmoù nevez peogwir e soñj dezhi eo c'hoazh ur boelladenn dalvoudus evit stummañ preder ar skolidi d'an dielfennañ, da lâret eo implijout binvioù ha geriaoueg teknikel a-benn komz deus une oberenn arzel ha reiñ ur ster dezhi.

An oberenn *Sur la route de Pelves* (Méheut, 1914) a zo bet dibabet ganti evit meur a abeg. Da gentañ eo un oberenn a c'heller gwelout e mirdi Mathurin Méheut Lambal ha neuze eo un digarez da zisplegañ d'ar skolidi n'eo ket ret mont pell evit gwelout oberennoù arzourien brudet gant ar spi e roio c'hoant d'ar vugale da vont gant o familh da welout an oberenn in situ. Da c'houde e oa bet treset gant un arzour deus ar vro, ar pezh a ziskouez e oa Bretoned o kemer perzh er brezel. Lakaat a ra an darvoudoù studiet er c'hlas da vezañ tostoc'h deus outo. Natur an oberenn, kreion druz war baper, a ziskouez ne oa ket aes d'un arzour kenderc'hel gant e labour war an talbenn hag e oa ret dezhañ ober gant an degouezh. Evit echuiñ ez eus ur savboent diskouezet war an dresadenn hag a zo subjektivel, da liammañ neuze gant testenioù ar soudarded.

E fin ar sekañs e vez implijet an dresadenn, da vare ar prantad kentel diwezhañ hag a bad un eurvezh hanter. A-raok ar prantad-se o deus studiet pajenn gentañ ar gazetenn *L'Ouest-Eclair* d'an 12 a viz Du 1918 ha kalz lizhiri bet skrivet gant ar soudarded war an talbenn pe gant o familh chomet en a-dreñv. Pal ar skolidi e-pad ar prantad diwezhañ a zo respont d'ar c'hudennadur « Penaos e testeni an oberenn-mañ ar Brezel Bed Kentañ ? ». E fin al labour e ranko pep skoliad skrivañ ur rannbennad aozet evit respont d'ar goulenn diwar al labour prientiñ a vo bet graet er c'hlas e-pad ar prantad kentel. Al labour dibenn a vo un destenn neuze. E penn-kentañ ar prantad diwezhañ-se e vez stummet strolladoù, pevar skoliad e pep hini d'ar muiañ. Ne ra ket Marie-Christine memes mod bewech evit sevel ar strolladoù. A-wechoù e ra strolladoù a live pa vez re a ziforc'h etre ar skolidi. A-wechoù all e ra ar strolladoù dre zegouezh p'emañ gant ur c'hlasad diaesoc'h. A-wechoù all c'hoazh e laosk ar skolidi sevel ar

strolladoù o-unan p'emañ gant ur c'hlasad emren ha digudenn. Ur wech bet savet ar strolladoù e vez roet da bep strollad ul luc'heilenn A3 liv deus an oberenn evit ma welo mat pep hini er strollad. Gallout a ra ar skolidi kemer ar fichenoù metodologiezh bet roet dezho e penn-kentañ ar bloaz a-zivout an doare da lenn ur skeudenn ha da sevel ur skrid arguzennet. Roet e vez da bep skoliad ur follenn warni un daolenn da glokaat. An daolenn a zo aozet e div golonenn. Er golonenn gentañ e rank ar skolidi renabliñ an elfenoù dedennus a welont war an oberenn gant ar muiañ posubl a vunudoù. En eil kolonenn e rankont reiñ ur ster da bep elfenn o deus diskrivet er golonenn gentañ. Ret eo da bep hini skrivañ war e zaolenn-eñ peogwir en do ezhomm deus an titouroù-se diwezhatoc'h. E-pad emañ ar skolidi o labourat e tremen Marie-Christine da welout pep strollad evit klevout penaos e kendivizont. Penn-kentañ ar bloaz eo c'hoazh ha fellout a ra dezhi anavezout mat he skolidi. Lod ne vezont ket klevet alies o komz dirak ar c'hlasad hag en un degouezh e-giz-se eo aesoc'h d'ar re-se en em zisplegañ. Evit o c'hlevout e tremen ar gelenner. A-wechoù e c'hell ivez reiñ alioù, sevel goulenoù evit skoazellañ ar re a vez stanket pe adlakaat war ar stern ar re ne labouront ket.

War-dro ugent munutenn a-raok fin ar gentel e chom a-sav al labour dre strollad. Diverret e vez asambles gant ar c'hlasad a-bezh ar pezh a zo bet kavet gant pep strollad a-fet diskrievañ koulz hag a-fet dielfennañ. E-giz-se e c'hell pep skoliad klokaat e daolenn gant elfenoù bet lavaret gant e gamaraded. Evit se e sav Marie-Christine an div golonenn war an daolenn ha pep strollad a c'hell kinnig e respontoù. N'eus urzh ebet, pep hini a gemer ar gaoz pa fell dezhañ. Displegañ a ra ar gelenner d'ar skolidi eo an denotañ ar pezh a vez gwelet ha neuze e rank pep hini gwelout ar memes tra. Displegañ a ra ivez an eil kolonenn, kennotañ, evit lakaat anezho da gompren eo an doare da zielfennañ, an doare ma kompren an oberenn. Ne ra sañsur ebet pa skriv war an daolenn. Skrivañ a ra tout ar pezh a vez lâret dezhi gant ar skolidi. Ar skolidi a glask lakaat war wel war o follenn an elfenoù a glot kenetrezo gant dreistlinennerioù a-benn kavout ahelioù da implijout en o zestenn. Un doare eo da vont war-zu ar vetodologiezh da sevel ur steuñvenn.

Ar respont d'ar c'hudennadur a zo da reiñ er gêr. Pep hini en deus d'ober er gêr ur rannbennad frammet, tro pemzek linennad. Hervez ar gelenner eo a-bouez lakaat pep skoliad da sevel e rannbennad e-

unan evit ma vo pleustret war ar skrivañ gant pep hini. E-pad ar gentel gentañ e vez lennet un nebeut testennoù bet skrivet er gêr gant ar skolidi. Peurvuiañ ez eus un nebeut re hag a fell dezho lenn o skrid. Mod all e vez goulennet gant skolidi tennet d'ar sort d'en ober. Goude ez eus kendiviz diwar-benn an testennoù bet lennet. Ar skolidi a zo broudet da reiñ o soñj diwar-benn ar pezh o deus skrivet o c'hamaraded, da ginnig mennozhioù n'int ket bet meneget ganto pe c'hoazh da abegiñ ar gerioù liammañ implijet pe get en destenn. Marie-Christine a zispleg e klask diwall war deod ar skolidi, diwall rak komzoù dismegañsus evit mirout un aergelc'h hegarat a lakao pep hini da gemer perzh.

Pa reer bilañs ar gentel eo anat eo pozitivel an traoù hervez Marie-Christine, mod all n'he dije ket miret al labour-se goude reform 2016. Ar pezh a blij dezhi eo an doare ma vez alies souezhet gant respontoù nevez roet gant ar skolidi. Eviti eo ivez un doare da sevel liammoù etre danvezioù-skol disheñvel. Aze eo ul labour hag a liamm barregezhioù yezh ar galleg dre gomz ha dre skrid gant gouiziegezhioù bet desket e-pad kentelioù war an Istor ha gant geriaoueg arbennikaet an arzoù. Peurvuiañ ne soñj ket ar skolidi o-unan er pezh o deus desket gant kelennerien all a zispleg Marie-Christine ha neuze eo ret lakaat an difrae-se war wel evit lakaat anezho da gompren emaint o c'hounit barregezhioù hollek. War meur a zavez eo neuze al labour-se. Ne vez ket priziet al labour gant Marie-Christine rak trawalc'h a briziadennoù a zo dija er sekañs-se hervezi (studiañ un destenn, reizhskrivañ, ijinañ ha skrivañ war stumm ul lizher). Pa vez goulennet ganti penaos e prizfe al labour-se m'he defe d'en ober e tispleg e vefe moaien moarvat da briziañ dre gomz pe dre strollad met ret e vefe aozañ al labour en un doare all evit gallout sevel muzulioù a-zere, evel sevel un destenn a-stroll lakaomp. Met sur eo ar gelenner n'he deus ket ezhomm da briziañ ar skolidi evit lakaat anezho da chom sirius peogwir he deus ar santimant e plij dezho al lodenn-se deus ar gentel ha laouen int o reiñ o soñj diwar-benn an oberenn.

2.1.1.5 Ar film *Encanto* en ur sekañs spagnoleg

E pempvet klas e vez Valérie kelenner war ar spagnoleg. Ar sekañs kinniget amañ a vez graet e fin ar bloavezh-skol kentoc'h. Liammet eo gant an tem « kejañ gant sevenadurioù all » er c'helc'hiad

4. Evit labourat war an tem-se e kinnig Valérie d'he skolidi ur sekañs a gemer harp war ar film bevaat *Encanto* (Howard, Bush, Castro Smith, 2021). Dre ar film-se e c'hell ar skolidi pleustriñ gerioù an ti, ar familh hag er memes tro war gKolombia ma c'hoarvez istor ar film.

Kregiñ a ra gant ar sekañs o tiskrivañ skritell ar film. Warni e weler un ti bras ha liesliv. Ouzh pep prenestr e weler un den deus an tiegezh. Tro-dro d'an ti ez eus elfennoù a seblant diskouez e vo darvoudoù burzhudus er film. Gwelet e vez ivez tudenn bennañ ar film, Mirabel, 15 bloaz. Gant ar skritell-mañ e c'hell ar skolidi adimplijout geriaoueg o deus desket a-raok evel al livioù. Ar film a zo bet gwelet dija gant lod deus ar skolidi ha neuze e klask Valérie lakaat ar re all da zivinout piv eo an tudennoù a weler war ar skritell ? Martezeadennoù a reont. Ar re o deus sellet ouzh ar film a ro o soñj diwar-benn respontoù ar re n'o deus ket. Mod all e vez graet ivez liammoù gant *Coco* (Unkrich, Molina, 2017), ur film all bet produet gant Pixar ha Disney.

Da c'houde e kemer ar skolidi pep a dablezenn evit ober un enklask war internet diwar-benn Kolombia. Roet e vez da bep hini ur fichenn da leuniañ. War ur gartenn e rankont livañ kartenn Amerika ar Su : E melen e vez livet Kolombia hag e ruz e livont ar broioù amezek. Rankout a reont ivez skrivañ war ar gartenn e spagnoleg anv pep Stad bet livet ganto. Ur c'houlennaoueg a zo ivez ma rankont kinnig Kolombia o lavarout an niver a annezidi, anv ar moneiz implijet, stumm ar renad politikel, anv ar prezidant, anv ar gêr-benn. Hervez kont ne oa ket aes d'ar skolidi respont da bep goulenn ha lod n'o doa ket lennet mat an urzhioù ha neuze n'o doa ket livet ar broioù a-zere.

Evit kenderc'hel e labouront da gompren dre skrid. Valérie a ro dezho un destenn hag a ziskriv pep hini en un tiegezh ordinal. Ret eo d'ar skolidi adreiñ da bep tudenn deus ar film e blas en tiegezh ha war skritell ar film. A-ratozh eo un tamm re ziaes an destenn evito. Un digarez eo evit Valérie da zisplegañ d'ar skolidi deroù ar metodologiezh evit kompren un destenn. Lavarout a ra dezho e c'hellont kompren dre vras hep kompren pep tra. Aze o deus ezhomm deus un nebeut titouroù hepken evit ober ar boelladenn ha neuze n'o deus ket ezhomm da gompren pep tra. Goulenn a ra Valérie ma vo dreistlinennet an elfennoù a gomprenont hag a soñj dezho int liammet gant ar goulenn. Gant sikour an destenn e rankont ivez kavout peseurt dreistgalloud a ya gant pep tudenn. Evit echuiñ ar prantad kentel e liv

ar skolidi ti ar familh hervez an urzhioù bet roet dezho hag e pegont ar follenn-se en o c'haier.

Ar peurrest deus ar sekañs n'eo ket liammet gant ar film. Evit kenderc'hel gant al labour diwar-benn an ti e implij Valérie ar pezh a zo kinniget gant an dorn-levr *¡Atrevete!* (León, 2022) embannet gant Magnard. Eno e kav peadra da labourat ar gompren dre gomz. Ar wech-mañ e liamm Valérie ar gentel gant ti ar skolidi, ar pezh a zegaso ul labour dibenn tost a-walc'h ar pezh a ginnig Edith el lodenn 2.1.1.1.

Implij ar sinema e-barzh ar sekañs-mañ a servij da labourat war ar sevenadur peogwir e tizolo ar skolidi an doare ma vev ur familh e Kolombia ha gounit a reont gouiziegezhioù a bep seurt war ar vro. Hervez Valérie eo aesoc'h d'ar skolidi dont e-barzh an tem ma tremener dre un oberenn a blij dezho. Ouzhpenn da se e tiskouez seurt filmoù brudet-mat e c'hell ar sevenadurioù ma vez komzet spagnoleg bezañ tost deus o blazioù ha kaout ur plas en o buhez pemdeziek.

2.1.1.6 Ar roue Arzhur en ur sekañs saozneg

Gant Stéphanie e vez kinniget ur sekañs diwar-benn ar grennamzer hag ar roue Arzhur e pempvet klas. Da liammañ eo gant an tem « kejañ gant sevenadurioù all ». E fin ar bloaz e vez graet ar sekañs-se peogwir e kemer harp Stéphanie war al labour bet graet en Istor diwar-benn ar gladdalc'helezh ha war al labour diwar-benn istor Tristan hag Izold bet graet e galleg. Un abeg all he deus Stéphanie d'ober se e fin ar bloaz. Ul lodenn deus al labour a zo d'ober er gêr ha ret eo neuze bezañ gant skolidi hag a vo emren a-walc'h evit bezañ kiriek d'o labour. Ar pal sevenadurel a zo lec'hiañ istor Arzhur el lennegezh a Vreizh-Veur hag e lennegezh ar grennamzer hag er memes tro reiñ gouiziegezhioù ouzhpenn ar pezh a zo bet desket en Istor gant ar skolidi. War dachenn al labour war ar yezh e vez labourer pep obererezh yezh. An naouturioù pennañ da labourat e-kerz ar sekañs a zo implijout an derez uhelañ, an amzer tremenet strizh, ar redi en amzer tremenet ha geriaoueg liammet gant ar marc'heg. Un danevell pe ur romant berr a vez implijet evel diazez ar sekañs. Lennet e vez gant ar skolidi *King Arthur and his Knights*, skrivet gant George Gibson hag embannet e 2003. Al levr-se a zo bet dibabet gant ar gelenner peogwir e c'heller e gavout e daou stumm, ur stumm berr

hag ur stumm hiroc’h. Fellout a rae da Stéphanie disheñveliñ ar c’helenn hervez live ar skolidi. Un enrolladenn a zo pourvezet gant al levr met n’eo ket bet implijet gant Stéphanie.

Digoret e vez ar sekañs o renabliñ ar pezh a oar dija ar skolidi diwar-benn ar grennamzer hag ar romant a gourtezi. Savet e vez liammoù gant traoù a zo bet gwelet gant ar gelennerien all un nebeut mizioù zo. Displegañ a ra Stéphanie ar raktres hag al labour dibenn d’ar c’hasad, krouiñ un haroz ha kontañ un istorig. Neuze e kompren ar skolidi e rankont lenn ul levrig a-benn bezañ awenet gant al lennegezh-se. Ul levrig a vez roet da bep skoliad hervez e live lenn hag e live e saozneg. Pep levrig a zo ennañ an destenn ha goulennoù a ya gant pep pennad deus al levr. Muioc’h a c’houlennoù a zeu gant stumm hir ar romant. Pemzek pajennad a ya d’ober al levrig berr pa vez tost pevar-ugent pajennad er stumm hir. Peurvuiañ e vez roet ar stumm berr d’ar skolidi. An darn-vrasañ deus al labour lenn a zo d’ober er gêr, etre pep prantad. Rankout a ra ar skolidi lenn ur pennad pe zaou ha respont dre skrid d’ar goulennoù bet roet dezho. E pennkentañ pep prantad e vez reizhet o respontoù ha klasket e vez mont pelloc’h gant an tem oc’h ouzhpennañ geriaoueg pe o kendivizout diwar-benn kevredigezh Arzhur. A-wechoù e klask ar skolidi divinout ar pezh a c’hoarvezo diwezhatoc’h en istor. An doare da labourat er gêr a zo bet implijet gant Stéphanie peogwir e klot fin ar bloavezhskol gant ur mare ma vez c’hwitet forzh kentelioù abalamour d’ar vakañsoù pe d’an devezhioù gouel. Ar goulennoù a servij da sevel ster an destenn hervez ar gelenner.

Al lodenn-mañ deus ar sekañs a zo bet diaes hervez kont. Ul labour hiniennel e oa ha dizingal-kennañ e oa labour ar skolidi. Lod a oa laouen-tre gant an tem ha dedennet gant an istor. Plijet eo bet ar re-se gant stumm hir al levr ha daoust ma c’hellent chom hep respont d’ar goulennoù ouzhpenn a oa en o stumm, graet o deus memes-tra. Lod all e oa bet diaes dezho lenn o-unan er gêr hag alies e soñj da Stéphanie e oa bet respontet n’eus forzh petra d’ar goulennoù peogwir n’o doa ket komprenet an destenn peotramant peogwir ne oant ket mennet. Hervez Stéphanie e c’hell prantad ar bloaz displegañ seurt emzalc’h ivez pa ne oa ket priziet al labour na gant notennoù na gant barregezhioù memes. Hervezi ne chome ket kalz gouiziegezhioù deus kentelioù istor ar skolidi. Divizet eo bet gant Stéphanie cheñch ar sekañs-se a-benn ar bloaz o tont peogwir e oa dipitet gant labour ar skolidi.

Nebeutoc'h a labour hiniennel a vo ha muioc'h a labour dre strollad, evit al labour lenn zoken. Ar pal a vefe lakaat pep skoliad da vezañ kirriek da labour e strollad. Marteze e vefe ivez ur respont d'ur gudenn all a zo bet e-pad ar sekañs, da lâret eo n'eo ket bet mestroniet mat an naouturioù nevez a-fet yezhadur evel ma vo merzet e-kerzh al labour dibenn.

2.1.1.7 Arzoù-kaer, emboltredoù gant Goya, Picasso, Kahlo en ur sekañs spagnoleg

En ur sekañs e pevare klas e labour Edith o kemer harp war taolennoù livet gant Francisco de Goya, Pablo Picasso ha Frida Kahlo. E fin ar bloavezh-skol e vez graet ar pennad-se. Liammet eo gant an tem « ar skol hag ar gevredigezh » er c'helc'hiad 4. Emboltredoù a zo bet dibabet gant ar gelenner evit labourat war an diskripañ tud. Dibabet eo bet an tri livour-se peogwir e kinnigont oberennoù disheñvel-tre an eil re deus egile ha peogwir eo un digarez evit lakaat war wel arzourien brudet er bed spagnolek. Tem ar sekañs a zo an eñvorennoù bugaleaj. El labour dibenn e ranko ar skolidi komz deus o bugaleaj dezho ha kinnig ul labour krouiñ tro-dro da se ha neuze sevel ur poltred ganto o-unan.

Da gentañ e tiskouez Edith taolennoù brudet gant pep hini deus an tri livour. An *Tres de Mayo* gant Goya a oa bet implijet en Istor neuze e anavez ar skolidi kendestenn an oberenn hag ar ster a c'heller reiñ dezhi. Klask a ra ar skolidi diskripañ an daolenn e spagnoleg hervez ar vetodologiezh bet gwelet dija. Da c'houde e vez diskouezet dezho an oberenn *Guernica* gant Picasso. Honnezh a zo brudet-tre met n'eo ket bet studiet gant ar skolidi ha kendestenn an oberenn a zo liammet gant programm Istor an trede klas. Klasket e vez c'hoazh diskripañ an oberenn. Ar wech-mañ e tispieg Edith ster an daolenn hanter-hanter e galleg hag e spagnoleg peogwir eo diaesoc'h da gompren. Evit echuiñ e tiskouez Edith taolenn Frida Kahlo *La Columna Rota*. An daolenn-mañ a servij da liammañ al lodenn sevenadurel gant al labour dibenn. Ret eo d'ar skolidi divinout war beseurt rumm livouriezh e vo labourer. Displegañ a ra goude ar gelenner o deus Goya ha Picasso livet emboltredoù ivez.

Ar prantad war-lerc'h a zo ur gentel enklask. War an tablezennoù e rank ar skolidi mont da glask titouroù diwar-benn an tri livour. War o

c'haier o deus ur fichenn gant goulennoù. Ret eo dezho ivez kavout emboltredoù Goya ha Picasso mui emboltredoù all gant Kahlo. Goude e vez difaziet al labour hag e vez bannet tro-ha-tro emboltredoù gant an tri livour. Evit pep livour e tibab ar skolidi an hini a blij dezho ar muiañ ha hennezh a vez diskrivet donoc'h. Ar pal a zo degas geriaoueg ouzhpenn liammet gant an tres met ivez gant ar santimantoù hag ar fromoù. O welout meur a daolenn gant ar memes arzour e welont ivez e c'hell daou emboltred gant ar memes arzour bezañ disheñvel-tre. Dre gomz c'hoazh e klaskont ijinañ buhez an arzour da vare an daolenn hag abalamour da betra en defe ar santimant-mañ-santimant. Seurt poelladenn a lak ar skolidi da implijout an amzer amdremenet.

Da c'houde e ya da vat Edith war-zu al labour dibenn ha komz a ra neuze deus bugaleaj ar skolidi. Mod-se e c'hell kenderc'hel gant implij an amzer amdremenet hag er memes tro degas gerioù nevez liammet gant al lezir ha bed ar bugaleaj. Al labour da gompren dre gomz ha dre skrid a vez graet d'ar mare-se. Al labour da skrivañ a vez graet da vare al labour dibenn.

Ar meskaj etre oberennoù anavezet dija gant oberennoù nevez a zo efedus hervez Edith abalamour ma c'hell pep hini kemer perzh dre gomz, ar re n'int ket en o bleud gant an arz zoken. Plijout a ra d'ar gelennerz displegañ elfennoù istorel evel kendestenn *Guernica* da skouer. Dre vras he deus plijadur bepred o vont war dachenn an Istor hag ar sevenadur. Pa c'houlenner diganti hag he deus priziet al lodenn bet displeget el linennoù diaraog e tispleg n'he deus ket. N'he deus ket merzet pe soñjet e vije bet moaien da briziañ al labour enklask oc'h en em harpañ war referañser Kelenn ar Mediaoù hag an Titouriñ (KMT a zo an droidigezh evit EMI, *éducation aux médias et à l'information*). N'he deus ket soñjet kennebeut e c'hallje priziañ barregezhioù liammet gant Istor an Arzoù o tivizout askañ elfennoù er referañser a-zere. Tu a vije bet dezhi divizout priziañ barregezhioù er referañser Istor zoken met ur wech c'hoazh, n'he deus ket graet kement-mañ.

2.1.2 *Mont war an dachenn*

Muioc'h mui e kemer ar skol ur rol a ya dreist he c'hefridi hengounel a gelenn danvezioù. Evel ma oa bet gwelet er pajennoù diaraog e oa bet krouet danvezioù nevez da gelenn dreist moger pep

danvez evel Istor an arzoù, Kelenn ar Mediaoù hag an Titouriñ pe ar c’helenn moral ha keodedel. Muioc’h mui en deus ar skoliad ur rol er skolaj er-maez deus e glas evel e-barzh Kuzul Buhez ar Skolaj (troidigezh evit Conseil de la vie collégienne). E 2013 e oa bet pouezet war rol ar skol evit desevel keodedourien an dazont : «pour devenir de jeunes citoyens, les élèves doivent apprendre les principes de la vie démocratique et acquérir des compétences civiques grâce aux enseignements dispensés et par la participation aux instances représentatives et/ou à la vie associative des écoles et des établissements» (Lezenn 2013-595, 2013). E 2016 e oa bet krouet Kuzul Buhez ar Skolaj : «Dans les collèges, un conseil de la vie collégienne est composé de représentants des élèves, d'au moins deux représentants des personnels dont un personnel enseignant et d'au moins un représentant des parents d'élèves.» (Dekred 2016-1631, 2016). Er memes tro e vez digoret dor ar skolajoù o soñjal n’emañ ket ar c’helenn hag an deskadurezh er c’hlas hepken. Evel se e oa bet prederiet an hentadoù e reform 2013. Pep hentad a vez graet gant ar skolidi er skol koulz ha war o amzer vak : «Un parcours éducatif désigne un ensemble structuré, progressif et continu d'enseignements, non limité à une discipline, et de pratiques éducatives, scolaires et extrascolaires, autour d'un thème. L'élève construit des compétences et acquiert des connaissances en fonction des expériences, des rencontres et des projets auxquels il participe» (Akademiezh Lyon, 2021). Mod all e c’heller ivez menegiñ ar sistem Ecole Ouverte termennet e 2003 e mod-se : «École ouverte est une opération qui consiste à ouvrir les collèges et les lycées pendant les vacances scolaires, les mercredis et samedis durant l'année scolaire, pour accueillir des enfants et des jeunes qui ne partent pas ou peu en vacances et qui ne fréquentent pas ou peu les structures locales d'accueil et de loisirs. [...] École ouverte est une occasion de plus donnée à l'institution scolaire d'œuvrer en faveur de l'intégration sociale et scolaire, de valoriser l'image de l'école auprès des jeunes et des habitants, de jouer un rôle moteur dans l'espace social, contribuant ainsi à la prévention de la violence.» (Kelc’hlizher 2003-008, 2003). Gwelout a reer mat n’eo ket mui ar skol ur c’hastell-kreñv ma kaver ennañ hag ennañ hepken gouiziegezhioù ha barrezhioù. N’emañ ket mui ar skol er-maez deus ar gevredigezh.

E-touez ar gelennerien bet aterset evit ar c'hounskrid-mañ o deus lod komprenet mat al lojik-se. Aet int da glask an arzoù war an dachenn evit lakaat ar skolidi da vont e darempred war-eeun gant an oberennoù. El lodenn-mañ e welor skouer ur weladenn arzel hag istorel e kreiz-kêr Roazhon, un diskouezadeg street-art e Gwened, ur festival sinema e Dinarzh hag ur weladenn en ur mirdi e Roazhon.

2.1.2.1 Dizoleiñ Roazhon evit ur raktres brezhoneg

Hervé a zo kelenner war ar brezhoneg el lise hag er skolaj. Gant e liseidi en deus bet tro da aozañ ur veaj da Roazhon asambles gant ar c'helenner war an Istor-geografiezh e brezhoneg. Ar veaj kontet amañ a zo bet graet e 2022 gant liseidi ha neuze gant skolidi n'int ket e kelc'hiad 4. E-pad ar veaj-se e tremenene ar skolidi tri devezh en Enez Eusa ha goude tri devezh e Roazhon. Soñjet ez eus bet e c'helle ar raktres-mañ bezañ dedennus memes tra dre ma n'eus ket kement se a ziforc'h etre skolidi trede klas hag eilvet klas. Ouzhpenn-se e ranker er skolaj koulz hag e lise labourat war an hevelep obererezhioù yezh ha neuze e c'heller trañsposiñ ar pezh a vez desket gant ar raktres-mañ d'ur c'hlasad a skolajidi.

Evit aozañ ar veaj eo bet Hervé hag e genseurt e darempred gant ofis an douristed evit gouzout hag e oa posubl bizitañ kêr Roazhon e brezhoneg. Mod-se o deus bet niverenn pellgomz Séverine. Honnezh a zo heñcherez-jubennourez vroadel ha heñcherez-prezegennerez e Breizh. Labourat a ra e galleg, e saozneg, en italianeg, e spagnoleg hag e brezhoneg e Frañs a-bezh met arbennik eo war Breizh. Ganti o deus ar skolidi gweladennet kreiz-kêr Roazhon.

Gant an daou gelenner e brezhoneg ne oa ket bet prientet kement-se ar weladenn peogwir e felle dezho lakaat ar skolidi da zizoleiñ ar gêr o-unan. Ouzhpenn, ar wech kentañ e oa dezho labourat gant Séverine ha neuze ne ouient ket re en a-raok deus peseurt gouiziegezhioù e oa ezhomm.

War-dro 45 lisead a oa er strollad, skolidi en eilvet klas, e kentañ klas hag e klas termen. Dre ma oant niverus e oant bet dasparzhet e daou strollad. Ar strollad kentañ a vizite ar gêr pa oa an eil strollad o weladenniñ mirdi an arzoù-kaer. Hervé a oa gant ar strollad a valed e kêr met n'en deus ket gwelet pep tra abalamour ma oa bet klañv ur skoliad ha dav e oa bet dezhañ fiziañ ar strollad da Séverine evitañ da

vont da glask privezioù gant ar skoliad klañv. Kroget e oa ar bourmenadenn gant Porzhioù Morzhell gant ul lodenn deus ar mogerioù galian-ha-roman ha goude e veze heuliet un hent kronologel betek an amzer a-vremañ. Tro a zo bet neuze da welout iliz-veur Sant Pêr, an tier o bannoù koad, da gomz deus tan-gwall 1720 hag an adsevel e maen en XVIIIvet kantved ha plasennoù ar roue, plasenn an ti-kêr ha plasenn Breujoù-Breizh. Da c'houde e oa bet gwelet ivez savadurioù brudet ar gêr a-vremañ. Bep tro e oa ar gaoz war an Istor koulz ha war an tisavouriezh neuze e oa difrae istorel hag arzel er memes tro. War-dro un eur hanter he deus padet ar weladenn e kêr.

Hervez Séverine hag Hervé e oa aketus al liseidi daoust ma oa bet graet ar weladenn gant ar strollad-se e fin an devezh pa oa tomm-berv an amzer ouzhpenn da se. Hervez Hervé e oa skuizh-marv ar skolidi peogwir e oa fin ar veaj. Hervez Severine e oant bev a-walc'h memes tra evit respont d'ar goulennoù a veze savet diganto ha lod a c'houlenne resisadurioù zoken. Perzh mat ur weladenn war an dachenn eo hervez Séverine rak fiñval a ra ar skolidi alies, bep dek munutenn lakaomp. Ouzhpenn-se emañ ar weladennerien dirak ar pezh a zo da welout.

Ar skolidi o deus bet tro neuze da gomz, ar re a felle dezho da nebeutañ, evit respont d'ar goulennoù a veze savet gant Séverine. Ar goulennoù-se a oa aes a-walc'h evit lezel ur chañs da bep hini. Aterset e oa ar skolidi war draoù bet lavaret just a-raok pe war ar pezh o doa gwelet p'o doa bizitet mirdi Breizh ar memes deiz. Da skouer e veze goulennet ganto divinout gant peseurt maen e oa bet savet ar voger-greñv. Mod all e veze goulennet ganto deiziadoù bet desket ganto er skol, traoù aes evel deiziadoù an Dispac'h Gall. Pe c'hoazh e veze goulennet ganto merzout diforc'hioù etre straedoù kreiz-kêr hervez ar prantad ma oant bet savet. Ret e oa dezho divinout gant sikour ar stil tisavouriezh pe a-drugarez d'ar c'hinkladurioù peseurt savadur a oa bet savet da gentañ. Pe mod all e veze goulennet ganto ar pezh o doa merzet e-keñver ar c'hêraozañ. War a seblant ne oa ket techet ar skolidi da gomz e galleg gant Séverine.

Kompren dre gomz o deus graet ivez ar skolidi pa oa ret dezho heuliañ ar pezh a lavare Séverine. Hervezi e oa mat a-walc'h o live evit kompren pep tra ha neuze e oa bet aes he labour. Peurvuañ n'he deus ket implijet ar maen-glas a implij a-wechoù evit skrivañ

deiziadoù pe sifroù a bep seurt. Pa veze ur ger teknikel a c'helle chom dianav e c'houlenne Séverine an droidigezh e galleg evit bezañ sur e oa komprenet mat gant ar strollad.

War ar gompren eo dedennus ar pezh a zispleg Séverine. Hervez live ar skolidi a vez lakaet dirazi e rank kavout strategiezhioù evit bezañ komprenet mat. Da skouer e vez a-wechoù prientet en a-raok ar weladenn gant ar gelennerien evit aesaat ar gompren. Séverine a gas en a-raok d'ar gelennerien roll ar gerioù diaes a vo implijet hag ar gerioù-se a vez desket gant ar skolidi evit ma vo strivet ganto war gompren naouturioù ar weladenn kentoc'h evit chom bout abalamour d'ar c'heriaoueg arbennik. A-wechoù memes e vez prientet tresadennoù oc'h aroueziañ un dra-mañ-tra da verzout el lec'h a vez gweladennet. Dre vras e tispleg Séverine eo efedusoc'h ar gweladennoù pa vezont prientet ha pa vez lakaet ar skolidi d'ober traoù e-pad ma weladennont. Kinnig a ra sevel levrigoù evit tresañ ar pezh a vez gwelet pe livañ un elfenn er gweledva. Pe mod all e c'heller ivez prientiñ ur prantad klask an teñzorioù gant goulennoù e brezhoneg war ur fichenn pe pa zeu a-benn ar skolidi da adkavout anezhi e kêr.

Pa reer bilañs seurt gweladennoù e weler eo efedus mont war an dachenn evit derc'hel soñj deus ar pezh a zo bet gwelet peogwir e oa bet bevet. Ouzhpenn-se ne chom ket stabil ar c'hlasad pa vez o pourmen e kêr hag atav ez eus traoù da welout tro-dro d'ar strollad. Aze e oa ar wech kentañ d'un nebeut liseidi mont betek Roazhon ha neuze o deus bet tro da zizoleiñ ar gêr. Ar re a oa bet e Roazhon dija o deus gwelet traoù n'o doa ket gwelet a-raok a-fet tisavouriezh ha kêraozañ.

Penaos e oa bet implijet ar veaj-se gant Hervé da c'houde ? Goulennet e oa bet gant ar skolidi kemer fotoioù deus ar pezh a welent a-hed o beaj c'hwec'h devezh. Ur wech distroet el lise e rankent prientiñ un displegadenn dre gomz evit prezantiñ ur weladenn e oant bet plijet ganti. An eztaoladenn-se a bade etre teir ha pemp munutenn. Adkemeret o deus ar skolidi ar pezh a oa bet lavaret gant Séverine hag ouzhpennet o deus o santadoù, ar pezh o doa kavet brav, pegen skuizh e oant. An displegadenn dre gomz a oa priziet ha notennet. Prizet e oa an doare ma komzent o-unan. Evit ober kement-se e veze priziet an diaporama a oa bet savet gant o fotoioù. Ret e oa dezho mont don a-

walc’h war ar pezh o doa gwelet ha desket e-pad ar weladenn. An darn-vrasañ deus ar poentoù a oa war an ampartiz e brezhoneg. Talvezout a ra ne oa netra resis a veze gortozet diwar-benn un danvez resis bennak evel an tisavouriezh da vare an adsevel er XVIIIvet kantved da skouer. Ne oa ket bet priziet barregezhioù Istor an Arzoù, barregezhioù brezhoneg hepken. Amañ eo dav displegañ eo disheñvel-tre al lise diouzh ar c’helc’hiadoù diaraog. N’eus referañser ebet war Istor an Arzoù el lise gant reform al lise bet votet e 2018. Plas an arzoù el lise a gaver en danvezioù hervez an danvez. Krouet e oa bet danvezioù a gelenn arbennikaet hag a ro ur plas bras d’an arzoù ha d’o Istor met n’eus liamm ebet gant an danvezioù all.

2.1.2.2 Gweladenniñ un diskouezadeg street art evit ur sekañs brezhoneg

Eric, kelenner war ar brezhoneg el lise, a implij kalz an arzoù en e gelenn. Pa oa aterset war an doare da zedenn ar skolidi gant an arzoù eo deuet e soñj gantañ ul labour en deus bet graet gant e liseidi un nebeut bloavezhioù zo. Amañ c’hoazh ez eus kaoz deus ur raktres bet kinniget da liseidi met estreget al lodenn Istor an Arzoù hag a zo disheñvel el lise evit abegoù displeget un nebeut linennoù zo eo kredabl ober an hevelep labour gant skolajidi trede klas o kemm traoù zo evel ma vo displeget.

E Gwened e labour Eric, e kreiz-kêr. E miz Gwengolo 2018 e oa bet prestet ur savadur hag a oa hini servijoù Stad a-raok gant ti-kêr Gwened deuet da vezañ perc’henn war ar savadur d’ur gevredigezh a vroud arz ar straedoù, l’Art Prend la Rue. Burevioù a veze kavet er savadur-se gwechall pa vezent lec’h labour kargidi ministrerezh an Aveerezh. Anv al lec’h, DéDale, a zeu just a-walc’h deus implij kentañ ar savadur gant an DDE.

Rannet eo ar savadur a 3000 m² war tri live e meur a sal vihan. Bez ez eus ouzhpenn 150 anezho. Arouez tisavouriezh ar velestradurezh e c’hell bezañ gant trepasioù hir kennañ ha degadoù a norioù niverennet tal ouzh tal a bep tu deus an trepas. A-dreñv pep dor e kaver ur salig hag e pep salig en deus un arzour krouet un oberenn. An oberennoù-se a zo dre ret in situ, da lavaret eo emañ al lec’h e-kreiz soñj diazez an oberenn. An arzourien, anavezet e bed arzoù ar straedoù, o deus savet pep a oberenn o kemer e kont ar pezh a zo chomet e-barzh ar sal bet

fiziet dezho, tommerez, tuellennoù hag all. Pep sal a zo neuze disheñvel krenn an eil deus eben. Evit gwelout mat an oberenn hag he c'hompren e rank ar gweladenner mont tre, serriñ an nor war e lerc'h ha sellout pizh tro-dro dezhañ. Mont e-barzh ur sal a zo antreal e bed an arzour da vat.

Kompren a reer mat neuze perak e oa bet anvet ar raktres-se «Beajiñ en un oberenn» gant Eric. Ar skolidi a oa sañset beajiñ en un oberenn, kontañ o beaj da dud all evit lakaat anezho da veajiñ d'o zro. Ar skolidi o deus savet ur skor liesvedia evit displeg o beaj. Dre ar skor-se e vez lakaet an arvesterien da veajiñ en oberenn. Aze eo abouez ar savboent. Ar savboent-se a zo an nor a vo savet gant ar skoliad evit lakaat an arvester da antreal en oberenn ha da gompren anezhi. Dieub a-walc'h e oa ar boelladenn met rankout a rae pep skoliad lakaat e vouez da vezañ klevet en e labour. Ur fichenn a oa bet roet d'ar skolidi warni pal ar boelladenn hag ar pezh a oa gortozet. Ur prantad kentel a oa bet kemeret evit prederiañ war ar pezh a dalveze «beajiñ en un oberenn», o klask reiñ ur ster da bep ger. A-raok gouzout resis e pelec'h emañ an oberennoù a vo beajet enno e c'hell ar skolidi en em soñjal war ar pezh a dalvez seurt frazenn evit oberennoù a anavezont dija ha klask ijinañ penaos e c'hellfent lakaat unan bennak da veajiñ en un oberenn bennak. Ne fell ket da Eric reiñ disoc'hoù d'ar skolidi evit lakaat anezho da furchal doareoù d'ober, da vreutaat marteze diwar-benn ar pezh a c'hellfed digemer. Al labour-se a vez graet a-stroll ha dre gomz, e brezhoneg. Da c'houde e vez displeget dezho penaos eo DéDale hag ar pezh o do d'ober eno. War binvidikaat e ya ar preder c'hoazh war an doare ma vo beajet en un oberenn. Ret eo dezho en em soñjal ivez war ar pezh a dalvez ur skor liesvedia hag ober martezeadennoù a-zivout stumm o labour. A-benn ar fin e tispleg Eric petra vo framm al labour. Ar ger «framm» a implij kentoc'h evit ar ger «urzh» peogwir e wel ul labour e-giz-se evel un doare da implijout ar frankiz a vez roet d'ar skolidi e diabarzh ur boelladenn sirius. Hervezañ n'eo ket un urzh o tiskenn, o tont deus an aotrou met kentoc'h ur c'hinnig, un hent da vont warnañ.

Evit labourat war an oberennoù eo aet Eric gant e 12 skoliad da weladenniñ DéDale. Pep skoliad a zibabe ur sal a blije dezhañ hag er sal e ranke lakaat skolidi all ar strollad da veajiñ dre e labour. Ar skolidi a chome ur c'hard eur er salig ha du-se e c'hellent kemer notennoù, fotoioù, videoioù zoken pe c'hoazh enrollañ trouzioù. Ret e

oa dezho bezañ awenet gant o santadennoù er sal. E-keit-se e chome Eric e-barzh an trepas peogwir e felle dezhañ lezel ar skolidi o-unan-penn gant an oberenn.

Ur wech distroet el lise ez eus bet kendivizet etre Eric hag ar strollad evit gouzout ar pezh a oa c'hoarvezet en DéDalE gant pep hini hag evit magañ ar preder. Goude e rank pep skoliad labourat war e skor liesvedia. Skrivañ a zo d'ober neuze. Labourer e vez war ur c'heriaoueg resis evit diskrievañ al lec'h hag evit lakaat an arvesterien da santout ar pezh a zo bet santet gant an hini a ginnig e skor. Lakaat ouzhpenn ar fotoioù pe ar sonioù bet enrollet er sal a zo d'ober ivez, hervez soñj pep skoliad. Al labour-se a vez graet war urzhiataerioù. Evit lod e vo war stumm un diaporama hag e komzont e-pad ma tremen an diaporama hag evit lod all e vo war stumm ur video hag e vo lakaet ar vouezh bet enrollet er video dre ur meziant frammañ. Eric a zispleg ne ro ket urzhioù resis d'ar skolidi e-keñver ar pezh o deus da ziskouez evit lezel pep hini dibab natur ar skor hervez an doare m'en deus santet an oberenn. Marteze eo a-bouez ar skeudenn ha marteze n'eo ket.

Daoust d'ar pezh a c'hellfed soñjal n'eo ket al labour war ar skor al labour dibenn hervez Eric rak ur prantad kendiviz a zo goude bezañ lakaet ar gamaraded da veajiñ en oberenn. Ar skoliad a rank bezañ gouest da zispleg an dibaboù en deus graet ha kompren penaos e oa bet resevet e labour gant ar re all. Ar pezh a zo gortozet a zo neuze ur preder war ar savboent ha war ar goulennoù en deus ar skoliad en em c'houlennet gantañ e-unan.

Boaz eo ar skolidi da labourat e mod-se ha gouzout a reont e rankont prederiañ a-hed ar raktres, da bep pazenn peogwir e vo goulennet ganto displeg hent o soñj. Ha gouzout a reont ivez e vo ret dezho reiñ o soñj war labour ar skolidi all ha dreist-holl bezañ digor o spered d'an doareoù all da welout an oberenn-mañ-oberenn. Gouzout a reont ivez e vezont priziet war ar skor bet savet ganto, ar yezh implijet ennañ dre skrid met ivez war galite ar c'hendiviz ha neuze war ar yezh dre gomz.

Eric a zispleg e klask muioc'h mui mont war-zu an embriziañ. Klask a ra lakaat al liseidi da gavout o-unan un doare da vezañ priziet. E-touez an doareoù d'ober e kinnig ma vo asantet ur skoliad bezañ priziet war an elfenn en do dibabet ouzhpenn elfennoù ret. Lakaomp e

c'hell ur skoliad choaz bezañ priziet war galite e skor a-fet senario met lezel da gostez an doare ma oa bet skeudennaouet. Mod all e kinnig ma vo ijinet gant pep hini e griterioù priziañ hervez ar pal en doa er penn-kentañ. Da skouer e c'hell ur skoliad sevel e griterioù pa vez priziet war implij an doare-divizout oc'h en em c'houlenn adalek pegoulz e c'heller soñjal eo bet gounezet ur varregezh gantañ pe n'eo ket. Seurt sujedoù a c'hell bezañ prederiet diwar o fenn a-stroll gant ar skolidi gant ar pal reiñ kiriegezh dezho e-keñver o hent gant ar yezh. Un doare eo c'hoazh da lakaat pep hini da gaozeal e brezhoneg, da arguzenniñ evit difenn ur soñj pe da reiñ da gompren d'ar re all un doare da welout ur gudenn pe un disoc'h.

E-keñver an naouturioù yezh ne embann ket Eric d'ar skolidi war betra e vo labouret e-pad ar raktres. Hervezañ e teuio war wel ezhommoù ar skolidi e-kerz ar raktres ha dav e vo da neuze respont d'o goulennoù ha displegañ dezho implij troiennoù a bep seurt peotramant an doare da ziskleriañ e soñj diwar-benn un dra bennak. Gouzout a ra en a-raok deus petra e vo ezhomm evit kas al labour da benn avat hag e-giz-se eo gouest da sevel e brogrammadur. Kemer a ra harp war zizunvanded ar strollad e-keñver live yezh ar skolidi ennañ peogwir e soñj dezhañ e vo sachet ar re wanañ gant ar re varrekañ. Ar c'hendiviz a implij kalz Eric en ur raktres. Hennezh a vo un digarez da gomz kalz ha techet e vo ar skolidi da zrevezañ ar c'helenn hervezañ ha neuze implijout stummoù frazennoù n'int ket boaz d'ober ganto pe ne anavezont ket. Remerket en deus e fell d'ar skolidi mont pelloc'h gant ar yezh pa vez lezet anezho mont war ho hent-int, an hent o deus dibabet, pa vezont desachet war an hent-se en desped dezho un tamm.

A-fet priziañ e implij Eric ar barregezhioù hag an notenn. Bemdez e vez priziet ar skolidi gantañ. Sellout a ra outo ha kemer a ra notennoù war ar pezh a reont hag ar pezh a lavaront. E-giz-se e c'hell heuliañ a-hed an trimiziad an doare ma labour ar skolidi pep barregezh. E fin ar raktres e jed un notenn gant ar c'hroazioù bet lakaet amañ hag aze da bep hini. Neuze n'eo ket tre ur briziadenn sammata hag a vez lakaet war an deiziataer ma vefe ret deskiñ ur gentel a-benn an deziad-se. Ar pal a zo reiñ talvoudegezh d'ar strivoù a reont ha d'o araokadennoù. Evitañ eo a-bouez c'hoazh metaforenn an hent hag o priziañ mod-se en deus ar santimant e sikour ar skolidi da vont gant o hent. Daoust ma ne implij ket Eric ar ger-se e c'heller

soñjal emañ o komz deus an disheñveliñ pa c'hortoz araokadennoù disheñvel gant pep hini ha pa soñj en deus pep hini e zoare da vont war-raok. A-benn ar fin e servij ar raktresoù o kemer harp war ar barregezhioù arz da lezel muioc'h a blas d'ur briziadenn subjektivel. Evit klozañ e lavar Eric en defe c'hoant mont war-zu ur sistem evel e Bro-Finland ma vez graet war-dro ar re yaouank kentoc'h evit priziañ anezho hervezañ.

Marteze e c'hell bezañ dedennus dielfennañ a pezh a lavar Eric o kemer e kont e labour el lise gant skolidi o tont deus hentadoù divyezhek. Seurt degouezh a sinifi o deus ar skolidi ul live mat pa erruont en eilvet klas. O live teorikel a zo etre A2 ha B1 hervez barregezhioù pep skoliad. Seurt live a aotre raktresoù ma n'emañ ket ar yezh kreiz preder ar skolidi met kentoc'h ur benveg evit ober traoù. Sañset int gouest d'en em zisplegañ mat hag ar pezh a zo d'ober a zo kenderc'hel war an hent-se o vegañ anezho. Er skolaj ma n'eo ket ken barrek ar skolidi peurvuiañ o deus muioc'h a ezhommoù a-fet stummoù frazennoù ha geriaoueg. Techet e c'hellont bezañ neuze da glask implijout ar galleg pa vezont dirak ur skoilh yezh e brezhoneg. Un dra a-bouez all eo oad ar skolidi. Doareoù Eric a glot mat gant tud yaouank hag a c'hell bezañ kiriek d'o labour hag a c'heller lezel o-unan o labourat pe dre strolladig hep bezañ nec'het gant o siriusted pe gant ar pezh a c'hellfent ober ma ne vezont ket evezhiet.

2.1.2.3 Mont d'ur festival sinema evit ur raktres saozneg

E-pad ar bloavezh-skol 2014-2015 he deus bet tro Maryline, kelennerez war ar saozneg, da labourat war ar sinema gant he skolidi. D'ar mare-se e rae war-dro ur c'hlasad pevare klas. Ur seurt kelenn dibab « euro » en doa ar c'hlasad-se, war-dro 25 skolajiad ennañ. Ne oa ket un opsion ofisiel dre ma ne oa danvez ebet a veze kelennet e saozneg ouzhpenn ar c'hentelioù yezh. Ar gelennerien all a glaske memes tra gant ar c'hlasad-se reiñ un nebeut poelladennoù e saozneg e-pad kentelioù matematikoù, Istor ha bevoniezh. Evit gwir e oa div eurvezh saozneg ouzhpenn gant skolidi ar c'hlasad-se. Pemp eurvezh saozneg o doa bep sizhun neuze, teir eurvezh evit seveniñ ar programm ofisiel ha div eurvezh evit ober traoù all gant muioc'h a frankiz. Dre ma ne oa ket ur c'helenn ret e oa a-bouez reiñ plijadur d'ar skolidi ha setu perak e oa bet divizet labourat gant raktresoù evel an hini a vo kontet amañ.

Ur raktres bras a zo bet aozet neuze gant Maryline, ur raktres a bado ul lodenn vat deus ar bloavezh-skol. Ar pezh a vo displeget evit poent a vo al lodenn sevenadurel. E miz Gwengolo e vez aozet bep bloaz festival ar film a Vreizh-Veur e Dinarzh abaoe 34 bloaz. Kement gouel a zo e bal lakaat war wel ar filmoù bet savet e Breizh-Veur. Kêr Dinarzh ne oa ket bet dibabet dre zegouezh abalamour ma vez kreñv al liammoù etre ar gêr hag ar boblañs en tu all deus mor Breizh pa oa Dinarzh ur gêr kouronkañ brudet en tu all deus ar mor. Stank e kaver neuze tier touristed saoz hag an aergelc'h a zo saoz awalc'h du-se c'hoazh hiziv an deiz. E-pad mizvezh ar festival ez eus ivez festival ar skolidi. Ur programmadur espres-kaer evit ar re yaouank a vez kinniget dezho. Hervez lec'hienn internet ar festival e teu bep bloaz 7000 skoliad deus kornôg Frañs da welout filmoù e Dinarzh ha da gemer perzh er gouel. Ar skolidi-se a c'hell bezañ bugale vihan peotramant liseidi ha studierien.

Loc'het o doa ar skolidi hag ar gelennerien abred diouzh ar mintin deus Muzilheg ma labouront evit bezañ d'an eur e Dinarzh evit sellout ouzh ur film kentañ. Da greisteiz e oa bet pikniket war an draezhenn, just e-kichen Palez an Arzoù hag ar Festival. Goude merenn o doa ar skolidi ur c'hoari roudenn d'ober e kêr evit dizoleiñ ar gêr ha kompren levezon ar Saozon war an doare ma oa bet aozet ar gêr. Goulennoù diwar-benn an Istor a oa ha diluzioù a oa da glask betek mont da welout an dud ha goulenn respontoù ganto. Kavet o doa ar skolidi touristed a Vro-Saoz, pe tud staliet e Dinarzh evit respont d'o goulennoù e saozneg. Da c'houde e oa eil prantad film an devezh ha neuze int distroet da Balez ar Festival. Ur wech echu ar film e oa deuet an eur da zistreiñ da Vuzilheg.

Poent e oa neuze labourat war ar filmoù bet gwelet. Dibab ur film o doa d'ober e-touez an daou o doa gwelet e Dinarzh. Ar pal a oa kinnig ar film-se e sal sinema Muzilheg. Kendiviz a zo bet neuze etre ar skolidi ha gallout a rae pep hini reiñ e soñj war ar pezh en doa kavet mat pe fall. Pep hini a c'helle difenn e film dre gomz. Ar gaozeadenn-se a veze graet e saozneg gant Maryline. D'ar poent-se eo erruet er raktres Rémi, ur c'hasour arbennik war ar sinema hag a labour en ur gevredigezh a vro-Wened anvet Souliers. Hennezh ne labour ket e saozneg ha neuze e oa hanter-hanter e saozneg hag e galleg al labour. E bal kentañ a oa lakaat ar skolidi da brederiañ war ar filmoù o doa gwelet hag ivez termeniñ pe hini a vije an hini aesañ da ziskouez da

dud a bep seurt e sinema bourk Muzilheg. E miz Kerzu e ranke ar film bezañ bannet. A-du e oa ar sal sinema hag ur gopienn deus ar film a oa bet miret. A-benn ar fin o deus ar skolidi dibabet ar film *About Time* (*Il était Temps* e galleg), deuet er maez e 2013. Hennezh a zo bet choazet gant ar skolidi rak an danvez a denn d'ar skiant-faltazi : da 21 bloaz e ra Tim Lake anaoudegezh gant e c'halloud beajiñ en amzer. Dipitet m'eo Tim gant un darvoud en e familh e tiskouez tad Tim d'e vab e c'hall an holl wazed eus ar familh beajiñ en amzer. Ne c'hall ket Tim cheñch red an istor met gallout a ra cheñch ar pezh a c'hoarvez hag a zo c'hoarvezet en e vuhez. Fromet eo bet ar skolidi gant an istor hag o deus marteze soñjet e oa tost deus traoù a c'hellont bevañ.

Dielfennet eo bet ar film en un doare tematek e saozneg gant Maryline ha Rémi en deus graet war-dro ar sell teknik, e galleg ar wech-mañ. Prederiet o deus war implij ar son hag ar sonerezh er film oc'h adwelout tammou deus ar film hep ar sonerezh pe gant ur sonerezh all a-benn kompren penaos eo levezonet fromoù ar seller gant ar sonerezh ouzhpenn an darvoudoù diskouezet er film. Memes mod o deus prederiet war an doare da gontañ an istor er film. Da skouer o deus gwelet ar skolidi ur senenn bet adframmet gant Rémi gant talennoù skarzhet kuit evit kompren ez eus ezhomm da ziskouez tra-mañ-tra evit treuzkas fromoù d'an dud, a vefe spontañ anezho pe lakaat anezho da c'hoarzin. Displeget eo bet dezho perak e oa bet implijet an talennoù-se kentoc'h evit reoù all. Al labour-se a servijo diwezhatoc'h da sevel ur film met al lodenn-se a vo displeget pelloc'h.

Ar film *About Time* a zo bet bannet e Muzilheg, un abadenn digor d'an holl hag e yezh orin ar film. Kaset e oa an nozvezh gant ar skolidi p'o deus kinniget ar film e saozneg. Prientet ha skrivet e oa bet ganto un nebeut testennoù e saozneg evit rentañ-kont deus ar pezh o doa komprenet er film evit kinnig d'an holl ur sell war ar film diskouezet dezho. Implijet o doa ar pezh o doa desket gant Maryline o labourat war an tem ha gant Rémi o labourat war an doare filmañ. Leun-chouk e oa ar sal ha laouen e oa ar skolidi o kemer ar mikro da zisplegañ an traoù.

Evit prientiñ an nozvezh er sinema o deus ranket ar skolidi sevel skritelloù da vrudañ an abadenn er bourk. Evit prientiñ al labour-se o deus ar skolidi dielfennet un nebeut skritelloù filmoù bet bannet e Dinarzh ar bloavezh-se evit kompren penaos e vez savet ur skritell

sinema ha neuze ur skritell vrudañ. Penaos desachañ evezh an dud ? Penaos e vez frammet ? Peseurt elfennoù a-bouez a zo ? Penaos lakaat war wel ar film a vo bannet er sinema ? Penaos lakaat an div yezh war ar skritell ? Rannet e oa bet ar c'hlasad e strolladigoù ha pep strollad en deus savet ur skritell gant sikour ar gelennerz war an arzoù. Goude e oa bet votet evit ar skritell wellañ ha honnezh a oa bet strewet e pep stal e Muzilheg. Aze o doa komprenet ar skolidi e oa dija ur skritell ur sell war ur film, un doare da ziskouez perzhioù ur film hag a-bouez bras eo dibab mat an elfennoù a vez lakaet warni.



The film *About time* presented by the European class

On December 16th, 2014, the pupils of the European class proudly presented the film *About Time* to over 100 viewers who had come to support them. This special evening was a great success and the result of many hours of work and practice. The following texts were written by the pupils themselves.

Maryline



*"Good evening everybody. We hope you are well. We are happy to present to you the film, *About Time*. We saw it at the British Film Festival of Dinard with our class and we loved it! This film was written and directed by Richard Curtis. It was produced by Tim Bevan, Eric Fellner and Nicky Kentish Barnes. The film is two hours long and it came out on 6th November 2013."*

by [Name]

*"A few words about the film himself
During a disastrous New Year's Eve party, Tim is told by his father that for generations, the men in the family have had a secret power they can travel in time. Tim decides to use this power to find a girlfriend but he is also going to discover that this power doesn't spare him life's misfortunes."*

by [Name]




Skeudenn 1. *Bannañ About Time e sal sinema Muzilheg (lec'hienn internet ar skolaj, 2014)*

Hervez Maryline e oa bet pinvidik-tre al lodenn gentañ deus al labour war ar sinema peogwir e oa bet desket ur bern traoù gant ar skolidi ha graet o doa a bep seurt traoù. War an dachenn sevenadurel int bet da gejañ gant tud deus ar vro pa oant e Dinarzh ha dizoloet o deus al liamm etre Breizh ha Breizh-Veur. Sellet o deus ouzh filmoù a Vreizh-Veur hag a ziskoueze perzhioù deus kevredigezh ar vro. Merzet o deus pegen barrek eo ar Saozon war implij ar fent evit komz deus un danvez sirius, ar c'hleñved er film *About Time* da skouer. Gouest int bet da geñveriañ gant an doare ma vije diskouezet seurt sujed en ur film gall. Er memes tro e oa ar wech kentañ dezho mont d'ur festival sinema.

E-keñver ar barregezhioù yezh e oa bet labourer kalz dre gomz evit kompren. Ranket o deus kompren ar filmoù evit kregiñ met ivez kompren ar Saozon o deus gwelet e Dinarzh. Ranket o deus kompren

an eil egile ivez pa oa bet debatet diwar-benn ster ar film pe diwar-benn choaz ar skritell wellañ. Evel-just o deus bet tro ivez da gomz evit displegañ o soñj, o savboent. Evit komz dirak an dud er sinema e oa bet labouret war an distagadur hag ar pouez-mouezh. Dre skrid o deus labouret ivez p'o deus skrivet ar prezegennoù da lavarout er sal sinema. Al labour hantererezh-se a oa dedennus kennañ.

Labour a zo bet war varregezhioù arzel ivez p'o deus ar skolidi dielfennet un danevell ha skeudennoù fiñv o kompren luniannoù stil. Ranket o deus ivez labourat war an doare da frammañ ur skritell da lavaret eo an doare da gehentiñ o veskañ skeudennoù ha testennoù evit kas ur soñj pe lakaat war wel un dra.

A-fet priziañ e oa bet priziet ul lodenn deus al labour-se. Hervez kont he deus Maryline priziet dre gomz hepken, e-pad ar prantadoù a gendiviz da skouer, an ampartiz da gomz an eil gant egile. Al lodenn a-zivout ar skritelloù a zo bet priziet gant ar gelennerez war an arzoù. Ne oa ket bet priziet al labour dre skrid rak lodennoù all deus ar raktres a implijo kalz muioc'h ar barregezhioù-se.

2.1.2.4 Mont d'ar mirdi evit ur sekañs brezhoneg

Ouzhpenn bezañ bet gant e skolidi da welout DéDaE e oa aet Eric d'ar mirdi gant liseidi all. E kreiz-kêr Gwened emañ Mirdi arzoù-kaer ar C'hovu, en ur savadur hag a oa gwechall koc'hu ar gêr hag er memes tro sez palez justis an duced. E 1982 e oa bet krouet ur mirdi gant ar gumun evit gallout diskouez an oberennoù arzel a veze gwelet a-raok e lec'hioù disheñvel e kêr. Daoust ma n'eo ket mirdi brasañ ar vro e c'heller gwelout ennañ taolennoù gant Delacroix ha Monet ouzhpenn ur bern oberennoù livet gant arzourien ar vro pe bet awenet gant Breizh evel Peslin ha Bouchor.

A-raok mont d'ar mirdi e oa bet graet ul labour da gompren dre skrid er c'hlas. Eric en doa roet d'e skolidi un nebeut dielloù e brezhoneg diwar-benn an arzourien a veze gwelet o labour er mirdi ha diwar-benn an temoù a labourent warno. Dielloù all a oa e galleg pa n'eo ket aes atav kavout pep tra e brezhoneg. Roet eo bet d'ar skolidi ur mell fichenn gant goulennnoù diwar-benn an taolennoù a vefe gwelet er mirdi. Eric a oa aet a-raok e-unan war an dachenn evit prientiñ ar fichennoù-se.

Gweladenn ar mirdi ne oa ket heñchet. Ar skolidi a ranke pourmen el lec'h evit gwelout an oberennoù a-bouez evit al labour, da lâret eo oberennoù a ziskoueze skeudennoù deus Breizh gwechall. Daou-ha-daou e oant. Hervez Eric eo gwelloc'h lezel ar skolidi daou-ha-daou en ul lec'h e-giz-se evit kaout skolidi en o bleud rak ral e ya lod d'ar mirdi ha neuze n'int ket boaz da vezañ e seurt lec'h didrouz. Ouzhpenn-se e c'hell un daouad bezañ efedusoc'h pa gaver e-barzh pep daouad ur skoliad a c'hell bezañ barrekoc'h evit egile. Un eurvezh int chomet er mirdi o tremen deus un oberenn d'eben. Pep daouad en doa un hent disheñvel kuit da sevel ur bagad e-kreiz ar mirdi. Ur wech echu al labour da respont d'ar goulennoù dre skrid e ranke pep skoliad dibab un daolenn a blije dezhañ muioc'h eget ar re all ha kemer ur foto deus an oberenn. Evit ober kement-se e c'hellent implijout o fellgomz hezoug war ar stumm BYOD (diwar ar saozneg Bring Your Own Device pe degasit hoc'h ardivink-c'hwi).

Da c'houde en doa pep skoliad da brientiñ un displegadenn dre gomz da ginnig d'ar c'hlasad. Er brezegenn-se e rankent displegañ peseurt oberenn o doa dibabet ha displegañ o choaz. Un diaporama o doa d'ober gant ar meziant dibabet ganto. An darn-vrasañ deus ar skolidi o deus implijet Powerpoint. Diskrivañ an oberenn o doa d'ober ivez en un doare aozet ha frammet, o sevel ur steuñvenn. Ar plan-se a ranke ivez kinnig un doare da zielefennañ an oberenn. Ret e oa dezho sevel liammoù gant kendestenn an oberenn ha neuze implijout an dielloù bet roet dezho a-raok ar weladenn. E fin o frezegenn e rankent displegañ penaos o doa labourer evel evit ur soutenañs ha respont d'ar goulennoù a veze savet gant o c'hamaraded ha gant Eric.

Hervez Eric ne oa ket liammet al labour-se gant un tem sevenadurel hepken. Gallout a rae lakaat e pleustr temoù evel « krouiñ ha daremprediñ gant an arzoù » en eilvet klas pe « tiriad ha memor » e kentañ klas, hervez an oberenn bet dibabet gant ur skoliad ha hervez an doare ma veze lennet an oberenn. Ar barrezhioù labourer e-kerz ar sekañs a oa ar gompren dre skrid pa oa ret dezho kompren an teuliad a zielloù bet roet dezho, ar gomz e-unan pa oa ret dezho kinnig o labour dre gomz dirak ar c'hlasad. Tu 'zo ivez ouzhpennañ barrezhioù liammet gant an urzhiataerezh hag an niverel p'o doa fotoioù da gemer hag un diaporama d'ober. Un doare da labourat ar PIX eo neuze. Kemer a ra seurt raktres perzh en hentad a zeskadurezh arzel ha sevenadurel.

Priziet e oa bet al labour-se evel un hollad. Ne oa ket bet notennet al labour da gompren dre skrid peogwir e oa ul labour etre nemetken. Priziet ha notennet e oa bet al labour dre gomz avat. Hervez Eric e c'hell an notenn-se bezañ kontet evit ar varregezh komprenidigezh peogwir o doa ezhomm ar skolidi da gompren an urzhioù pe ar stern hag an teuliad bet roet dezho evit kas al labour da benn. An diaporama ne oa ket priziet met gallout a rae ar skolidi koll poentoù ma ne heulient ket an alioù a oa bet roet dezho. Da skouer e oa arabat dezho skrivañ re war an diaporama ha lenn ar pezh o doa skrivet.

Aze e weler e c'heller mont ledan a-walc'h war ar barregezhioù gant ur raktres hag a zo eeun a-walc'h e vont en-dro. Hervez Eric eo ar blijadur perzh mat seurt sekañs abalamour ma vez laouen ar skolidi da vont war an dachenn, dreist-holl pa vez kinniget dezho mont d'ul lec'h n'anavezont ket. Ouzhpenn-se e vez plijadur da ezteurel e soñj diwar-benn un dra bet gwelet e gwirionez.

2.2. *Krouiñ er yezh tal*

E lodenn gentañ ar c'hounskrid-mañ e oa bet displeget penaos en doa cheñchet kelenn ar yezhoù evit dont da vezañ kelenn implij ar yezhoù. Ar c'helenn dre ober a lak ar skolidi da implijout ar pezh a zeskont ha muioc'h d'ober traoù evit deskiñ. Displeget e oa bet ivez e oa an arzoù un doare da gomz, d'en em zisplegañ, da reiñ da c'houzout fedoù ha santimantoù, un doare da vont e darempred gant an diabarzh hag an diavaez, da zaremprediñ ar bed. Hervez ar framm europat e rank ar c'helenn mont war-zu un implij gwirvoudel deus ar yezh en ur bed gwirvoudel : «Les activités de classe, qu'elles se veuillent « authentiques » ou essentiellement « pédagogiques » sont communicatives dans la mesure où elles exigent des apprenants qu'ils en comprennent, négocient et expriment le sens afin d'atteindre un but communicatif. Dans une tâche communicative, l'accent est mis sur le succès de l'exécution de la tâche et, en conséquence, le sens est au centre du processus tandis que les apprenants réalisent leurs intentions communicatives. Cependant, dans le cas des activités conçues en vue de l'apprentissage et de l'enseignement d'une langue, l'intérêt de la performance porte à la fois sur le sens et sur la façon dont le sens est compris, exprimé et négocié. Dans le plan général présidant au choix des activités et à leur organisation, il faut maintenir constamment

l'équilibre toujours instable entre forme et fond, aisance et correction de telle sorte que la réalisation de la tâche, mais aussi les opérations d'apprentissage, puissent être facilitées et convenablement identifiées.» (CECRL, Kuzul Europa, 2001) Gwelout a reer mat e rank ar c'hehentiñ bezañ e-kreiz kelenn ar yezhoù hag implijout an arzoù a zo un doare da gehentiñ. Evel ma oa bet lavaret dija emañ an arzoù e kreizig-kreiz buhez ar grennarded ha gwirvoudel eo dezho an ijin a ya ganto.

2.2.1 *Implijout ar video*

Ma 'vez soñjet en ur stumm arzel a zo tost-tre diouzh bed ha preder ar grennarded e soñjer diouzhtu er video hag el luc'hskeudenniñ, ur stumm stag outi. Ar mediaoù o deus ar grennarded ar muiañ a zarempredoù ganto n'int ket mui war baper met kentoc'h war ur skramm. Boaz int neuze da welout videoioù a bep lec'h, war ar post tele ne sellont ket outañ kalz ken, war an urzhiataer evit ar re goshañ ha dreist-holl war o fellgomz hiniennel. Gwelloc'h c'hoazh, ouzhpenn sellout ouzh fotoioù ha videoioù a reont pa sevenont o-unan videoioù evit c'hoarzhin gant o mignoned pe da vezañ skignet war ar rouedadoù sokial. Moarvat eo ar video ar varregezh arzel a vestroniont ar gwellañ. Ha koulskoude e reont an traoù hep bezañ heuliet kentel ebet diwar-benn an danvez peurvuiañ. Neuze n'o deus anaoudegezh ebet a-fet teorienn pe, hag ur gudenn eo, a-fet gwirioù.

Gant seurt skor e weler neuze un digarez da vont war dachenn ar re yaouank, un obererezh a blijjo dezho a dra sur. Er memes tro e c'hell ar c'helenner reiñ dezho ur preder war ar pezh a reont gant o ardivink, war an doare d'e implijout. Aze ez eus ivez digarezioù da leurreniñ an darempredoù etre an tudennoù, da vont war-zu un teulfilm ma vo moaien labourat barregezhioù sevenadurel pe ur film faltazi ma c'hello ar skolidi krouiñ ur bed a c'hellont embann evel gwirvoudel. Mod pe vod e ranko ar skolidi implijout barregezhioù yezh evit kas da benn o raktres. A-bouez e vo pa chomo o labour enrollet en ul lec'h bennak, diskouezet d'an holl marteze. Mennet e vint da ziskouez pegen brav eo o froduadur ha pegen barrek int koulz ha mirout ar gwirioù war o skeudenn.

2.2.1.1 Sevel un tutorell e saozneg

E pempvet klas e labour Claire, kelenneret war ar saozneg, war ur sekañs ma vez desket gant ar vugale da implijout an doare gourc’hemenn ha gerioù liammet gant ar boued hag ar gegin. War an dachenn sevenadurel e c’hell ar skolidi dizoleiñ meuzioù ar bed saoz-hag-amerikan ha boazioù an dud e-keñver ar predoù. Ar sekañs-se a zo renket er rummad «kejañ gant sevenadurioù all» ha peurluviañ e vez graet e miz Kerzu.

Diwar an dorn-levr *Bloggers* (La Maison des Langues, 2017) eo bet savet ar sekañs. E-kerz ar sekañs-se e oa bet goulennet gant ar skolidi kompren videoioù gant Jamie Oliver. Hennezh a zo ur c’heginer brudet er Rouantelezh-Unanet. Kas a ra abadennoù a den d’ar gegin war an tele saoz, war Channel 4. Er memes tro eo perc’henn deus ur chadenn tier-debriñ ha kas a ra ivez abadennoù war Youtube. An abadennoù-se a zo tutorelloù berr peurluviañ ha videoioù dudius tro-dro d’ar gegin.

Da vare labour dibenn ar sekañs e rank ar skolidi sevel un tutorell filmet evit displegañ penaos e vez fardet cookie. Daou-ha-daou e labour ar skolidi war an danvez-se, lezet e vez ar skolidi dibab o c’henseurt. Er c’hlas e prientont o video e-pad div eurvezh. Skrivañ a reont ur senario ennañ listenn an aozennoù hag a vo diskrivet ganto. Displegañ a reont ivez peseurt mod e vez fardet cookie gant an aozennoù-se. Ret eo dezho implijout ar stummoù frazennoù bet desket e-kerz ar sekañs, an doare gourc’hemenn hag ar c’heriaoueg a rank bezañ ar pinvidikañ posubl hervez ar pezh o deus desket a-raok. Claire a zispleg dezho ivez e rankont heuliañ un nebeut urzhioù a-zivout an doare ma vo savet ar video. Ret eo dezho neuze leurreniñ o video ha soñjal en doare d’en ober. E-pad emañ ar skolidi o labourat er c’hlas e tremen ar gelenneret da welout pep strollad evit teurel ur sell ouzh ar pezh a skrivont. Priziet eo al labour neuze ne zifazi ket an testennoù a vez skrivet gant ar skolidi. Ma vez kavet stank ar memes fazioù gant meur a strollad e adkemer Claire ar gaoz evit lavarout d’ar c’hlasad chom war-evezh. Ne ya ket da reizhañ ar fazioù a wel peogwir ne fell ket dezhi e vefe soñjet gant ar skolidi e oa bet sikouret muioc’h ur strollad evit egile. Pouezañ a ra kalz war bouezusted al labour da brientiñ ar video. N’hall ket bezañ graet war ar prim. Setu perak e laosk amzer d’ar vugale.

An urzhioù evit sevel ar video a zo resis a-walc’h. Ar gwir o deus da filmañ div dalenn hepken, da lavaret eo daou video da lakaat asambles. War an dalenn gentañ e vez gwelet ar skolidi ha neket o daouarn hepken. Kas a reont o video, kinnig a reont an aozennoù, prientiñ a reont ar rekipe. Un elipsenn a rankont ober p’emañ ar gwastilli o poazañ er forn. War un eil talenn e tiskouezont o c’houignoù hag e klozont o video. Ret eo dezho anavezout o zestenn dre an eñvor rak difennet eo diskouez ur follenn war ar video. Ar video a bad teir munutenn d’ar muiañ evit ma ne vo ket re hir da sellout ha da briziañ gant ar gelenner. An dra-se a dalvez e rankont pleustriñ a-raok filmañ ha marteze filmañ meur a wech. Peurvuiañ e tiskouez Claire skouer ur video bet graet ar bloaz a-raok evit ma vo komprenet mat gant ar skolidi ar pezh a zo gortozet ganti.

Ar skolidi a rank filmañ o video er gêr ha setu perak e lez ar skolidi dibab gant piv e labouront. Peurliesañ e c’houlennot gant o zud pe gant ur breur pe ur c’hoar filmañ. Lod ne reont ket avat, ar pezh a vez merzet pa ne vez ket sternet mat ar video. Lod all c’hoazh eo diaes dezho ober al labour filmañ er gêr peogwir emaint o chom pell an eil re deus egile pe peogwir n’o deus ket peadra da filmañ er gêr. Abalamour da se e aotre Claire ar re o defe ezhomm da ginnig o abadenenn er c’hlas war-eeun dirak ar c’hlasad. Claire a zispleg he deus gwelet abadennoù graet mod-se hag a oa plijus-tre ivez gant skolidi o tegas er c’hlas a bep seurt prestoù evel ur forn graet gant kartoñs da skouer hag evel-just kouignoù da rannañ gant ar peurrest deus ar c’hlasad. Ar re a film er gêr a framm peurvuiañ war-eeun war o ardivink filmañ gant un arload bennak pe filmañ a reont ur skeudtapadur hepken oc’h ober un ehan e-kreiz. Daoust ma n’eo ket aotreet sañset e rent lod daou damm video e lec’h unan. Ne vezont ket kastizet abalamour da se avat, padal e vez tennet poentoù d’ar re a rent ur video re hir pe ne heuilh ket an urzhioù. Evit rentañ o labour e kas ar skolidi o video war an egorenn labour niverel, Office 365 en o skolaj. Ar re a zo gorrek o c’hevre internet a c’hell rentañ o labour war un alc’hwez USB.

Plijout a ra kalz ar sekañs-se d’ar gelenner. Peogwir eo mennet ar skolidi ha bep bloaz e kavont soñjoù nevez evit seveniñ o video. Hervezi e vez santet ar blijadur o deus bet o labourat war an danvez-se hag oc’h en em gavout er gêr evit filmañ. Hervez kont eo efedus ar mod-se da bleustriñ an naouturioù. Ar skolidi a anavez mat geriaoueg

ar gegin hag ar boued e fin ar sekañs ha peurvuiañ e vez implijet mat an doare gourc'hemenn ganto. Ne gemer ket kement-se a amzer er bloaz peogwir e vez graet al labour filmañ hag ul lodenn deus al labour da brientiñ er gêr. Hervez Claire eo a-bouez ivez lakaat ar skolidi da zeskiñ dre an eñvor abalamour m'eo ur varregezh a vez ezhomm deus outi pa vez desket ur yezh.

A-fet barregezhioù just a-walc'h o deus tro ar skolidi da labourat war al leurenniñ hag ar seveniñ. Priziet e vez an doare ma vez kempennet o video ganto met kontañ a ra evit pevar foent hepken diwar ugent. Titl al lodenn-se war ar fichenn a vez roet d'ar skolidi a zo «seveniñ al labour» ha neket ur varregezh tennet deus ur referañser war an arzoù. Pa seller ouzh referañser an arzoù neuiziañ e kaver evit seurt labour ar varregezh «Recourir à des outils numériques de captation et de réalisation à des fins de création artistique» er rummad «Arnodiñ, produiñ, krouiñ» hag ar varregezh «Concevoir, réaliser, donner à voir des projets artistiques, individuels ou collectifs» er rummad «Lakaat ur raktres da dalvezout». Splann eo neuze emañ amañ ar pevar foent a vez roet evit ar seveniñ evit broudañ ar skolidi d'ober o seizh gwellañ ha neket evit priziañ ur varregezh resis. Lavarout a ra Claire n'he deus ket azasaet ar poentoù-se en ur varregezh war an arzoù war ar meziant merañ (Pronote pe Ecole Directe da skouer) kennebeut. Gallout a rafed en em c'houlenn hag ez eus ezhomm deus ar poentoù-se pa ra ar skolidi al labour-se gant plijadur. Marteze n'o deus ket ezhomm da vezañ broudet evit ober kement-se.

Ar peurrest deus ar poentoù a zo liammet gant ar fonologiezh (4 foent), an distagadur hag ar veridigezh (4 foent), implij ar geriaoueg (4 foent) hag ar yezhadur (4 foent). War an daolenn bet roet d'ar skolidi n'eo ket bet resisaet an diforc'h etre tapout 3 foent pe 4 foent war ul linenn bennak en daolenn.



Skeudenn 2. Skolidi pempvet klas, o filmañ o rekipe (Ar skolidi, 2023)


2.2.1.2 Azasaat ur romant e brezhoneg

Eric a zo kelenner war ar brezhoneg met un eil micher en deus. Filmaozour eo ivez ha tro en deus da labourat gant Frañs 3 da skouer. Teulfilmoù en deus sevenet koulz ha filmoù faltazi. A-drugarez d’e skiant-prenet emañ en e vleud pa c’houlenner gantañ penaos e c’heller labourat gant ar video en ur gentel brezhoneg. Ar skouer a vo displeget emañ a zo ur raktres bet graet gant skolidi e CM2. Ar vugale o doa ul live mat-tre e brezhoneg hervez Eric.

Azasaat ur romant kentoc’h evit ijinañ un istor penn-da-benn evit ur raktres e-giz-se a zo dedennus hervez Eric rak bez’ ez eus ur skrid diazez hag a zo skrivet mat. Ouzhpenn-se en deus merzet ar c’helenner eo aesoc’h degas naouturioù nevez war ar yezh o kemer harp war ur skrid. Mod all eo techet ar vugale da skrivañ o istor gant ar pezh a anavezont dija. Divizet en deus Eric azasaat ur romantig bet skrivet gant Gi Bideau hag embannet e 2003, *Raket* e ditl. Ar romant-se en deus dibabet peogwir e klote mat gant ar raktres hervezañ. Ar romant a zo berr a-walc’h, 47 pajennad, evit bezañ lennet gant bugale. Skeudennoù a zo el levr, pezh a sikouro al labour en ur mare bennak. War ar golo pevar ez eus un destennig o tisplegañ deus petra a zo kaoz el levr. Rannet eo ar romant e pennadoù. Un dresadenn a zo war ar

golo. Ar romant a zo bet skrivet evit bezañ lennet gant bugale ha krennarded neuze n'eo ket re ziaes ar yezh a lenner ennañ ha tost eo an tem deus bed e lennerien. Ar romant a gont istor Mikael, ur paotr yaouank hag a vez gwallgaset gant un den all. E-unan-penn en em sant pa ne gred ket komz deus ar pezh a c'hoarvez gantañ.

Ar raktres a heuilh ur steuñvenn hag a vesk lenn ha krouiñ. Da lavaret eo ne vez ket graet un obererezh goude egile met an daou er memes tro. Ret eo kenderc'hel da gaout skolidi mennet betek penn ar raktres ha lenn al levr en un taol a c'hell bezañ diaes da lod, dreist-holl pa n'eo ket boaz skolidi zo da lenn, ne vern ar yezh. Kroget e vez o klask kompren deus petra a zo kaoz el levr oc'h implijout ar golo hag an titl. O kendivizout gant ar skolidi e vez diskrivet ar skeudenn ha klasket e vez ober liammoù gant an titl. Gallout a ra bezañ martezeadennoù a-zivout an dudenn a vez gwelet evit divinout hag eo an dudenn bennañ pe e enebour. Da c'houde e ya pelloc'h an anaoudegezh gant al levr pa vez lennet testennig ar golo pevar. An darempred kentañ gant an destenn eo ha reiñ a ra un nebeut elfennoù nevez e-keñver ar pezh a zo bet gwelet war ar golo. Aze e c'hell gerioù zo bezañ nevez ha neuze e c'heller kenderc'hel gant ar martezeadennoù. Gant ar pezh a zo bet komprenet en destennig e c'hell ar skolidi gwiriañ pe get ar martezeadennoù o deus savet pa oant o sellout ouzh ar golo. War-lerc'h e ro Eric roll ar pennadoù d'ar skolidi. Ganto e c'hell c'hoazh ar skolidi sevel martezeadennoù nevez. Ha memes mod a vez graet gant an nav zresadenn a gaver el levr. Pa seller ouzh an tresadennoù diwezhañ e c'heller ijinañ penaos e echu an istor ha marteze ivez kavout penaos e tremenomp deus an dresadenn gentañ d'an hini ziwezhañ o tisplegañ peseurt hent en deus graet an haroz ha piv eo ar plac'h a weler er fin. Al lodenn-se a servij da lakaat ar skolidi da vezañ kurius e-keñver an istor. E-giz-se o deus c'hoant ar skolidi da lenn al levr evit gouzout ar wirionez. Mod-se e krogont ivez gant ar preder war an doare film a vo graet ganto ha marteze war an tudennoù a vo gwelet war ar skramm hag an aktourien a c'hoario anezho. Servijout a ra ivez da lakaat anezho da gomz ha da labourat war an doare da sevel frazennoù gant martezeadennoù o welout plas ar verb displeget goude marteze da skouer.



Skeudenn 3. Golo Raket (Bideau, 2003)



Skeudenn 4. Golo pevar ar romant Raket (Bideau, 2003)

Goude e vez kroget gant lenn ar romant. Kregiñ a ra goustadik rak ar pennad kentañ a ra div bajennad hag an eil a ra teir fajennad. Aze e vez roet d'al lenner ur gendestenn, dekoriou, ur mare ha tudennoù pennañ an istor. Darvoudoù a zo ivez hag Eric a ra un ehan el lenn aze evit lezel ar vugale ijinañ ar pezh a c'hoarvezo goude. Ouzhpenn kaout ezhomm da gompren an daou bennad kentañ o deus ezhomm ar skolidi da implijout an amzer da zont. Displeget e vez dezho neuze peseurt mod e vez graet gant an amzer-se. War-lerc'h e vo kendalc'het da lenn ar romant a-dammoù ha pennadoù zo a vo lennet er gêr evit lakaat ar skolidi d'en em welout gant ul levr e brezhoneg er gêr hag evit diskouez dezho eo posubl lenn astennet war e wele e brezhoneg hag e c'hell kement-se bezañ ur blijadur dezho. Er c'hlas, goude ur prantad lenn e c'heller priziañ o barregezh da gompren dre skrid. Marteze e c'heller disheñveliñ ar briziadenn abalamour ma c'hell live ar skolidi bezañ dizingal-tre er c'helc'hiad 3. Da lod e vez roet ur c'houlennaoueg liesdibab lakaomp. Aze eo un doare da welout ivez hag o deus komprenet mat an istor evit poent, an darempredoù etre an tudennoù, o zemz-spered, an darvoudoù pennañ hag all.

En ur mare bennak eo poent sevel liammoù gant ar film da sevel. Pouezus eo mirout ar pal-se mod all ez eus riskl ar goll a youl ar skolidi ma vez chomet re bell war al lenn. Aze e c'heller klask dija lakaat war-wel ar pezh a zo pouezus el lodennoù bet lennet betek-henn. En ur glask diverrañ ar pennadoù bet lennet gant ar skolidi eo un doare da gompren dija e vo dibaboù d'ober evit sevel ar film peogwir ne vo ket tu diskouez pep tra. Ar pal a zo ivez lakaat ar skolidi da gompren en deus pep hini anezho savet skeudennoù en e benn pa oa o lenn ha neuze ez eus ouzhpenn un doare da welout ha da ziskouez darvoudoù istor ar romant. Moarvat ez eus ezhomm aze da arguzenniñ evit difenn e soñj hag implijout gerioù resis.

Evit kreñvaat al liamm etre al labour lenn hag al labour war ar film e tiviz Eric goulenn gant ar skolidi filmañ ar pezh a c'hoarvez e pennad 3 al levr. Dibab a ra ar pennad 3 peogwir eo berr ha n'eus ket kalz a zarvoudoù ennañ. Lezel a ra ar c'hlasad, bet rannet e strolladigoù, en em zizober gant al labour-se. Filmañ a reont gant dafar simpl evel un dablezenn pe ur smartfon hag un eurvezh o deus evit filmañ ar pennadig-se. Pa erru fin an amzer bet roet dezho e ra Eric ur bilañs ganto. N'o deus ket filmet kalz tra hag ar c'helenner a ziskouez bezañ dipitet padal e oar mat ne oa ket posubl dezho ober al

labour betek penn. Ar pal a zo lakaat anezho da gompren e kemer amzer filmañ. Dreist-holl, ar pezh en deus kemeret amzer a zo an tabutoù a-zivout ar pezh a vo filmet. Aze o deus remerket o-unan ar skolidi ne oa ket posubl treuzfurmiñ e skeudennoù un destenn lennegel peogwir en deus pep hini er strollad ur sell disheñvel war ar pezh a c'hoarvez er pennad. Dibaboù a zo d'ober neuze a-stroll evit gouzout resis ar pezh a zo da filmañ a-raok prederiañ war an doare ma vo filmet. Ar skolidi o deus merzet ivez e oa diaes prederiañ war ar prim ha komz ha selaou ar re all pa ne vezont ket a-du an eil gant egile. Diwar ar fazioù-se e c'hell Eric ober ur prantadig stummañ d'ar filmañ. Al lodenn-se a servij d'ober un ehan gant al labour lennegel a gompren dre skrid. Goude ar prantad-se e vo mennet en-dro ar vugale da labourat war ar skrid evit mont war-raok er raktres peogwir e vo mal warno labourat en-dro gant ar video. Ouzhpenn-se e komprenont eo a-bouez kompren mat al levr evit gallout dibab an tammoù da lakaat er film.

Goude ar prantad-se en em c'houlenn ar skolidi alies hag e talv ar boan mirout pep pennad ha pep tudenn. Eric a glask lakaat ar skolidi da zielefennañ rol pep tudenn evit kompren ar pezh a zegas d'an istor. A-drugarez d'ar fazioù bet graet pa oa ar skolidi o labourat o-unan e vez komprenet ne vo ket moaien filmañ pep tra pa vefe kalz re hir d'ober. Al lodenn-se deus al labour a lak war-wel barregezhioù liammet gant an arzoù dreist-holl met a-benn ar fin ez eus bet komzet kalz evit mont war-raok ha neuze e oa bet labourer war ar yezh er memes tro. Kenderc'hel a ra Eric da labourat mod-se betek ma vez echuet gant al levr. A-wechoù e vez lennet tammoù er c'hlas hag a-wechoù all er gêr.

Ur wech echu lenn al levr e sav ar skolidi strolladoù evit divizout ar pezh a vo lakaet e-barzh ar film. Pep strollad a breder hag a ginnig ar pezh a soñj dezhañ eo ret mirout er film. Goude e vez kendivizet e strollad bras war ar pezh a zo bet soñjet gant strollad-mañ-strollad. Ar pal a zo kaout a-benn ar fin un disoc'h boutin da dreuzfurmiñ en ur senario. Dedennus eo c'hoazh al lodenn-se rak ret eo da bep strollad difenn e soñj, reiñ arguzennoù personel, kendrec'hiñ ar re all. Eric a zo e rol kas ar c'hendiviz-se hag aozañ ar gaoz evit ma selaouo ar skolidi an eil re egile.

Goude ma oa bet dibabet ar pennadoù a vo miret er film e rank ar skolidi diverrañ ar pennadoù-se hag ivez berraat an divizoù. Pep strollad a zo e karg deus ur pennad pe zaou hervez hirder ar pennad hag an niver a zo bet miret. Aze e rank ar skolidi kaout fiziañs e labour o c'hamaraded peogwir e vo lakaet labour pep strollad asambles er fin evit sevel ar senario evel en ur miltamm. Ur wech ma oa bet dibabet ar pezh a chomo er film e c'hell Eric hag e skolidi labourat war ar senario da vat.

A-raok lezel ar skolidi labourat o-unan e tiskouez Eric traoù fetis. Ret eo dezho gwelout penaos e vez treuzfurmet an destenn ha gwelout peseurt stumm eo hini ur senario. Diskouez a ra dezho senario ur film gwir, bet implijet gant tud a-vicher. Mod-se e welont ez eus un doare resis da ginnig an destenn. An destenn o tiskrivañ ar pezh a c'hoarvez a vez skrivet war linennoù hir. Anv an dudenn a gomz a vez skrivet gant pennlizherennoù hag e-kreiz al linenn e vez lec'hiet anezhañ. An divizoù a vez skrivet war linennoù berroc'h eget ar jestroù. Seurt framm a vez implijet peogwir eo un diell labour a vez graet evit bezañ efedus. Lakaat a ra ar skolidi da verzout e vez atav skrivet ar senario en amzer a-vremañ. Ar poent-se a zo a-bouez evit ar senario hag evit ar gentel. Ret eo neuze d'ar skolidi tremen deus an amzer tremenet en destenn orin d'an amzer a-vremañ. Dav eo gwelout pe adwelout an dibennoù-ger en amzer tremenet koulz hag en amzer a-vremañ. Dav eo ivez gwelout penaos implijout verboù liammet gant ar jestroù pe gerioù evit lec'hiañ un dudenn pe un dra. Jestroù an tudennoù war ar senario a rank bezañ diskrivet en un doare resis, ar pezh a vez anvet an tretañ. Diskrivet e vo tout ar pezh a vo gwelet war ar skramm hag ar pezh a vo klevet. E raktres Eric eo an tretañ un digarez da grouiñ ezhommoù nevez a-fet geriaoueg pa rank ar skolidi klask hag implijout gerioù liammet gant ar pezh a c'hoarvez er film. Interesus-kennañ eo a-fet yezh hag a-fet labour arzel pa vez ret d'ar skolidi sevel skeudennoù en o fenn evit gwelout ar film a-raok ma vije bet filmet. N'eo ket aes d'ober a zispleg Eric hag an dra-se a c'heller pleustriñ gant skolidi mennet ha barrek war an ijin. An tretañ a c'hell ivez bezañ graet goude ar senario evit resisaat an traoù. E-giz-se e c'hell Eric gouzout hag e vo gouest ar skolidi d'en ober. A-fet yezh ez eus un dra all d'ober dre ret eo kemm ar skrid evit tremen deus un emezad ameeun d'un emezad eeun peogwir n'eus daneveller ebet er film. Neuze e plas lenn ar frazenn «Ret eo lâret ivez e ouie Ana hag

Alan gober get an dud. Dalc’hmat amiapl hag hegarat, dalc’hmat ur ger da bep unan» (Bideau, 2003) e ranker skrivañ un diviz etre Anna ha tud all pe e ranker lakaat un dudenn da lavarout eo hegarat Anna. Hervez live ha oad ar skolidi e c’hell al labour-se mont donoc’h a-fet yezhadur. Marteze eo ivez un doare da zisheñveliñ al labour o fiziañ an tamm-se d’ar skolidi varrekañ. E-kerz al labour-se eo a-bouez kaout ul lojik monedone da lâret eo e lenn ar strollad A ar pezh en deus skrivet hag e rank ar strollad B kompren an traoù ha gwelout mat ar skeudennoù da ijinañ hag en em c’houlenn hag eo sklaer pep tra ha daoust hag e vo sklaer evit an den a sello ouzh ar film. Kendiviz a vez c’hoazh etre ar skolidi neuze.

A-raok filmañ e chom lodennoù all deus al labour d’ober c’hoazh evel plan al leur o tisplegañ pelec’h e vo lec’hiet an aktourien, an arrebeuri hag all. Un tresistor a zo d’ober ivez. An diell-se a zo war stumm bannoù-treset ha skrivet e vez warnañ an talennoù a vo implijet. An div ziell-se a c’hell bezañ graet gant ar skolidi hag un doare da labourat war ar gompren eo ivez peogwir ez eus ezhomm da gompren mat ar senario hag an tretañ evit gallout o skeudenniñ.

Ur wech ma oa bet azasaet an destenn gant pep lodenn bet meneget a-raok ha prientet an dielloù ez eus ezhomm anezho evit filmañ e c’hell Eric filmañ ar skolidi da vat. A-raok al lodenn-se e chom da zaspazhañ an tudennoù hervez an aktourien ha lezel amzer da bep hini da zeskiñ an destenn en deus da lavarout. Eric a film e-unan peogwir eo un den a-vicher hag a oar penaos ober gant ardivinkoù kemplezh. Frammañ a vo graet gantañ ivez. Leurrenniñ a vez lezet ar vugale ober avat. Hervez ar c’helenner eo ur prantad dedennus evit lakaat ar skolidi da gomz pa vo ret reiñ urzhioù d’an aktourien ha d’ar skipailh teknik pa vez unan. Evit ober kement-se e vo mat adwelout a-raok an doare gourc’hemenn evit ma vo pep hini naturel hag evit ma vo aes da bep hini komz en ur mare ma vo ar skolidi e kreizig-kreiz al lodenn zedennusañ deus ar raktres hervezo. Evel-just eo neuze ur mare ma vezont techet da gomz e galleg peogwir e fell dezho bezañ efedus ha setu perak eo pouezus bezañ sur e vezont barrek war an troiennoù da implijout d’ar mare-se.

Oc’h ober bilañs ar raktres-se e anzav Eric e kemer kalz amzer met hervezañ en deus seurt raktresoù perzhioù mat niverus. Da gentañ e tegas plijadur d’ar skolidi peogwir e reont traoù ha pell e c’hell bezañ

deus ur gentel hengounel. Ur raktres mod-se a servij ivez da ziskouez eo a-bouez gallout labourat gant tud all, ar re ne vezer ket mignon ganto ivez. Krouiñ a ra un aergelc'h pozitivel p'o deus an holl ar memes pal, dont a-benn d'ober o film. Peurvuiñ e chom ur raktres ken bras e-pad pell en o fenn. Eñvorennoù a vez krouet e-giz-se. An darempred etre ar c'helenner hag ar skolidi a c'hell cheñch un tamm ivez pa vez bevet un dra asambles.

Da c'houde eo un digarez da labourat pep ampartiz. Kompren dre skrid a vez graet o lenn ur romant. Kompren dre gomz a vez graet ivez e-pad ar prantadoù a gendiviz etre ar c'helenner hag ar skolidi pe etre ar skolidi. An ampartiz-se a c'hell bezañ labouret muioc'h c'hoazh ma vez goulennet digant un den deus an diavaez dont da gemer perzh er raktres, tud Dizale pe Daoulagad Breizh lakaomp. Komz a reont ivez kalz pa vez ret dezho sevel a-du an eil gant egile pe pa rankont displegañ o soñj. Skrivañ a reont c'hoazh pa rankont kemm an destenn evit krouiñ ur senario hag evit e dretañ. Gallout a reer renabliñ amañ an naouturioù bet labouret gantañ er raktres : An amzer tremenet, an amzer a-vremañ, an doare gourc'hemenn, sevel martezeadennoù, geriaoueg al lec'hioù a gaver el levr, geriaoueg liammet gant ar sinema, ar gerioù a vez ezhomm anezho evit lec'hiañ, an troiennoù evit sevel a-du gant un dra bennak pe a-enep.

Barregezhioù arzel a vez labouret ivez gant ar skolidi. Kompren a reont penaos e vez savet ur film. Ar poelladennoù a vez graet evit prientiñ al labour a zo digarezhioù da lakaat anezho da implijout dafar teknikel da filmañ. Prederiañ a reont war an doare da grouiñ. Kendivizout a reont evit kavout disoc'hoù. Niverus eo ar barregezhioù bet labouret e-kerz ar raktres evel da skouer «s'approprier des questions artistiques en prenant appui sur une pratique artistique et réflexive», «recourir à des outils numériques de captation et de réalisation à des fins de création artistique», «concevoir, réaliser, donner à voir des projets artistiques, individuels ou collectifs», «se repérer dans les étapes de la réalisation d'une production plastique et en anticiper les difficultés éventuelles», «confronter intention et réalisation dans la conduite d'un projet pour l'adapter et le réorienter, s'assurer de la dimension artistique de celui-ci», «dire avec un vocabulaire approprié ce que l'on fait, ressent, imagine, observe, analyse ; s'exprimer pour soutenir des intentions artistiques ou une interprétation d'œuvre» pe c'hoazh «expliciter la pratique individuelle

ou collective, écouter et accepter les avis divers et contradictoires» (BOEN, 2020).

A-zivout an doare ma vez priziet al labour gant Eric e soñj dezhañ e c'hell seurt raktresoù degas doareoù all da aozañ priziadennoù. Hervezañ ez eus tu priziañ war hir dermen o kemer e kont penaos e kemer perzh pep hini e-kerz ar raktres. Disheñveliñ a c'heller ober ivez o reiñ lodennoù diaesoc'h d'ar skolidi varrekoc'h pe o priziañ barregezhioù disheñvel. Kinnig a ra da skouer ma vefe priziet ar gompren dre skrid war ar pezh a zo bet komprenet el levr gant an doare da sevel ar senario evit lod pa vo goulennet gant lod all tresañ an tresistor.

Soñjal a ra da Eric e ranker ober ar raktres ur wech kentañ evit bezañ gouest da welout an ezhommoù a vo. E-giz-se e c'hell ar c'helenner pleustriñ senarioioù pedagogel disheñvel ar bloavezh war-lerc'h kenkaz ez afe a-dreuz an traoù pe ma vez kemeret re a amzer war ul lodenn bennak. An eil bloavezh e c'hell ivez ar c'helenner frammañ mat steuñvenn ar raktres ha prientiñ fichennoù yezhadur tro-dro d'an ezhommoù bet merzet ar wech kentañ. Fichennoù geriaoueg a c'hell prientiñ p'en deus gwelet peseurt gerioù a vanke d'ar skolidi. Memes mod e c'hell prientiñ en a-raok ar priziadennoù ha kinnig da bep skoliad un hent dezhañ hervez paliou hiniennel en defe dibabet. Setu perak e rank ar c'helenner chom war evezh atav e-pad ar raktres.

2.2.1.3 Sevel ur film berr e saozneg

El lodenn 2.1.2.3 ez ae Maryline, kelennerez war ar saozneg, gant he skolidi e festival sinema Dinarzh. E pevare klas e oa he skolidi, en ur seurt hentad « euro » ha div eurvezh ouzhpenn a gentelioù saozneg o doa bep sizhun. Dibabet o doa ur film bet gwelet er festival, dielfennet anezhañ hag e ginniget o doa en ur sal sinema er gêr m'emaint o vevañ. Sikouret e oant bet gant Rémi D., un den a-vicher hag a labour gant ur gevredigezh a ra war-dro atalieroù sinema. Al lodenn gentañ deus al labour e oa nemetken.

Labour dibenn ar raktres a oa sevel ur film berr. Ne oa ket bet rediet an tem neuze e oa bet lezet ar choaz d'ar skolidi. A-raok kregiñ gant al labour war o film o deus ar skolidi pleustret war ur boelladenn. Gant o c'helennerez war ar galleg o doa lennet un danevell a gonte penaos e oa deuet mab-den da vezañ sklaved ar c'hazh. Gant

displegadennoù Rémi o deus ar skolidi, dre strolladig, savet bep a dañvadenn deus ur film a vije posubl oc'h azasaat an istor-se. Mod-se o deus bet tro da brederiañ war an doare ma vez filmet ha dreist-holl an doare ma vez aozet al labour evit chom hep koll amzer pe chom hep ober fazioù.

Goude o deus labouret war ar film berr, gant ar c'hlasad a-bezh ar wech-mañ. Da gentañ e oa ret kavout un istor. Ar pezh a oa kumun d'an holl er c'hlas a oa ar c'hoant o doa da gomz saozneg ha yezhoù all neuze o deus en em c'houlennet petra dalveze ar c'hoant-se. Hervezo e oa a-dreñv ar c'hoant-se ar youl da gejañ gant tud all ha da vont war-zu lec'hioù disheñvel. Pelloc'h int bet gant ar soñj-se o lavarout e oa ur bed liesyezh evel ur bed liesliv. Setu penaos int degouezhet war ar soñj sevel ur film a vefe e gwenn ha du er penn-kentañ ha gant liv ur wech ma klever yezhoù a bep seurt. Anvet eo bet ar film *Changing Colours*.

Ur wech bet kavet soñj diazez an istor o deus ranket ar skolidi e skrivañ da vat ha goude e gemm en ur senario. Al labour-se a veze graet dre strolladig evit lakaat pep hini da labourat. E galleg koulz hag e saozneg e oa al labour. Rol Rémi a oa heñchañ ar skolidi pa oa rol Maryline reiñ sikour dezho gant ar yezh. Dre ma veze klevet yezhoù all c'hoazh evel spagnoleg, alamaneg, suedeg ha brezhoneg, e oa bet ret mont e darempred gant kelennerien all ar skolaj evit kaout an troidigezhioù a zeree. Klasket e oa bet lakaat er film an holl yezhoù o doa ul liamm gant skolidi ar c'hlas. Pa oant o skrivañ o istor hag o senario e oa ret ivez soñjal e rol pep hini er c'hlas o reiñ pep a dudenn d'ar re a felle dezho c'hoari er film.

D'ar re ne oant ket aktourien er film e oa bet roet kefridioù all. Mod-se e oa bet desket gant ar skolidi ar micherioù a gaver er sinema ha penaos e vzent anvet e saozneg. Meneget e oa bet ivez an diforc'hioù etre ur skipailh filmañ er Stadoù-Unanet hag en Europa. Ur wech ma oa komprenet mat ar c'hefridioù e ranke pep skoliad dibab unan. Lod a rae war-dro ar gouloù pa rae lod all war-dro an dilhad hag ar prestoù. Ar re a oa o c'harg ober war-dro ar c'hamera a zo bet stummet tamm-ha-tamm gant Rémi, e-kerz ar filmañ. Pep aktour en deus ranket deskiñ e rol ha labourat war an distagadur hag ar pouez-mouezh.

Filmet e oa bet er skolaj ha tro-dro pa oa ezhomm deus un endro naturel. Senennoù zo a zo bet filmet e ti tud-kozh ur skoliad zoken. Evit ober kement-se e oa ret d'ar gelennerez aozañ mat an eurvezhioù kentel peogwir ne c'helle ket ar c'hlasad a-bezh mont da di an dud-kozh da skouer. Er raktres-se e rae ar skolidi al labour neuze ha Remi a oa e rol sikour anezho ha neket ober en o flas. Memes mod e oa bet frammet ar film gant ar skolidi hervez kont.

Pa oa bet echuet ar film e oa bet aozet ur vannadenn e sal sinema Damgan e miz Mae. Talvezout a ra e oa bet labouret da sevel ar film e-pad un nebeut mizioù. Evit kinnig ar film e oa bet aozet an nozvezh tamm pe damm evel ma oa bet graet e sinema Muzilheg p'o doa ar skolidi diskouezet ar film *About Time* da boblañs ar gêr. Skritellioù a zo bet savet gant ar skolidi hag an nozvezh a oa aozet evel abadenn gentañ ur film holywoodian. Ar wech-mañ e oa dreist-holl familhoù ha mignoned ar skolajidi a oa gortozet e-barzh ar sal. Diskouezet eo bet dezho *Changing Colours*, un teulfilmig o tiskouez penaos e oa bet savet ar film hag un dastumad glepachoù. An nozvezh-se a zo bet kaset e saozneg hag e galleg gant ar skolidi hag a o c'hellennerz. Da vare an ehan-c'hoari ez eus bet profet kouignoù saoz bet fardet gant ar skolidi ha te yen d'an dud.

Changing Colors



Showing at the CINEMA Les Cardinaux in Damgan on 26th May 2015, all the pupils of the European year 9 (44) are proud to present their film: *Changing Colours*

The school year is drawing to an end. It has been a very busy year for the European class and one of the highlights has been **making a film**, from start to finish. The cinéma *Les Cardinaux* in Damgan has kindly agreed to host a special evening for the grand premiere of "*Changing Colours*" on May 26th 2015 at 8pm. Presentations in English and in French by the pupils will alternate with films throughout the evening.

Nous sommes déjà fin mai. La classe européenne a été très active tout au long de cette année scolaire et plus particulièrement impliquée dans la **réalisation d'un court métrage**. Le cinéma *Les Cardinaux* à Damgan a gentiment accepté de nous accueillir pour la grande première de "*Changing Colours*" le mardi 26 mai 2015 à 20h. Tout au long de la soirée, des présentations en anglais et en français par les élèves accompagneront les différentes vidéos qui retraceront le travail de l'année.

Maryline



Skeudenn 5. An nozvezh e Damgan (Lec'hienn internet ar skolaj, 2015)

Daoust ma oa bet graet ar raktres-se e 2014-2015, da lâret eo nav bloaz a-raok ma vo kontet an avantur-se evit ar c'hounskrid-mañ, eo chomet sklaer-tre an traoù e penn Maryline. Pa ra bilañs al labour-se e santer c'hoazh ar blijadur he doa bet o labourat gant ar skolidi war un dra ken sorbus ha moarvat eo an dra gentañ da lavarout a-zivout ar pezh a zo bet graet. Plijadur a-leizh a zo bet ha mennet eo bet ar skolidi a-hed ar raktres. Kontañ a ra penaos he deus diskoachet ur skoliad lent, diaes e glevout peurvuiañ. Hennezh en deus bet ur rol abouez er raktres ha kavet en deus ur plas er strollad er memes tro. An eil tra da zisplegañ eo an dra-se just a-walc'h. Kreñvaet eo bet al liammoù etre ar skolidi gant ar santimant bezañ ezel deus ur strollad dibar. Chomet int stag an eil re gant egile ar bloavezh war-lerc'h ha diwezhatoc'h el lise zoken betek kouviañ Maryline d'ar fest o doa aozet evit lidañ o ugent vloaz. Gwelout a reer mat neuze e krou ur raktres mod-se un aergelc'h pozitivel-tre.

A-fet labour war ar yezh eo diaes da vMaryline displeg tout ar pezh a zo bet labourer e gwirionez pa oa dreist-holl an ezhommoù a zisklerie ar poentoù da labourat. A dra sur o deus labourer pep ampartiz. Skrivet o deus e saozneg p'o deus ijinet o istor hag ar senario. Komzet o deus e saozneg pa oa ret kendivizout evit ober choazioù pe p'o deus kaset an abadenn sinema e Damgan. Selaou ha kompren o deus ranket ober ivez pa veze kaset ar gentel e saozneg gant Maryline.



Skeudenn 6. Ur skolajiadez o kinnig ar film e Damgan (Le Télégramme, 2015)

Rol Rémi Duquenne e oa labourat war ar barregezhioù arzel ha teknikel. Gantañ o deus bet tro ar skolidi da labourat war ar rummadoù 1, 2 ha 3 deus rol ar barregezhioù en arzoù er c'helc'hiad 4, da lavaret eo krouiñ, seveniñ ur raktres ha komz deus e labour. En o zouez e oa « s'approprier des questions artistiques en prenant appui sur une pratique artistique et réflexive », « recourir à des outils numériques de captation et de réalisation à des fins de création artistique », « prendre en compte les conditions de la réception de sa production dès la démarche de création, en prêtant attention aux modalités de sa présentation, y compris numérique », « concevoir, réaliser, donner à voir des projets artistiques, individuels ou collectifs », « se repérer dans les étapes de la réalisation d'une production plastique et en anticiper les difficultés éventuelles », « établir des liens entre son propre travail, les œuvres rencontrées ou les démarches observées », « expliciter la pratique individuelle ou collective, écouter et accepter les avis divers et contradictoires ». Marteze e c'heller amañ merzout ez eus bet listennet barregezhioù tenet deus referañser an arzoù neuziañ padal n'eo ket Rémi kelenner war an danvez-skol-se ha moarvat ne oar ket memes ez eus deus seurt barregezhioù er skolaj. Koulskoude eo hennezh ispisialour war ar stummañ dre ar sinema ha neuze eo reizh da vat e teufe da gelenn ar sinema d'ar skolidi. Diouzh he zu e lavar Maryline ne oa ket gouest da vont war-zu ar sinema evel ma 'n deus graet Rémi. Pa c'houlenner ganti perak e respont n'eo ket barrek war ar sinema ha ne glot ket gant he micher a gellenerez war ar saozneg. Abalamour da se e oa aet da gerc'hat un animatour deus an diavaez. Gwelet he deus ar raktres-se evel ur roud evit dizoleiñ ha divizout (RDD) (pe IDD e galleg, Itinéraire de Découverte et de Décision), ar pezh a veze graet er skolaj etre 2005 ha 2016 hag a oa e plas ar C'HPMZ, da lavaret eo ur raktres ma veze lakaet ar skolidi da labourat war meur a zanvez tro-dro d'un tem. Pezh a zo, sañset e veze graet ar raktresoù-se gant ur skipailh a gellennerien hag aze n'eo ket Rémi kelenner er skolaj. War un tu all n'eo ket souezhus pa ne oa ket un opsion « euro » ofisiel a veze graet gant Maryline.

E-keñver an doare da briziañ ar skolidi e tispieg Maryline e oa bet priziet o labour war an tañvadennoù video diwar-benn sklaved ar c'hazh. O frezegennoù dirak an dud er sinema a oa bet priziet ivez. A-benn ar fin eo dreist-holl skrivañ ha komz hag a oa bet priziet er

raktres. Maryline n'he deus ket soñj he dije priziet al labour da gompren. A-fet barregezhioù arzel ha teknikel eo sur ne oant ket bet priziet avat. Displegañ a ra se gant ar fet ne oa ket Rémi kelenner ha neuze n'halle ket lakaat notennoù d'ar skolidi. Ouzhpenn-se ne oa ket e rol. Dre ma oa ur seurt RDD ne oa ket sañset bezañ priziet forzh-penaos. Ha pa vez goulennet gant Maryline penaos he dije priziet seurt barregezhioù e respont ne oar ket ha ne oa ket bet soñjet ar raktres evit se. Ret eo derc'hel soñj aze e c'hoarvez an traoù etre 2014 ha 2015 ha neuze ne oa d'ar c'houlz-se redi ebet da briziañ dre varregezhioù warbouez evit ar yezhoù. Skouer ar raktres-mañ a ziskouez a-benn ar fin n'eus ket ezhomm dre ret deus un notenn evit lakaat ar skolidi da vezañ mennet en o labour keit ma vezont dedennet gant ar pezh a vez kinniget dezho.

2.2.1.4 Sevel ur film-chakod e brezhoneg

E 2017 e oa bet aozet evit ar wech kentañ ur genstrivadeg filmoù-chakod e brezhoneg gant ar gevredigezh Daoulagad Breizh. Kozh-Noe eo mennozh ar film-chakod. Hervez kont e oa ganet seurt filmoù berr e penn-kentañ ar bloavezhioù 1970 gant teknologiezh ar c'hameraioù super 8 hag a oa kameraioù bihan tout. Ar mennozh a zo bet ankouet goude e-pad pell betek ma vo ardivinkoù niverel e chakod pep hini e-kreiz ar bloavezhioù 2000. Distro e oa neuze konkourioù filmoù berr anvet pocket films pe filmoù-chakod diwar intrudu un nebeut embregerezhioù evel Canon pe Nikon hag a brodue mekanikoù foto a c'helle filmañ ivez. Aesoc'h c'hoazh eo deuet da vezañ p'en deus pep hini pep a smartfon bremañ. « De plus en plus de festivals, de sites spécialisés et de concours internationaux permettent en outre aux créateurs de diffuser leur œuvre et de la partager avec le plus grand nombre de spectateurs ou d'internautes possible. » (Bégin, 2015) Diwar ar mennozh-se o deus soñjet tud Daoulagad Breizh e oa ar filmoù-chakod un doare da lakaat war wel ar brezhoneg war internet ha reiñ war un dro ur skeudenn vodern deus ar yezh hag un digarez d'an dud da grouiñ e brezhoneg ha marteze da gavout tud varrek war ar marc'had. Pal kentañ ar gevredigezh a zo lakaat da dalvezout ar sinema e Breizh o tiskouez filmoù hag oc'h ambroug ar re a grou.

Abae un nebeut bloavezhioù ma n'eo ket abae ar penn-kentañ e kemer perzh Herve, kelenner war ar brezhoneg e Bro-Leon d'ar c'honkour aozet gant Daoulagad Breizh. Gant e skolidi e sav bep

bloaz ur film a heuilh reolennoù ar genstrivadeg : sevel ur film gant ur smartfon pe un dablezenn pe ur mekanik foto bihan. Ar film-se a zo e brezhoneg istitlet e galleg. Padout a ra nebeutoc’h evit teir munutenn. Heuliañ a ra tem ar bloaz. E 2023 e oa aet ar maout gant e skolidi gant ur film anvet *Foeterien tro-dro d’ar bed*, tapet ganto priz ar publik. Henezh a vo displeget penaos e oa bet krouet gant Herve hag e skolidi ha penaos e c’hell ur raktres evel-se lakaat ar skolidi da labourat war ar yezh.

Herve a ra war-dro ar skolidi trede klas e brezhoneg en e skolaj. Heuliet o deus an hentad divyezhek ha mat eo o live e brezhoneg. Dibabet en deus al live-se evit sevel ur film-chakod peogwir e soñj dezhañ int kozh a-walc’h evit bezañ kiriek d’o labour ha peogwir eo ul live ma n’eo ket atav aes sachañ o evezh.

Hervez ar c’helenner e kemer ar raktres-se ul lodenn vat deus ar bloavezh-skol. Peurvuañ e vez roet tem ret ar filmoù gant Daoulagad Breizh e miz Here hag ar film a zo da vezañ kaset dezho a-benn penn-kentañ miz Ebrel. Da gentañ e labour ar skolidi da gompren dre gomz pa vez diskouezet dezho ur video ma weler skipailh ar gevredigezh o tisplegañ mennozh ar genstrivadeg. Da c’houde e labouront da gompren dre skrid reolennoù ar c’honkour a gaver war lec’hienn internet ar gevredigezh.

Ur wech bet komprenet gant ar skolidi ar pezh a vo graet e-pad ar mizioù o tont eo dav kregiñ ganti ha lakaat anezho da brederiañ war o istor. Tem ar c’hoñkour 2023 a oa « tro ar bed » da lavaret eo e ranke ar skolidi kinnig un istor a glote mui pe vui gant an tem. Ne oa ket un tem aes peogwir ne oa ket ledan an hent. Ret e oa d’ar skolidi displegañ o mennozh film en un destennig pemp pe dek linennad, ar sinopsiz an hini eo. Dre strollad e vezont lakaet hag o zestenn a rank heuliañ ar goulun danevell klasel gant un digoradur, an elfenn zirenkus, an disoc’h hag all. Priziet e oa bet al labour-se. Goude e vez votet evit mirout ar sinopsiz gwellañ e-touez ar seizh pe eizh bet kinniget e-pad ar briziadenn. Da c’houde, a-stroll e vez treuzfurmet an destenn-se en ur skript o troc’hañ an istor e senennoù. Dre strolladig e rankont skrivañ pep senenn o respont d’ar goulennoù a-bouez gant ar muiañ posubl a vunudoù : Pelec’h emañ ar c’hamera ? Petra ra an tudennoù ? Petra lavaront ? Film skolidi Herve a zo anvet *Foeterien tro-dro d’ar bed*. Ul luadenn deus an abadenn *Foeterien* a gaver war

Brezhoweb an hini eo. Ennañ e rank ar skipailhoù mont da bep korn ar bed da dapout traoù dibosubl. Mennozh kreñv ar film a zo ar fent pa vez mesket skeudennoù bet filmet gant Hervé hag e skolidi ha skeudennoù tennet deus filmoù brudet.

War-lerc'h bezañ skrivet da vat ar senario e teu prantad ar filmañ. Aze e vez rannet ar c'hlasad e daou hervez ar perzh en deus c'hoant pep hini da gemer er film. Lod deus ar skolidi ne oant ket dedennet evit bezañ gwelet er film hag ar re-se a zo chomet er c'hlas gant ur skoazeller evit ar skolidi nammet (AESH e galleg, da lavaret eo Accompagnant des élèves en situation de handicap). Henezh a zo brezhoneger ha graet en deus war-dro ar strolladig a oa chomet er c'hlas. Sellet o deus ouzh koulzad diwezhañ *Foeterien* ha labourer da gompren dre gomz ha da skrivañ. Diwar ar 25 skoliad er c'hlasad e oa seizh ha ne felle ket dezho bezañ gwelet e-barzh ar film. Pep tra a vez filmet gant Hervé. Displegañ a ra en deus klasket lakaat ar skolidi da filmañ un nebeut bloavezhioù zo ha ne oa ket laouen gant ar rentadurezh ouzhpenn bezañ kollet amzer. Hervezañ n'eo ket ar filmañ a gont er raktres a-fet yezh ha neuze ne fell ket dezhañ reiñ re a blas d'al lodenn-se. Ouzhpenn-se e tispleg Hervé eo barrek evit filmañ koulz hag evit frammañ neuze eo aesoc'h dezhañ ober al lodennoù-se e-unan. Pa vez filmet e klask Hervé difaziañ distagadur ar skolidi daoust ma n'eo ket aes atav ober kement-se war ar prim. Hervezañ e rankfe kemer muioc'h a amzer evit labourat war ar pouez-mouezh met n'eo ket aes pa ne vez ket c'hoariet er film gant ar c'hlasad a-bezh.



Skeudenn 7. Tapadur tennet deus film skolidi Hervé (Youtube, 2023)

Abaoe 2022 e vez aozet gant Daoulagad Breizh abadennoù evit reiñ prizioù d'ar filmoù gwellañ. E-kerzh ar chakod deiz e vez sellet ouzh filmoù gwellañ ar skolioù bet resevet gant ar gevredigezh hag ur juri a zibab ar filmoù o deus gounezet. E 2022 e oa kenaozet gant Emglev Bro Douarnenez e Loperc'hed hag Hervé a oa aet di gant e skolidi. E 2023 e oa kenaozet gant Emglev Bro Gwened e Teiz. Ar wech-mañ ne oa ket bet Hervé met priz ar publik o deus gounezet e skolidi gant o film *Foeterien tro-dro d'ar bed*.

Pa ra ar c'helenner bilañs ar raktres e lak war wel meur a dra a vez degaset gant un obererezh mod-se. Da gentañ tout e labour ar skolidi war ar yezh rak ezhommoù nevez o deus pa skrivont o istor hag ar senario, ezhommoù a-zivout ar c'heriaoueg ha troiennoù. Hervez Hervé int techet da dreiñ diwar ar galleg, pezh a lak o frazennoù e brezhoneg da vezañ divlaz pe iskis memes. War se e labour Herve ganto. Pa vez filmet e vez labouret er memes tro an distagadur. Pa wel Hervé fazioù bras dre gomz pe dre skrid e not anezho evit adlabourat donoc'h war ar poentoù-se diwezhatoc'h. Meur a briziadenn a zo e-pad ar raktres.

E-keñver ar barregezhioù arzel evit poent eo dreist-holl ur preder war ar skeudenn hag a vez gortozet gant Hervé, da lavaret eo anavezout an talennoù disheñvel. E-pad emañ ar c'helenner o frammañ ar film diouzh e du e tiskouez dezho ar film tamm-ha-tamm hag ar skolidi o deus tro da reiñ o soñj ha da ginnig mennozhioù all. E 2023 o deus ranket ar skolidi kavout tammoù filmoù gwir a glote gant o film-int. Hervé a soñj dezhañ ez eus tu d'ober muioc'h hep kemer re a amzer hag emañ e soñj labourat war sonerezh ar film a-benn nebeut gant e genseurt kelenner war ar sonerezh er skolaj. Marteze e vo savet ar sonerezh gant ar skolidi zoken. War ar barregezhioù arzel, n'eus tamm priziadenn ebet. Ar c'helenner a soñj dezhañ e ya ar barregezhioù-se pelloc'h evit ar pezh a c'hortoz a-berzh ar skolidi, da lavaret eo araokadennoù war ar yezh hag ar yezh hepken. Ouzhpennañ a ra ne glotfe ket gant e rol a gelenner war ar brezhoneg. Domaj eo hervezañ e vefe ken rannet rol pep hini en ur skolaj met ober a ra gant ar sistem evel m'emañ.

Interest pennañ a raktres a zo ar pezh a zegas d'ar brezhoneg er skolaj hervez Hervé. Displegañ a ra e vez diskouezet film e skolidi bep bloaz da vare arvest ar skolaj ha neuze e vez gwelet gant an holl

skolajidi hag o familh, a vefent brezhonegerien pe get. Hervez Hervé en deus cheñchet sell an dud, ar skolidi, ar gelennerien war ar brezhoneg er skolaj. A-raok e soñje d'an dud e oa ur yezh evit ar re gozh pe diboell a-fet heñchañ peotramant a-fet plas ar yezh en deskadurezh. Gwir eo e vez techet lod da glask renkañ ar brezhoneg en ur c'horn bihan deus ar skolaj evit ma ne gemero ket re a blas. Mediom ar video a ziskouez ur skeudenn vodern deus ar yezh ha prouiñ a ra e labourer er c'hlas war traoù fetis liammet gant ar bed a-vremañ.

2.2.2 *Tresañ, sevel ur skritell*

Gant nebeutoc'h a brestoù hag o chom er sal klas e c'heller ivez labourat barregezhioù arzel e-pad ur gentel yezh. Peurvuiañ eo al labour dibenn un digarez hepken. Ar pezh a gont eo dreist-holl an hent a gas ar skolidi d'al labour-se. An arzoù grafek a c'hell servijout da se muioc'h c'hoazh pa blijont kalzig d'ar skolidi.

2.2.2.1 Sevel un emboltred en ur sekañs spagnoleg

El lodenn 2.1.1.7 e tisplege Edith, kelennerez war ar spagnoleg penaos e labourer barregezhioù yezh ha sevenadur o studiañ emboltredoù gant Goya, Picasso ha Frida Kahlo. Ouzhpenn da se he deus graet er sekañs-se pa ranke ar skolidi sevel o emboltred dezho e fin ar pennad.

E-kerz ar pennad-se e rank ar skolidi labourat war an amzer tremenet, war bed ar vugale ha diskrivañ un dudenn hag en em ziskrivañ. Evit ober kement-se e kemer Edith harp war ar bugaleaj. Meskañ a ra neuze an doare d'en em ginnig gant buhez kent ar skolidi. Pep prantad kentel a rank magañ o labour dibenn. An urzh a vez roet a zo ledan-tre. A-ratozh e ro Edith kalz a frankiz d'ar skolidi. Sañset e klok pep skoliad ur follenn gant ar stumm A3 gant un dresadenn o skeudenniñ anezhañ. Un nebeut bloavezhioù zo e oa rediet ar skolidi d'ober e giz-se. Alies e c'houlennt hag e c'hellent ober mod all, o pegañ traoù da skouer evel fotoioù, skeudennoù tennet deus ur gelaouenn bennak. A-benn ar fin e veze aotreet tamm-ha-tamm doareoù nevez da respont d'an urzh met chom a rae stag ouzh ar follenn A3 ma pege ar skolidi a bep seurt traoù evel kanetennoù, gloan hag all. Ur wech e oa bet goulennet gant ur skoliadez hag e c'helle

rentañ ur vouest kentoc'h eget ur follenn. Edith he doa resevet ur vouest botoù leun a vitrakoù a ziskoueze mat peseurt plac'hig e oa bet ar skolajiadez-se. Adalek neuze he deus asantet meur a zoare da respont d'an urzh ha bremañ e chom hep heñchañ ar skolidi en o labour. Rentañ a ra ar skolidi boestoù ha seier leun a girri bihan, a bezhioù Lego, un neñneñ hag a bep seurt. Ret eo memes tra d'ar skolidi kavout un doare d'en em ziskouez en o oberenn peogwir e rankont prouiñ int gouest d'en em ziskrivañ. Al labour-se a zo d'ober er gêr.

An eil lodenn el labour a zo ur pennad-skrid o deus ar skolidi d'ober evit displegañ o oberenn. Rankout a ra an destenn klotañ gant ar pezh o deus krouet ha pep elfenn a rank bezañ kinniget ha displeget. Dre skrid e vez graet al labour-se rak Edith he deus merzet ar bloavezhioù a-raok e oa diaes d'ar skolidi komz dirak ar c'hlasad deus o bugaleaj. Kizidig eo an danvez evit lod. Muioc'h evit reiñ da c'houzout ar pezh e oant eo dreist-holl komz deus se dirak ar gamaraded hag a c'hell bezañ diaes. Koulskoude e soñj da Edith e c'hell bezañ dedennus evit an holl an testennoù he deus resevet hag an oberennoù bet krouet. Savet he deus neuze ur padlet enlinenn, da lavaret eo ur bajenn war internet ma c'hell skolidi ar c'hlas mont da welout ar pezh o deus graet ar re all.

Priziet e vez al labour-se. Diwar ugent poent ez eus tri foent hanter o varnañ an oberenn arzel. Sellet e vez hag e oa bet graet gant aked, o klask ober brav. Pevar foent a vez roet evit al liamm etre an oberenn hag an destenn. Rankout a ra an oberenn diskouez pep elfenn a vefe meneget en destenn. Ar peurrest deus ar poentoù a zo liammet gant ar yezh dre skrid a-fet implij an amzer tremenet, an troiennoù evit komz deus boazioù, geriaoueg ar c'hoari hag al lezir. Al labour-se a servij da briziañ ar skrivañ neuze. Pa c'houlenner gant Edith hag he deus priziet barregezhioù liammet gant an arzoù e respont n'he deus ket. Kompren a reer neuze perak ne oa ket ken resis an urzh bet roet d'ar skolidi. Gallout a rafed en em c'houlenn hag ez eus un difrae arzel el labour a vez rentet gant ar skolidi zoken. Pal Edith amañ n'eo ket lakaat ar skolidi da brederiañ war o oberenn kement-se met kentoc'h war ar yezh da implijout evit diskrivañ ar pezh o deus krouet. Da skouer ne vez ket klasket lakaat ar skolidi da blasañ arouezioù pe da implijout metaforennoù en o labour. N'eo ket souezhus neuze ne vije ket bet da welout e referañser an arzoù er meziant da enrollañ priziadennoù ar

skolidi. Marteze e c'halljed pleustriñ gant ar skolidi emboltredoù difetis e penn-kentañ ar sekañs evit broudañ anezho da glask doareoù arzeloc'h da respont d'ar goulenn. Un doare e vije bet da labourat ha da briziañ barregezhioù evel «choisir, mobiliser et adapter des langages et des moyens plastiques variés en fonction de leurs effets dans une intention artistique en restant attentif à l'inattendu», «exploiter des informations et de la documentation, notamment iconique, pour servir un projet de création», «confronter intention et réalisation dans la conduite d'un projet pour l'adapter et le réorienter, s'assurer de la dimension artistique de celui-ci» pe c'hoazh «établir des liens entre son propre travail, les œuvres rencontrées ou les démarches observées» (BOEN, 2020).

2.2.2.2 Sevel ur skritell e spagnoleg

E trede klas e labour Edith war an tem sevenadurel «Langages» a gaver e-touez temoù ar c'helc'hiad pevar. En tem-se e c'heller komz deus ar mediaoù, deus an doareoù da gehentiñ, deus ar bruderezh met ivez deus engouestl an arzour. En ur sekañs spagnoleg anvet «Cuidar el planeta» e labour Edith diwar-benn skritellioù engouestlet da wareziñ an endro. Un doare da labourat hentad ar c'heodedour eo ivez hervez ar gelenner.

E penn-kentañ ar pennad e sell ar skolidi ouzh un nebeut videoioù diwar-benn kudennoù liesseurt liammet gant an endro, ar saotradur, ar mammennoù hag all. Dreist-holl e pouez Edith war ur video bet embannet gant kevredigezh ar rouanez Sofia. War stumm ur filmig-bevaat eo ha lakaat a ra war wel kudennoù liammet gant an endro ha doareoù d'o dirouestlañ. Kement-se a lak anezho da labourat da gompren dre gomz. Labourat a reont ivez da gompren dre gomz gant un diell diwar-benn implij ar beloioù e kêr Sevilla da liammañ gant ur skritell diwar-benn ar memes danvez. Un nebeut skritellioù a welont ha komzet e vez diwar o fenn er c'hlas evit o dielfennañ ha kompren penaos e vezont savet. A-fet yezh eo pal ar pennad labourat war an doare gourc'hemenn, ar redi ha geriaoueg liammet gant an treuzdougen, ar saotradur hag an endro naturel.

Evit labour dibenn ar sekañs e rank ar skolidi sevel ur skritell evit broudañ an dud d'ober gwelloc'h e-keñver an endro. Ret eo dezho neuze lakaat war wel ur gudenn ha kinnig doareoù da cheñch penn

d'ar vazh. Pep skritell a rank diskouez teir c'hudenn ha da bep kudenn e ranker kavout daou zisoc'h. Ar skritell a rank bezañ kinniget war ur follenn A3 ha dieub eo ar skolidi war an doare ma reont al labour. Al labour-se a zo d'ober daou-ha-daou er gêr. Edith he deus roet dezho ur fichenn a ziverr an doare ma vez savet ur skritell efedus.

Tost an holl skolidi o deus graet al labour-se war an urzhiataer. Er skolaj ma labour Edith e implijer Google Classroom ha pep skoliad en deus ur gont dezhañ e-unan. Gant Classroom e ya binvioù Google a-fet meziantoù ofis, ur postel hag ur goumoulenn. Sevel skritellioù a c'heller ober neuze gant Docs pe gant Slides. Ar skolidi n'o deus ket dibabet implijout ar meziantoù-se evit ar bras anezho avat. Kalzig o deus implijet Canva, ur meziant enlinenn ma c'heller sevel un diaporama pe ur skritell buan pa vez aes da implijout dre ma 'z eus skouerioù kinniget a c'heller kemm hervez ar pezh a zo d'ober. Efedus-kennañ eo al lec'hienn-se ha plijout a ra d'ar skolidi met siwazh ne glot ket gant reolennoù hollek war gwarez ar roadennoù (RGPD e galleg) hag a vez heuliet sañset e pep skol. Kudennoù a bep seurt a zo bet diskouezet gant ar skolidi war o skritellioù evel an digoadadur en Amazonia pe gwarez al loened gouez e Breizh. Dre vras eo laouen ar gelennerz gant al labour o deus rentet ar skolidi ha santet he deus e oant dedennet gant an danvez.

Priziet e vez al labour met war ar yezh hepken. Priziet eo war ar skrivañ oc'h implijout an troiennoù bet gwelet er c'hlas. Un nebeut poentoù a vez roet evit ar skritell evit lakaat anezho d'ober al labour en un doare sirius met n'eus barregezh ebet a vije staget ouzh ar poentoù-se. Moaien e vije bet priziañ barregezhioù tennet deus referañser an arzoù neuziañ evel «prendre en compte les conditions de la réception de sa production dès la démarche de création, en prêtant attention aux modalités de sa présentation, y compris numérique» peotramant e kaver e referañser ar galleg barregezhioù a c'hell bezañ dedennus evit kelenn ar yezhoù evel da skouer er rummad «adopter des stratégies et des procédures d'écriture efficaces» ma kaver ar varregezh «prendre en compte le destinataire, les visées du texte, les caractéristiques de son genre, du support d'écriture (de la préparation à la relecture ultime)» hag a c'hell servijout da briziañ ul labour arguzenniñ dre skrid, ha pa vefe war ur skritell. Ouzhpenn-se e tispleg mat Edith e labour war stumm ar skritell er c'hlas gant he skolidi e trede klas hag e pevare klas da nebeutañ. Moarvat e vefe posubl ivez

sevel ur brogresadenn a-hed ar c'helc'hiad 4 o labourat meur a wech war ar memes barregezhioù liammet gant ar skritell adalek ar pempvet klas betek fin an trede klas. Moarvat e vefe aesoc'h priziañ ar barregezhioù arzel e-giz-se.

2.2.3 *Skrivañ evit ijinañ*

Pa gomzer deus barregezhioù arzel e soñjer alies en arzoù neuziañ peotramant er video padal ez eus ivez al lennegezh hag a c'hell bezañ pleustret gant ar skolidi er c'hlas. Skrivañ hervez e ijin a zo un doare da zisplegañ e soñj ha da gehentiñ. Ar binvioù a vez implijet ar wech-mañ a zo ar yezh hec'h-unan pe kentoc'h eo ar yezh a ro d'an hini a skriv leun a binvioù. Deskiñ ur yezh a zo neuze deskiñ tamm-ha-tamm da implijout binvioù nevez.

Kemer harp war ar skrivañ ijinek a zo ur mennozh mat pa gelenner da skolajidi hag a zo c'hoazh techet da ijinañ kalz ha da glask ar pezh a zo dreistordinal. A-benn ar fin n'emañ ket pell ar skolajidi deus oad ar vugale hag alies e c'hoariont c'hoazh gant c'hoarielloù a servij dezho d'en em gontañ istorioù. Peurvuañ o deus desket d'ober kement-se e galleg hag er yezh-se hepken e ouzont en ober. Lakaat anezho da bleustriñ war ar skrivañ ijinek a zo neuze un doare da blantañ ur mod nevez da gontañ ar bed evel ma welont anezhañ hag ar bed evel m'o defe c'hoant da welout anezhañ.

2.2.3.1 *Ijinañ golo pevar ul levr n'eo ket bet skrivet*

El lodenn 2.1.1.2 e oa bet displeget penaos e labourer Claire, kelennerez war ar saozneg e pempvet klas, war an tudennoù marvailhus. Gwelet o deus ar skolidi un nebeut skouerioù tennet deus al lennegezh hengounel pe evit ar re yaouank. Komprenet o deus penaos eo aozet un danevell ha desket o deus penaos implijout an amzer tremenet en ur skrid.

E fin ar sekañs-se e c'houlenn Claire ma vo savet un destenn da welout evel testenn golo pevar ul levr. Sañset e oa al lodenn-se deus al labour ur perzh deus ur c'helenn pleustrek etre meur a zanvez, asambles gant ar gelennerez war an arzoù neuziañ. Er gentel arzoù e vije bet savet golo al levr hag er gentel saozneg ar golo pevar. Siwazh e oa klañv ar gelennerez war an arzoù da vare labour dibenn sekañs Claire neuze he deus ranket ar gelennerez war ar saozneg ober ar


raktres-se hec'h-unan-penn. Ar sekañs-se a zo bet graet e fin ar bloaz, da vare ur sizhunvezh a raktres obererezh a zeskadurezh ma cheñch implij-amzer ar skolidi hag o deus prantadoù gant tud pedet er skolaj. Ur vaouez varrek war an enliverezh a oa sañset kemer perzh er raktres asambles gant ar gelennerez war ar galleg met kempennet fall eo bet ar sizhun ha neuze n'eus ket bet tu d'ober evel ma oa raktreset an traoù.

Da gentañ he deus Claire displeget d'ar skolidi peseurt doare testenn a vez kavet war c'holo pevar ul levr da lavaret eo un destenn verr hag a ziskouez piv eo tudennoù pennañ an istor, e peseurt kendestenn e vevont a-fet lec'h hag amzer. Meneget e vez un darvoud a zo o vont da cheñch ar blegenn gentañ ha stourmoù an harozed met arabat lavarout penaos e echu an istor evit reiñ c'hoant d'an dud da brenañ al levr.


Ar skolidi a zo bet lakaet dre strollad, daou pe dri e pep strollad. Div eurvezh o deus bet evit ijinañ o istor ha skrivañ o zestenn. Er memes tro e rankent implijout an troiennoù bet gwelet er c'hlas ha naouturioù ar sekañs. Er gêr o doa ul labour all d'ober avat. Dre ma ne oa ket amañ ar gelennerez war an arzoù he deus Claire goulennet gant he skolidi sevel golo al levr. Amzer a vanke peogwir e oa fin tout ar bloavezh-skol ha ranket o deus ar skolidi ober al labour-se buan. Evit al lodenn-se n'he deus ket ar gelennerez roet kalz a urzhioù resis pa ne oa ket sañset ober war-dro an obererezh. Ret e oa d'ar skolidi tresañ ar golo war un hanter follenn A4 ha skrivañ titl al levr war ar golo. War an hanterenn all e veze skrivet prop an destenn bet ijinet ganto.



Skeudenn 8. Golo levr savet gant ur strollad (an aozour, 2023)



Skeudenn 9. Diabarzh al levr (an aozour, 2023)



Skeudenn 10. Golo pevar al levr (an aozour, 2023)

Gallout a reer sellout a dost ouzh ar skouer a weler er skeudennoù. War ar golo o deus klasket ar skolidi ober vann e vije ul levr kozh o livañ pevar c'horn ar golo. E-kreiz ar bajenn o deus graet un dresadenn vihan sterniet. Ur wech c'hoazh e ro d'ar vrizh levr tres unan kozh. War an dresadennig-se e weler tudennoù an istor da lâret eo Markus ar roue gentil pe marteze Gaston e vab, war ar renk kentañ. Er renk diadrenñv e weler Pitagorr IV, ar roue drouk hag en deus un anv a lak da zivinout ne blij ket d'ar skolidi-se ar ventoniezh marteze. Pitagorr IV a zo livet gant livioù teñval padal eo bet roet livioù sklaer da Varkus. War un aerouant emañ Pitagorr ha gallout a reer soñjal emañ ar briñsez Fiona e-barzh an tour. Al lenner a zo sañset kompren aze aergelc'h an istor pa weler tud gwisket evel brezelourien ar grennamzer. Kompren a ra ivez e vo enebet tudennoù hag e vo unan anezho en arvar marteze. Lakaat Markus (pe Gaston) er renk kentañ a lâr d'al lenner e vo kemeret e savboent el levr. Ne vez ket gwelet Fiona padal emañ hec'h anv e titl al levr «Fiona is in danger». En em c'houlenn a ra neuze al lenner piv eo Fiona. Chom hep lavarout pep tra a zo ur perzh mat amañ. Daoust ma ne oa ket gortozet o deus leugnet ar skolidi diabarzh ar brizh levr gant linennoù treset. Er penn-kentañ e weler an droienn «Once upon a time» hag e dibenn an eil pajenn o deus skrivet ar ger «fin», pezh a zo ur fazi aze. War ar golo pevar o deus ar skolidi treset en-dro pevar c'horn al levr. Treset o deus ivez kurunennoù gant livioù pep tudenn, pezh a ziskouez c'hoazh an enebiezh etre an tudennoù. Ur c'hod barrennoù o deus treset ivez evit ma vo gwirvoudeloc'h c'hoazh o brizh levr. Pa seller ouzh an destenn a bell e weler e oa bet implijet pennlizherennoù war ar gerioù «danger» ha «the answer is in this book» evit pouezañ war tender an istor. Pa lenner an istorig e kompren e oa bet awenet ar skolidi-se gant ar filmoù *Shrek* ha *Beauty and the Beast*. Lod deus ar palioù yezh a zo bet tizhet evel da skouer diskripañ tudennoù a-fet tres ha temzpered, keñveriañ, an derez uhelañ. War amzer an danevell ez eus fazioù avat hag a-wechoù e vez implijet an amzer a-vremañ pa vije bet ret implijout an amzer tremenet strizh.

Bilañs Claire a chom etre daou e-keñver ar raktres-se. Plijadur o deus bet ar skolidi o labourat daou-ha-daou war ul labour ijinañ. An daouadoù o deus holl rentet bep a vrizh levr ha peurvuiañ e oa bet savet mat, gant aked, en un doare sirius. Lod a oa brav memes evel an hini a weler war ar skeudennoù. E-keñver ar yezh eo dizingal kennañ

labour an daouadoù. Pa oa deuet a-benn strolladoù zo da implijout an troiennoù hag ar stummoù ret hag implijout anezho mat e oa bet kalz diaesoc'h da strolladoù all. Claire he deus merzet ne oa ket bet komprenet an amzer tremenet strizh tamm ebet gant skolidi zo hag a oa techet da implijout ar present perfect peogwir e oa tostoc'h deus an amzer tremenet kevrennek a gaver stank e galleg. Diaes eo bet da lod ivez implijout verboù direizh. Hervez Claire e c'heller displegañ ar c'hudennoù gant abegoù disheñvel. Da gentañ e oa sizhun diwezhañ ar bloavezh-skol ha splann e oa ne felle ket da lod prederiañ re. Da eil e kav dezhi ne oa ket bet roet trawalc'h a amzer dezho evit peurechuiñ o labour ha dreist-holl pleustriñ war ar stummoù da vestroniañ a-raok al labour dibenn. Da drede ne oa ket priziet al labour peogwir e oa e fin tout ar bloavezh ha moarvat e vije bet gwelloc'h gant un notenn o varnañ an traoù hervezi. Pa vez goulennet ganti penaos he dije priziet al labour e tispleg he dije priziet ar yezh hepken peogwir ne oar ket penaos e vije bet priziet an traoù gant ar gelennerez war an arzoù. Moarvat e vije bet roet un nebeut poentoù evit an dresadenn met ne vije ket bet implijet barregezhioù, sur ha n'eo ket marteze. Memes mod, ne vije ket bet priziet stil an destenn gant barregezhioù padal e oa posubl implijout barregezhioù tennet deus referañser ar galleg evel ar re a den d'ar skrivañ ijinek.

2.2.3.2 Ijinañ un haroz hag e droioù-kaer

War ar memes danvez e labour tamm pe damm Stéphanie e pempvet klas daoust ma ne gemer ket labour dibenn he sekañs ar memes stumm eget al labour a vez kinniget gant Claire, moarvat peogwir n'eo ket sañset bezañ ul lodenn deus ur c'helenn pleustrek etre meur a zanvez. El lodenn 2.1.1.6 e oa bet displeget penaos e lak Stéphanie, kelennerez war ar saozneg, he skolidi da labourat war lennegezh ar grennamzer diwar mojenn Arzhur. Paliou yezh he sekañs a zo ar memes re ha Claire da lavaret eo an amzer tremenet strizh, diskrievañ tudennoù, geriaoueg ar marc'heg, keñveriañ, an derez uhelañ.

E-pad ar sekañs o deus ar skolidi ijinet un haroz hag a oa marc'heg. Evit al labour-dibenn-mañ e rankont ijinañ un istor tro-dro d'o haroz. Dre strolladoù tri int bet lakaet, strolladoù a live ingal a-walc'h, gant an urzh da rentañ un destenn war-dro kant ger e fin ar prantad kentel, da lâret eo e fin an eurvezh. Un eurvezh hepken a zo bet roet peogwir

e oa fin ar bloavezh ha ne chome ket kalz a brantadoù labour. Er c'hlas e oa ret ober al labour peogwir he deus aon ar gelenner e vefe implijet troerioù emgefreak gant ar skolidi e lerc'h klask o-unan. Ret e oa d'o istor bezañ gwirvoudel a-walc'h ha neuze ne c'hellent ket lakaat taolioù fizik pe loened dreistordinal en o istor. E-pad ar prantad e tremene Stéphanie da sikour ar re a oa diaesoc'h dezho.

Efedus eo bet ar skolidi, moarvat peogwir e plije dezho reiñ ur vuhez d'o zudenn ha peogwir n'o doa ket kalz amzer ha neuze amzer ebet da goll. Panevet se e oa dipitet Stéphanie gant an testennoù he deus lennet. An hanter deus ar c'hlasad ne oa ket dedennus e istor. Ar gelenner a soñje dezhi e vije bet levezonet ar skolidi gant an elfennoù o doa gwelet e-pad ar gentel istor diwar-benn ar gladdalc'helezh pe e-pad ar gentel galleg diwar-benn *Tristan hag Izold* met n'he deus kavet netra a seurt-se en testennoù. A-fet stil eo memes tra, peurvuañ n'o deus ket klasket ar skolidi reiñ blaz d'o danevell. A-zivout ar yezh e oa gwelloc'h avat met chom a rae re a fazioù, dreist-holl war implij an amzer tremenet. Hervezi eo an amzer an hini eo hag he deus manket d'ar skolidi. O fal kentañ a zo bet echuiñ o zestenn kant ger pa vije bet gwelloc'h dezho kemer o amzer da sevel ur gendestenn a-zoare pe da bleustriñ war o frazennoù. Ouzhpenn-se e oa fin ar bloavezh-skol ha ne oa ket mennet ken ar skolidi hervez ar gelenner. Abalamour da se ne oa ket bet priziet al labour kennebeut. D'ar c'houlz-se e oa tremenet ar c'huzulioù-klas dija ha ne oa ket moaien ken lakaat notennoù war ar meziant enlinenn. Ne oa ket posubl kennebeut enrollañ barregezhioù. Tu a vije bet dezhi priziañ hep enrollañ an notenn hag ar barregezhioù avat met n'he deus ket graet. Ar skouer-mañ a ziskouez e ranker heñchañ ar skolidi pa labourer ganto war barregezhioù arzel peogwir int techet da zoujañ ouzh ar mogerioù etre an danvezioù ha neuze ne soñjont ket o-unan implijout ar pezh o deus desket er c'hentelioù all pe er maez deus ar skol memes.

2.2.4 *Skorioù all evit pleustriñ barregezhioù all*

Daoust ma n'haller ket sevel ur roll gant tout ar pezh a c'hell ober ur c'helenner war ar yezhoù e c'heller ouzhpennañ d'ar pezh a zo bet lavaret dija un nebeut raktresoù all, disheñvel o stumm. An arzoù neuziañ a c'heller implijout ivez da lakaat ar skolidi da gizellañ, da

livañ, da gemer fotoioù. An dañs a zo ivez un danvez a c'hellfe bezañ implijet evit liammañ yezh ha sevenadur Breizh.

2.2.4.1 Kanañ e saozneg

Abaoe 2012 e vez arc'hantaouet hag aozet gant kuzul departamant ar Mor-Bihan ur raktres a vesk saozneg ha sonerezh. Bep bloaz e vez kouviet un dek skolaj bennak da gemer perzh. E-kerz ar raktres o do tro ar skolidi da grouiñ ur ganaouenn e saozneg asambles gant ur strollad sonerezh a-vicher ha n'int ket dre ret saoznegerien a-vihanik. Enrollet e vo ar skolidi o kanañ o c'hanaouenn en ur studio gwirion. A-benn ar fin e vo ur sonadeg en ur sal-abadennoù kostez Gwened ma vo ar skolidi hag ar sonerien war al leurenn. E pep skolaj e kaver e-kreiz ar raktres ur c'helenner war ar saozneg hag ur c'helenner war ar sonerezh. Evit kontañ an traoù deus an diabarzh ez eus bet goulennet gant Bruno, kelenner war ar sonerezh ha Valérie, kelennerez war ar saozneg. Pep hini en deus kemeret perzh ur wech da nebeutañ met morse n'o deus graet ar raktres-se asambles. An darvoudoù o deus kontet a zo neuze daou savboent war an hevelep raktres n'o deus ket bevet er memes amzer na gant ar memes skolidi.

Daoust ma vez digemeret arzourien zisheñvel e vez graet tamm pe damm memes mod e pep skolaj e-keñver mont-en-dro ar raktres. Bruno ha Valérie o deus neuze kontet dre vras ar memes kronologiezh daoust ma ne labourent ket er memes skolaj gant ar memes strollad sonerezh. Graet e vez ar raktres gant ur c'hlasad hepken, kentoc'h e trede klas pe e pevare klas gant ma vo ul live a zere e saozneg gant ar skolidi. War an eurvezhioù skol e c'hoarvez an traoù. Peurvuiañ eo ret «amprestañ» eurvezhioù kentel digant kelennerien all ar skolaj evit ma c'hell ar skolidi chom div eurvezh da heul gant o c'helenner war ar sonerezh ha gant an arzourien. Peurvuiañ e vez kroget al labour tro miz C'hwevrer hag enrollet e vez e miz Ebrel. Gallout a ra bezañ eurvezhioù dasparzhet war ar prantad-se pe un devezh gouestlet d'ar raktres met ral eo an doare-mañ d'ober. Kontet e vez war-dro c'hwec'h eurvezh evit skrivañ testenn ar ganaouenn. Deus peder eurvezh e vez ezhomm da sonaozañ an ton. Kontet e vez teir eurvezh da brientañ ar prantad enrollañ er studio hag ar memes tra evit enrollañ da vat ar ganaouenn. Da ouzhpennañ a zo an amzer da brientañ ar sonadeg hag ar sonadeg hec'h-unan.

Valérie he deus kontet dre ar munud an doare ma oa bet labouret war poizioù ar ganaouenn gant he skolidi hag an daouad Dalva. Er strollad e kan Camille W. pa son Marolito. Camille W. a zo saoznegerez a-vihanik ha kanañ a ra e saozneg hepken. Rumm ar strollad a den d’ar blues, d’ar rock, d’ar folk ha d’ar pop kentoc’h. Da gentañ e oa bet skrivet testenn ar ganaouenn. Evit ober kement-se o deus ar skolidi prederiet war an tem a blijfe dezho. Savet o deus ul listenn a demoù. Kentoc’h evit dibab un tem el listenn bet savet o deus divizet sevel ur ganaouenn oc’h implijout an holl demoù-se. Pep pozkan en doa neuze un tem disheñvel. Ur poent kumun a zo bet kavet memes-tra evit liammañ pep poz, hent un den divroet diaes dezhañ termeniñ e identelezh, e reiz, e c’hoantoù. Ar gaozeadenn-se etre ar skolidi hag ar strollad a oa e galleg. Strolladoù a zo bet savet ha pep hini en deus labouret war ur poz disheñvel pa oa ur strollad all c’hoazh hag a laboure war an diskan, pezh a rae ur ganaouenn pemp poz hag un diskan enni. E-pad al lodenn-se deus al labour e sikoure Valérie ar skolidi ma oa ezhomm. Camille W. a rae kement all dre ma oa barrek war ar saozneg. Skoazellet o deus da gavout klotennoù, heñvelsterioù pe da gavout gerioù liammet gant pep a dem. Ret e oa d’ar skolidi bezañ a-du an eil gant egile a-zivout an niver a dreid e pep gwerzenn. Evit al lodenn-se n’en deus ket ar c’helenner war ar sonerezh ur rol resis.

Juste a dream
Thirty Hopes
avec Dalva

Bombs fell on my loving country
Didn't wanna cry, didn't wanna look back
Death stalked me so I escaped,
didn't wanna fight, I had to cling to life, so wanted daddy
Who was I, where was I, I fell lost
Here came the boarder, and I crossed it

CHORUS
If I could
I would travel around the world
If I had friends
I would have fun

I want to see the stars
Not the wars
Thought of a boat
And saw the sea
But it just a dream

My difference was such a burden
I felt I was abandoned
New faces, new school, new country
Their nastiness was steady
They saw me as a monkey
I had a feeling to be in a cell so tiny

CHORUS
New stage of my life, new problems
Words are just sharp as a knife
I'm starting to have symptoms
My body's dying for a «They»
But the others yell no

CHORUS
BRIDGE

I'm working hard for a living,
Every night I pray for a roof
Sometimes I talk to myself to feel heard
I'm looking for a loving gaze, someone who cares
When you hit the bottom,
you wish to see the light!
Today a single smile has changed my life

CHORUS
You make me feel like an angel in paradise
When I'm in the sky, the plane over the clouds
The sunlight on my face, healing my wounds
Now it's like I'm sitting on my problems
With you my soulmate my days are better
You saved me and now I'm happier

TEAR'S SOUNDS #9 2022

Skudenn 11. Ar ganaouenn bet skrivet gant skolidi Valérie, e levrig ar bladenn (Kuzul departamant ar Mor-Bihan, 2022)

Goude o deus labouret ar skolidi war sonerezh an ton. Dalva en deus goulennet ganto ar rumm a blije dezho hag a felle dezho klevout gant o zon. O kendivizout gant ar skolidi eo deuet a-benn ar strollad da ginnig ur sonerezh a blije d'an holl mui-pe-vui. Al lusk a zo bet dibabet a-gevret ivez. Ar gaozeadenn-mañ c'hoazh a oa e galleg ha kaset e oa gant ar c'helenner war ar sonerezh. Ar peurrest deus al labour sonaozañ ha kempenn a zo bet graet gant Dalva diwezhatoc'h. Ar strollad en deus enrollet diouzh e du al lodenn hep mouezhioù.

Ur wech ma oa bet skrivet ar sonerezh hag an destenn o deus ranket ar skolidi deskiñ ar pozioù ha pleustriñ war an doare da ganañ ar ganaouenn. Rannet eo bet ar ganaouenn rak n'halle ket ar c'hlasad en he fezh kanañ a-hed an ton. Er c'hlas o deus graet kement-se gant ar c'helenner war ar sonerezh hag a-wechoù e teue Dalva da welout penaos e yae an traoù ha da reiñ un nebeut alioù. Valérie he deus implijet ar sonerezh evit lakaat ar skolidi da ganañ e-pad he c'hentelioù evit reizhañ an distagadur hag ar pouez-mouezh. Labouret o deus ivez da gompren dre skrid ar pezh a oa bet skrivet gant pep strolladig evit bezañ gouest da c'hoari an destenn.

Tro miz Ebrel eo aet ar skolidi hag an daou gelenner d'ar studio da enrollañ ar ganaouenn da vezañ embannet war ur bladenn asambles gant an tonioù savet er skolajoù all. Enrollet eo bet en Echonova, ur studio a-vicher e Sant-Teve e-kichen Gwened. Bizitet o deus ar skolidi al lec'h ha displeget eo bet dezho gant skipailh teknik ar studio penaos e veze enrollet un ton. Pep lodenn deus ar ganaouenn a zo bet enrollet d'he zro ha mesket eo bet er studio diwezhatoc'h. Ur skoliadez he deus enrollet ul lodenn war ar c'hlavier memes. Er memes tro o deus ar skolidi labouret evit en em lec'hiañ war al leurenn da vare noz ar sonadeg.



Skeudenn 12. Skolajidi trede klas oc'h enrollañ er studio gant Marolito (Echonova, 2021)

Diwezhatoc'h, tro fin miz Mae e oa aet ar skolidi betek ar sal Athéna en Alre (e 2023 e oa bet er sal Le Dôme e Sant-Teve) da dremen an devezh da brientiñ ar sonadeg vras a oa da vezañ diskouezet diouzh noz. Pep skolaj en deus pleustret war e ganaouenn gant an arzourien o deus graet ar raktres ganto. Diouzh noz e oa kouviet o familhoù hag o mignoned d'ar sonadeg. Hervez kont e oa bet brav an nozvezh. Da vare fin ar bloavezh-skol o deus resevet ar skolidi pep a bladenn ma oa o c'hanaouenn bet enrollet er studio.

Bilañs ar raktres a zo pozitivel-kennañ hervez Valérie ha Bruno. An dra gentañ da lavarout a zo moarvat ar blijadur o deus bet o skolidi a-hed ar raktres. Laouen e oant o kejañ hag o labourat gant arzourien a-vicher. Loc'h o deus bet o selaou o c'hanaouenn embannet war ur bladenn ofisiel. Bamet int bet gant al labour er studio. Fromet int bet pa oant war leurenn ur sal sonadeg gwir. Valérie a zispleg skouer ur skoliad lent ne vez ket klevet anezhañ er c'hlas peurvuiañ, diaes lakaat anezhañ da gomz e galleg ha diaesoc'h c'hoazh en ur yezh all. Henezh en deus kemeret perzh penn-da-benn er raktres tamm-ha-tamm, o c'hounid emfiziañs. A-benn ar fin e oa aet da ganañ war al leurenn gant e gamaraded. Biken n'he dije kredet Valérie e vije bet

posubl kement-se. Lod all, ar baotred peurvuiañ, a zo bet kalz aketusoc'h evit ar pezh m'emaint peurvuiañ pa vez lakaet anezho dre strollad. Bruno a zispleg e c'hell bezañ diaes lakaat skolidi trede klas da ganañ, dreist-holl ar baotred. War ur raktres e-giz-se e vezont laouen o kanañ un ton o deus krouet int.

A-fet barregezhioù arzel en deus Bruno savet listenn barregezhioù al Levrig Skol Unik (LSU, Livret scolaire unique e galleg). Pep domani deus ar sich a zo bet labouret e-kerzh ar raktres hervezañ. War an domani kentañ, «al lavar evit soñjal ha kehentiñ» o deus kanet en ur yezh estren (pe ur yezh da zeskiñ) ha kendivizet o deus, pezh a glot gant al lodenn war ar yezhoù hag al lodenn war lavar an arzoù hag ar c'horf. War an eil domani, «doareoù ha binvioù evit deskiñ» e c'heller menegiñ al lodenn diwar-benn ar c'henober raktresoù. War an trede domani, «stummañ an den hag ar c'heodedour», o deus labouret ar skolidi tro-dro d'al lodennoù a-zivout an doare da zisplegañ e soñj ha da zoujañ soñj ar re all ha bezañ engouestlet ha kiriek d'e labour. War an domani pevar tro-dro d'ar «sistemoù naturel hag ar sistemoù teknik» o deus bet tro da implijout ur studio enrollañ. Evit echuiñ emañ an domani pemp ma kaver an «doareoù da skeudenniñ ar bed hag oberoù mab-den» hag ennañ o deus labouret war ar varregezh da ijinañ ha da seveniñ. Ne oa ket bet priziet labour ar skolidi gant Bruno e-pad ar raktres.

E-keñver ar barregezhioù yezh n'eo ket ken splann avat. Valérie a zispleg n'he deus ket prientet en a-raok ar pezh a oa da labourat gant ar skolidi. Hervezi eo deuet ar gentel deus an ezhommoù o doa ar skolidi pa oant o skrivañ o c'hanaouenn. Frouezhus eo bet memes tra war meur a dra. Da gentañ o deus ar skolidi labouret an distagadur p'o deus pleustret war ar c'han. Skrivañ o deus graet ivez pa oa ret dezho ijinañ pep a boz dre strollad. Kompren dre skrid o deus graet p'o deus ranket c'hoari an destenn bet skrivet gant skolidi all ar c'hlasad. Marteze e vije bet tu ouzhpennañ ul labour da gompren dre gomz m'he dije Camille Weale komzet e saozneg e-pad al labour gant ar skolidi, dreist-holl pa gomz hi saozneg a-feson. Ur seurt kentel dre soubidigezh e oa moaien d'ober aze met n'eo ket bet graet marteze peogwir ne gomze ket saozneg ar c'helenner war ar sonerezh. Ne oa ket bet priziet labour ar skolidi gant Valérie e-kerzh ar raktres.

A-fet sevenadur e oa dedennus al labour e saozneg koulz hag e sonerezh pa oa ret d'ar skolidi en em soñjal diwar-benn ar rummoù sonerezh hag ar ster a vez roet d'ur rumm-mañ-rumm er bed saoz-hag-amerikan.

2.2.4.2 Slamañ e brezhoneg

Etre arz ar barzh hag arz ar c'haner emañ ar slam. A-benn ar fin n'eo ket souezhus en dije bet c'hoant Yoann, kelenner war ar brezhoneg ha soner pib-ilin, da labourat war ar slam gant ar c'haner Krismenn.

Ar slam a zo da gentañ tout barzhoniezh hag a vez distaget pe lavaret. Ar ger a oa ganet er bloavezhioù 1980 er Stadoù-Unanet diwar hêrezh barzhed engouestlet ar beat generation. Kenvevañ a ra abaoe e orin gant ar rap. An eil hag egile a denn d'ur sevenadur diouzh kêr hag a glask diskouez ar bed evel m'emañ. Evel ar rap en deus ar slam e reolennoù. Da skouer e vez aozet emgannoù ha krogadoù m'emañ an arvesterien e plas ur juri. En ur mod eo ur c'honkour gwerzaouiñ koulz hag arguzenniñ. Tamm-ha-tamm en deus kavet ar slam e blas en Europa hag e Frañs ha hiziv an deiz ez eus un nebeut slamourien hag a vev diwar o arz. Evel ar rap eo aet ar slam er maez deus e gavell hag aloubet en deus meteier sevenadurel a bep seurt. E spered ar slam emañ ar soñj e c'hell pep hini kemer perzh gant ma 'n defe traoù da gontañ.

Krismenn a zo da gentañ ur c'haner kan-ha-diskan bet desket gantañ ar c'han hag ar yezh gant tud ar vro e Kerne Uhel. Diwezhatoc'h eo deuet dezhañ ar c'hoant d'ober rap, kement-se e brezhoneg. Hiziv eo barrek an den war meur a zanvez. Skrivañ, kanañ, c'hoari an aktour, seniñ binvioù a bep seurt a ra.

Gant e glasad c'hwec'hvet klas en deus Yoann lakaet war-sav e 2018 ur raktres o veskañ sonerezh ha skrivañ. Labour dibenn ar raktres a oa sevel ur slam diwar-benn ar vuhez e kêr hag e enrollañ gant sonerezh a-dreñv. Da gentañ o deus ar skolidi dizoloet piv e oa Krismenn. Er memes tro o deus desket ar pezh eo ur slam. Dre m'eo ar slam ur stumm barzhoneg e oa dav d'ar skolidi kompren penaos e ya en-dro an doareoù da werzaouiñ. Desket o deus neuze ar c'heriaoueg a vez ezhomm deus outañ da zielfennañ ur barzhoneg. Mod-se o deus desket ar skolidi da sevel klotennoù ha da gontañ ar

silabennoù e pep gwerzenn. Er memes tro o deus labourer ar skolidi war sioù ar vuhez e kêr o keñveriañ ar gêr gant ar c'horriganed. Da c'houde o deus ar skolidi graet un taol-esae o skrivañ un destenn gwerzaouet a bevar foz. Er slam eo a-bouez c'hoari an destenn ha neuze eo ret pouezañ mat war ar silabennoù. Ul labour a zo bet graet gant ar skolidi diwar-benn an taol-mouezh e brezhoneg. Ar pal a oa lakaat anezho da gompren war beseurt silabennoù e ranker pouezañ. Ar reolenn a zo bet displeget dezho goude ul labour da gompren dre gomz. Pleustret o deus da c'houde war un nebeut gerioù. An destenn bet skrivet ganto o deus lennet o lakaat an taol-mouezh. Korrig'slam eo titl an destenn o deus savet a-benn ar fin hag ijinañ a ra e vefe ar gêr poblet gant korrganed.

Korrig'slam
Me eo ar c'horrigan lous O skuilhañ loustoni en aer Da lakaat loudour Da vreinañ ar gêr !
Me eo ar poulpiket trouzuz O vleinaén otoioù didalvez Tropuzioù skiltr ar mekanikoù Ar monedone dibaouez
Me eo Yann ar c'horrigan O laerañ toud an arc'hant O lonkañ madoù an dud Ar re vras hag ar re vunud

Skeudenn 13. *Lodenn gentañ ar slam o deus krouet skolidi Yoann (Nedeleg, 2018)*

E-keit-se en deus Yoann sonaozet hag enrollet er gêr un ton da vezañ klevet p'emañ ar skolidi o tistagañ o zestenn. Diwezhatoc'h int bet holl da enrollañ ar slam e studio ar Garenn e Brest. A-hed al labour int bet e darempred gant Krismenn hag a roe alioù d'ar skolidi. O c'helennerz war ar galleg ha diellerez ar skolaj o deus skoazellet anezho ivez.



Skeudenn 14. *Ar skolidi gant Krismenn (Nedeleg, 2018)*

A-drugarez d'ar raktres-se o deus bet tro ar skolidi da labourat barregezhioù a bep seurt. A-fet sevenadur, liammet gant an temoù « an den hag ar vuhez pemdez » hag « an ijin » er c'helc'hiad tri, o deus studiet an doare da vevañ e kêr hag al liamm d'ober gant ar mojennoù hengounel. Sonerezh sevenadur diouzh kêr o deus studiet ivez gant sikour Krismenn, un arzour deus ar vro. An daou dem-se a gaver e referañser ar yezhoù er c'helc'hiad 3 war ar stumm « Identifier quelques grands repères culturels de l'environnement quotidien des élèves du même âge dans les pays ou régions étudiés » ha « Mobiliser ses connaissances culturelles pour décrire ou raconter des personnages réels ou imaginaires ». A-fet yezh e oa bet labouret war an taol-mouezh dreist-holl pa oa se pal ar sekañs. Kompren dre gomz ha dre skrid, skrivañ ha komz a zo bet graet ivez a-hed ar raktres. Barregezhioù arzel a zo bet labouret ivez pa oa bet distaget testenn ar skolidi o kompren ez eus ul liamm etre an taol-mouezh ha lusk ar sonerezh. Domani pevar ar sich o deus pleustret ivez p'o deus dizoloet al lec'h ma vez enrollet sonerezh gant tud a-vicher. Ouzhpenn al labour war ar barregezhioù niverus-se e c'heller soñjal e oa bet kalz a blijadur o labourat e-giz-se en un doare pleustrek gant tud deus an diavaez. Ar slam bet enrollet ganto a ziskouez mat int bet mennet en o labour hag eo deuet brav ganto al labour war an taol-mouezh.

2.2.4.3 Ober c'hoariva e saozneg

